

Immanuelle
8 Rue Notre-Dame
Châteaulin

Diocèse de
Quimper & Léon
28 septembre 2015

Document numérisé en 2015

HISTOR ZANTEL



Loskit ar vugaligou da zont davedon.

44317

HISTOR ZANTEL

DA ZESKI

AR BURZUDOU EN DEUZ GREAT DOUE

VAR ANN DOUAR

EVIT SILVIDIGEZ ANN DUD

SKRIVET


gant ann **Ao. NICOLAS**, hag ann **Ao. LABASQUE**,

Persoun Ploudiern,

Persoun Klohar-Karnoët,

EVIT

BUGALE AR SKOLIOU HA RE AR CHATEKISMOU.



KEMPER

MOULLET E TI A. DE KERANGAL

MOULLER ANN ESKOPTI

1900

Imprimatur :

Quimper, ce 1^{er} Février 1899.

F. CORRIGOU,

Vicaire Capitulaire.

APPROBATION

de Monseigneur l'Évêque de Quimper & de Léon.

Nous donnons Notre approbation la plus complète à l'**HISTOR ZANTEL**, œuvre de deux Prêtres distingués de Notre diocèse, et Nous souhaitons vivement qu'elle se répande dans toutes les écoles, catéchismes et familles, où elle est appelée à intéresser et à faire le plus grand bien.

Quimper, le 4 Juillet 1900.



FRANÇOIS-VIRGILE,

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

DA LENNERIEN AL LEVRIK-MA

Enn amzer m'edo Jezuz o prezek he lezenn, kalz kerent a zeue d'he gaout gant ho bugaligou, evit ma'c'h astenje he zourn var ho fenn d'ho benniga.

Ann Ebestel ne gavent ket oa deread lezel ho mestr da goll he amzer gant tudigou ken dister; gourdrourz a reant ar mammou, ha muia ma c'hellent e virent oc'h ar vugale da dostaat ouz Jezuz.

Ann dra-ze ne blijaz ket da Jezuz : « Ne bellaet ket ar vugale, emezhan ; loskit-hi da zont davedon. »

Diskuez a reaz neuze, penaoz e ma digemeret ar vugale ganthan ; lavaret a ra d'ezho tostaat, hag ho c'hemer etre he zivrec'h evit poket d'ezho hag ho benniga araok ma'z eont kuit.

Goaz a ze d'ann neb a guzo ann Aotrou Doue ouz eur c'hrouadur ; goaz a ze d'ann neb a zistroi eur c'hrouadur diouz ann Aotrou Doue ; gvel e ve d'ezhan beza taolet er mor gant eur mean milin staget ouz he c'houzoug.

Mes guel a ze ive d'ann hini en devezo diskuezet ann Aotrou Doue d'ar vugale ; rak ne zeuz ket kaeroc'h tra da ziskuez d'ezho, ha ne zeuz ket brasoc'h plijadur d'ober da Zoue, hervez ar c'homsouma : Declaratio sermonum tuorum illuminat et intellectum dat parvulis (Ps. cxviii) : Pa zisklerier ho komsou, va Doue, e rer sklerijenn d'ann eneou, hag e tigoror spered ar re vihan.

Al levrik-ma zo skrivet evit esaat d'ar vugale anaout Jezus-Krist, ha deski d'ezho eo dous her c'haret, mad her servicha.

Klasket a zo hen ober freaz ha berr evitho : Da fin peb kentel vihan e z'euz goulennou, a reio d'ezho renka guelloc'h enn ho fenn ar pezh o devezo desket. Plijet gant hor Zalver Jezus-Krist ha gant he vamm zantel benniga al levrik-ma, hag ar vugale hen lenno !

HISTOR ZANTEL

ANN TESTAMANT KOZ

Ar Zalver, a dlie dont, prometet ha gortozet.

ANN AOTROU-DOUE,
DA C'HOUE M'EN DEUZ KROUET ANN DEN
EVIT HE HENORI VAR ANN DOUAR.

I

Krouedigez ar bed.

Doue en deuz krouet ann env hag ann douar e c'huec'h devez. — Ar seizved devez ec'h ehanaz. — Lod euz ann Eled a zizentaz ouz Doue hag a oue taolet enn ifern, gant sant Mikeal.

Doue a zo Doue a holl-viskoaz, ha ne oa netra nemethan. Ann Aotrou Doue en deuz krouet kement tra zo, ar pezh a velomp hag ar pezh ne velomp ket. Mez er pezh en devoa krouet n'oa urz ebet; ann traou a ioa mesk ha mesk. C'huec'h devez en deuz lakeat goude da gempenn ar bed. Lavaret a rea eur ger hebken, ha ker buhan peb tra a iea d'he blas.

Enn deiz kenta, Doue a reaz ar sklerijenn. Enn eil devez, Doue a reaz ann oabl zo azioc'h hor penn. Enn trede devez, e tispartiaz ann douar dioc'h ar mor ; hag ann douar, deuet da veza seac'h, a zougaz guez ha louzeier a bep seurt. Er pevare devez Doue a reaz ann heol, al loar hag ar stered. Er pempved devez, Doue a roaz



Krouedigez ar bed.

buez d'ar pesked enn dour ha d'al laboused enn oabl. Er c'huec'hved devez, Doue a roaz buez d'al loened var ann douar. D'ar c'huec'hved devez c'hoaz, goude beza kempennet pib tra, ann Aotrou Doue a lavaraz : « Greomp brema ann den, ha greomp anezhan henvel ouzomp hon-unan. » Doue a gemeraz neuze eunn tamm douar ; hag a reaz ganthan korf Adam, ann den kenta ; goude e c'huezaz var ar c'horf-ze evit rei buez

d'ezhan ; hag ann ene a lakeaz ennhan ne dle biken mervel.

Varlerc'h ann dra-ze, epad ma oa kousket Adam, Doue a gemeraz unan euz he gostou, hag a reaz ganthi korf eur vaouez, hor mamm genta Eva, hag a roaz d'ezhi eunn ene henvel ouz hini Adam.

Ar seizved devez, Doue a ebanaz, ha setu perak e c'houlenn ma paouezo ive ann den da labourat enn deiz-ze. Hennez a dle beza miret evit trugarekaat hag adori ann Hini en deuz krouet pib tra, hag a zalc'h ato da c'hoularn ar pez en deuz krouet.

Araok ar bed-ma, Doue en doa krouet ann Eled. Unan anezho, Lucifer, a zizentaz outhan hag a dennaz var he lerc'h eunn niver braz a Eled ; mez al loden vrasa a zalc'haz enn tu gant ann Aotrou Doue. Eunn taol brezel a zavaz enn env ; ann arc'heal sant Mikeal, e penn ann Eled mad, a skubaz ann Eled dizent e meaz euz ar baradoz hag hñ zaolaz enn ifern. Azalek ho fec'bed int troet e *diaoulou*, hag ho micher eo kas ann dud gantho d'ann ifern, muia ma c'hellont. Micher ann Eled mad eo difen ann den hag ober d'ezhan servicha Doue var ann douar, evit mont d'Her meuli d'he varadoz.

Goulennou.

Penaoz en deuz ann Aotrou Doue krouet ar bed ? — Petra eo kroui ? — Pet devez en deuz lakeat d'ober ar bed ? — Petra en deuz great e pib deiz ? — Penaoz en deuz great ann den kenta hag ar vaouez kenta ? — Perak e komz ann Aotrou Doue evel pa ve ouspenn unan ? — Petra eo ann den ? — Da be leac'h e za ar c'horf hag ann ene pa vezont dispartiet ? — Petra reaz Doue er seizved devez ? — Petra fell d'ezhan a rafemp-ni er seizved devez, bep sizun ? — Petra eo ann Eled ? — Penaoz o deuz en em gollet darn anezho ? — Piou a ioa e

penn ann Eled fall, ha piou e penn ann Eled mad ? — Pe hano a reer brema euz ann Eled dize ? — E pe leac'h e chomont-hi ha pe vicher o deuz ? — E petra eo dishenvel ann den diouz al loened ha diouz ann Eled ? Ann den en deuz eunn ene evit anaout, karet ha servicha Doue, hag al loened n'o deuz ket. Ann den en deuz eur c'horf, hag ann Eled n'o deuz ket. Ann Eled n'o deuz nemed eunn ene, hag al loened nemed eur c'horf. Ann den zo etrezho.

II

Adam hag Eva. — Ar pec'hed kenta.

Adam hag Eva a oue krouet enn eur stad a zantelez. Nag ar maro, na drouk all ebet ne c'helle stourm outho ; hag al leac'h ma ouent lakeat a ioa ken kaer, ken dudiuz, ma oue hanvet *Baradoz ann douar*. Ann dachen-ze a zouge frouez evit ho maga, ha n'oa difennet outho nemet eur frouezen hebken, hini *guezenn anaoudegez ann drouk hag ar mad*. « Ma tebrit euz ar frouezen-ze, eme ann Aotrou Doue, c'hui a varvo. » Ann dra-ma a ioa evit guelet hag hi a vije sentuz.

Mez, ann diaoul en doa kaz outho abalamour d'ho euruzdet ha d'ho zantelez. Eunn deiz m'edo Eva etal guezen ar frouez difennet, hen a dostaaz outhi dindan henveledigez eunn aer. « Perak, emezhan, ne zebrit ket frouez ar vezen-ma ? » — « Abalamour ma tebromp euz ar frouezen-ze ni a varvo. » — « N'eo ket guir, eme ann diaoul. Ma tebrit ar frouezen-ze c'hui a vezo ghenvel ouz Doue, hag a anavezo koulz hag hen, ar mad hag ann drouk. » Touellet dre ar c'homsou-ze, Eva a gemer eur frouezen, ha goude beza hi tanveat e

ro eunn tamm d'he fried ; hag Adam a zebr ive gant aoun da zisplijout d'ezhi.

Raktal, oc'h anaout emaint enn noaz, ez eont ho daou da guzat, spountet ha mezuz. Ker buhan ec'h en em gav ann Aotrou Doue dirazho : « Perak, emezhan, oc'h eat da guzat ? » — « Mez on doa, rak m'emaomp enn noaz, » eme Adam. — « Penaoz oc'h euz guezet e maoc'h enn noaz, nemet dre m'o p'euz debret ar frouez difennet ? »

Adam a damallaz Eva ; hag houma a daolaz ar beac'h var ann aer. Neuze Doue a lavaraz d'ann aer : « Te a vezo milliget e mesk ann holl loened ; te a ruzo da gof var ann douar ; hag eur vaouez a flastro da benn dindan he zroad. » Dre ar c'homsou-ma e roe da anaout ar Verc'hez Vari a dlle diskar galloud ann drouk-spered, o lakaat er bed-ma, Jezuz Hor Zalver. Adam hag Eva a oue neuze kaset e meaz euz baradoz ann douar, hag hiviziken e teuz varnezh ar poaniou a gorf hag a spered.

Goulennou.

E pe leac'h oue lakeat Adam hag Eva ? — Petra a zifennaz Doue outho ? — A betra oant gourdrout ? — Penaoz en em gemeraz ann diaoul ? — Petra c'hoarvezaz goude ? — Deuet eo ar Zalver prometet ? — Piou a oue mamm d'ezhan ?

III

Caïn hag Abel.

Adam hag Eva o devoue daou vab, Caïn hag Abel. Ar c'henta oa labourer douar, hag ann eil a zave loened. Ho daou e kinnigent prof da Zoue peb hini euz he zanvez. Mez, evit doare, Caïn ne

roe ket a galoun vad, e leac'h Abel a ginnige ar re gaera hag ar re genta euz he loened; hag ann Aotrou Doue ho digemeraz ha ne zellaz ket ouz prof Caïn. Hema dre'n abek-ze a gemeraz kasouni ouz he vreur, hag eunn deiz e lavaraz d'ezhan : « Deomp d'ober eur bale var ar meaz. » — « Deomp, » eme Abel, heb sonjal e drouk ebet. Mez, kentre ma ouent enn eul leac'h distro, Caïn en em daolaz var he vreur, hag her lazaz.



Caïn a laz he vreur Abel.

Evel ma teue d'ar gear, eur vouez euz ann env a c'houlennaz ouz ar muntre. « Caïn, e pe leac'h ema da vreur Abel? » — « Daoust ha me a oar? emezhan : n'eo ket d'inn me dioual va breur! » — « Goad da vreur, a lavaraz ann Aotrou Doue, a zav varzu ennon, eneb d'id, rak-ze te a vezo milliget. » Ann torfetour a guezaz e dizesper, hag

a dremenaz he vuez o redek heb paouez, tu-ma, tu-hont; ha var he dal, merk ann den milliget.

Doue a roaz da Adam eur mab all, hanvet Seth. Abel, lazet gant he vreur, zo kenta skeuden Hor Zalver Jezuz lakeat ive d'ar maro gant ar Iuzevien, diaveaz kear Jerusalem.

Goulennou.

Pe hano o doa bugale Adam hag Eva? — Pe zoare labour a rea peb hini anezho? — Perak e kemeraz Caïn kaz ouz he vreur? — Petra a ziguezaz goude maro Abel? — Pe hano oa ar mab all roet da Adam e leac'h Abel? — Gant piou en deuz hema eunn henvedigez?

IV

Noe hag he vugale. — Ann deluj.

Ann dud o veza kresket kalz var ann douar, eur rumm anezho, bugale Seth, a heulie lezenn Doue; mez ar rumm all, bugale Caïn, milliget holl evel ho zad, a oue tud dizuj. Divezatoc'h e oue dimezious etre ann daou rumm, hag oc'h en em zarempred ec'h en em golchont. A zivar neuze ar boll holl a renaz eur vuez direol; ha Doue a reaz he zonj da veuzi ar bed abez.

Eunn den hebken, Noe, a zalc'h e mad d'al lezenn. Doue a gemennaz d'ezhan ober eunn Arc'h pe eul lestr braz. « C'hui a en em denno enn Arc'h-ze gant ho tud, hag a gemero ganeoc'h loened, eur c'houblad euz peb seurt. »

Kant vloaz e labouraz Noe var ann Arc'h pe al lestr-ze heb selaou ar goaperien a zeue var he dro. Kentre ma oue peurc'hreat, ar glao a goezaz

a hen heb paouez epad daou ugent devez ha daou ugent nosvez. Kaer o devoa ann dud tec'het, ann dour a bigne atao; sevel a reaz dreist ann huella meneziou, ha beuzet e oue kement tra a ioa var ann douar, nemed Noe hag ar re a ioa ganthan enn Arc'h.



Ann deluj.

Goude kant hanter kant devez, Doue a lakeaz ann avel da c'hfeza, hag ann dour a ziskennaz a nebeudou bemdez. Abenn seiz miz, ann Arc'h a stokaz ouz kern eur mene. Evit gouzout hag e oa dizolo ann douar, Noe a zigoraz eur prenestr hag a laoskaz eur vrân er meaz; hag ar vrân ne zeuaz ket enn dro. Seiz devez goude e laoskaz eur goulm, hag houma a zistroaz dioc'h ann abardaez, rak n'e devoa kavet plas ebet da zisken. Abenn seiz devez all, Noe a laka adarre ar goulm er

meaz, hag ar vech-mâ hi a zigas d'ezhan, enn he bek, eur bod koad olivez. Neuze ec'h anavezaz oa dizec'het ann douar, hag abenn eunn nebeut amzer e-teuaz he unan er meaz euz ann Arc'h gant he dud hag ann holl loened.

Kenta a reaz Noe, raktal ma oue douaret, oa sevel eunn aoter evit trugarekaat Doue; hag epad ar zakrifis, goarek-ar-glao⁷ a zispakaz enn oabl ha Doue a gomsaz enn doare-ma ouz he zervicher : « Eunn emgleo zo etrezoc'h ha me; hiviziken ne vezo mui deluj ebet; pa vezo goloet ann amzer, goarek-ar-glao oc'h en em zispaka enn oabl a zigaso sonj d'inn euz va ger, roet d'ehoc'h ha d'ho lignez. » Ne oue espernet nemed Noe hag ar re a ioa ganthan enn Arc'h. Evelse ive ne c'heller beza salvet nemed enn Iliz savet gant Jezus-Krist.

Chap. 1
Goulennou.

Perak e teuaz ann deluj ? — Piou a oa chomet didamal ? — Petra a reaz Noe ? — Petra ziguevaz goude ? — Penaoz e ouezaz Noe oa seac'h ann douar ? — Petra a reaz o tont euz ann Arc'h ? — Ouz piou eo henvel ?

V

Bugale Noe. — Tour Babel.

Noe en doa tri mab : Sem, Cham^K ha Japhet. Labourer douar oa, hag e plantaz eur vinien. Evel ne anaveze ket c'hoaz nerz ar guin, eunn devez ec'h evaz eur bannik re, ha Cham o veza her c'ha-
vet kousket enn eur stad dizoare, a c'hoarvaz divar he goust hag a redaz da lavaret d'he vreudeur. Mez ar re-ma a gemeraz eur vantell da

c'holo ho zad. Pa zihunaz Noe, ha pa glevaz petra oa c'hoarvezet, e lavaraz : « Milliget ra vezo Cham hag he vugale ! Benniget ra vezo Sem ha Japhet. Cham hag he lignez a vezo servicherien d'ezho. »

Goude Noe, ann dud a greskaz kement ma ne c'hellent mui chom asamblez. Mez abarz disparitia, hi a zonjaz sevel eunn tour huel aoualc'h evit tizout betek ann env. « Ann tour-ze, emezho, a gaso ar brud ac'hanomp a bell, ha n'or bezo leac'h ebet hiviziken da gaout aoun rak ann dour beuz. » Mez Doue a ra goab euz mennoziou ann dud, hag epad ma oa ar fougaserien-ze guella gant ho labour, e lakeaz roestl enn ho c'homsou, ken na c'hellent mui en em gonpren. Red oue d'ezho mont peb hini enn he du, heb echui ann tour, a oue dr'enn abek-ze hanvet *tour Babel*, da c'houzout eo roestl ha mez.

Da genta, ann dud a veve pell braz. Mathusalem a iezaz bete nao c'hant nao-ha-tri-ugent vloaz. Azalek ann deluj oue berreat kalz ho buez.

Goulennoù.

Pe hano oa bugale Noe ? — Petra 'ziguezaz ganthan, ha petra a reaz he vugale ? — Petra a reaz Noe pa oue dihunet ? — Petra c'hoanteaz bugale Noe araok en em zispartia ? — Penaoz ec'h ehanaz al labour ?

VI

Ann den santel Job.

Var dro ann amzer-ze, e z'oa enn Arabii eunn den santel, hanvet Job. Seiz mab en devoa, ha teir merc'h, eunn niver braz a zervicherien, ha kalz

danvez : Seiz mil penn-danvad, pemp kant koublad ejennet, heb komz euz al loened-all... Yec'het, eürusdet, madou, bugale savet mad, ne vanke netra d'ezhan, nemed ar boan hag ann dienez. Pinvidik oa, mez santeloc'h oa c'hoaz.


Eunn dervez Doue a velaz Satan hag a lavaraz d'ezhan : « Euz a beleac'h e teuez ? » — « Bet ounn oc'h ober eunn dro var ann douar ! » a respontaz. « Mad ! Guelet e peuz va zervicher Job ? Setu aze eunn den ! N'en deuz ket he bar var ann douar. » — « N'eo ket souezuz e ve Job mad enn ho kever, a respontaz Satan, rak n'o peuz great nemed vad dezhan. Mez lammit diganthen ar pezh en deuz, ha c'hui velo. » — « Mad ! me ro galloud d'id da ober dezhan ar pezh a giri, gant ne douchi ket outhan. »

Ha setu enn eunn taol-kount, d'ann ampoent ma c'hede Job ann nebeuta, e teujer da lavaret d'ezhan oa bet laeret pe lazet he loened. Prest goude e teu eunn all hag a lavar eo kollet ive ann denved. Er-fin eur c'helou goassoc'h c'hoaz a zo digasset : Flastret eo bet he vugale dindan eunn ti kouezet varnezh.

En eur glevet kement-all, Job a lavaraz hebken : « Doue en devoa ho roet d'inn, Doue en deuz ho zennet diganen : Ra vezo benniget hano Doue ! »

Neuze Doue a lavaraz da Zatan : « Mad ! Guelet e, peuz va zervicher Job ! N'en deuz ket nebeutoc'h a garantez em c'hever, evithan da veza kollet ar pezh en devoa. » — « Guir eo, a respontaz Satan ; mez n'o peuz nemed skei Job enn he gorf, ha c'hui velo ma n'en em glemmo ket. » — « Krog ennhan, me ro kounje d'id c'hoaz, a lavar Doue, te c'hell ober d'ezhan ar pezh a giri, nemed ne lammi ket he vuez diganthen. »

Satan a daolaz neuze var Job eür c'hlenvet euzuz; hag he gorf, euz an treid betek ar penn, n'oa nemed breinadurez : Ar paour-keaz den a ioa astennet var eur bern-teil, hag oue red d'ezhan rinsa gant eunn tamm pod-pri torret al lin-brein a rede euz he c'houliou.



Ann den santel Job var ann teil.

Euz ar pezh en devoa Job guezhall, ann diaoul n'en devoa lezet ganthan nemed he vaouez, hag houma a rebeche dezhan heb ehana da veza servichet Doue enn aner, ne glasse, koulz lavaret, nemed ann tu d'hen lakat da goll pasianted, mez Job a reaz d'ezhi tevel : « Ma kemeromp, emezhan, ar madou a ro Doue d'comp, perak ne gemerfemp ket ive ar poaniou a deu d'comp euz he berz ? » Evelse Job n'en em glemmaz tamm ebet euz ann Aotrou-Doue.

Job ne gave mui ken peoc'h nemed enn he goustianz. Mez mignounet, o veza deuet d'he velet, a c'hoanteaz tenna diganhan ar peoc'h-ze zoken. Eleac'h klask skanvât he boaniou, e lavarent d'ezhan e tie beza eun torfetour braz, rak, emezho, Doue ne garfe biken kastiza unan a ve didamall. Job a respontaz n'en devoa great na drouk na gaou da zen : « Hag ouspenn, emezhan, me c'hoar e z'euz eur Zalver a dle va digoll : D'ann deiz diveza e savinn adarre a varo da veo, hag er guelinn gant va daoulagad va-unan. Dounn eo ar gredenn-ze em c'halon. » Ann den santel Job n'oue ket bet red d'ezhan gortoz ann deiz diveza euz ar bed : Kaout a reaz, zoken araok mervel, ann digoll euz he boaniou. Doue a roaz d'ezhan bugale all, hag ann hanter muioc'h a vadou eget n'en devoa kollet. Seiz-ugent vloaz e vevaz c'hoaz goude, ha ne oue den ebet eürussoc'h evithan var ann douar. Mez, siouaz ! ar re just evel Job a deue da veza rouez, hag ar zonz euz eur Zalver a iea atao var vihanât etouez ann dud.

Goulennoù.

Petra oa ann den santel Job ? — Penaoz e roaz Doue kounje da Zatan da ober poan da Job ? — Petra en devoa Doue lezet, ha difennet da ober dezhan ar vec'h kenta ? — Pere eo ar poaniou kenta a gouezaz varnezhan ? — Petra en devoa Doue lezet, ha difennet da ober da Job ann eil guez'h ? — Petra en devoa miret ouz Job da goll kouraj e kreiz he boaniou ? — Petra erruaz gant ann den santel Job varlec'h he boaniou ?

ANN AOTROU-DOUE,
DA C'HOUE M'EN DEUZ CHOAZET EUR BOBL
EVIT MIRET HE LEZENN VAR ANN DOUAR.

VII

**Abraham galvet gant Doue.
Sodom ha Gomor.**

O veza eat dre bevar c'horn ar bed, ann dud, e leac'h servicha ar guir Doue, en em roaz da adori ann traou krouet, ann eol, al loar, ar stered ha betek ann anevaled mud. Doue a falvezaz d'ezhan koulz goude kaout eur woen dud aketuz d'he lezenn ha goest d'he derc'hel bete ma teuje ar Messi. Abraham, eunn den mad ha leal, deuet ive euz lignez Sem, a oue kemeret evit beza penn ha tad da bobl Doue. O chom edo e bro Chaldepalevaz eur vouez o lavaret d'ezhan : « Dilezit ho pro hag ho kerent, ha deuit da jom el leac'h a ziskuezin d'ehoc'h. »

Abraham a zentaz ker buhan hag a zeuaz da vro Chanaan, gant Sara, he bried, ha Loth, eunn niz d'ezhan ? Neuze Doue a lavaraz : « Me roi ar bek douar-ma d'ehoc'h ha d'ho pugale, hi a vezo stank evel stered ann env, pe ar greunennou treaz var ribl ar mor. Unan anezho a zigaso bennoz d'ann holl dud. » Evel merk euz ann emgleo a oa etre Doue hag Abraham, kement paotr a deue da

c'henel euz he woenn a dlle beza sirkonsiset abenn eiz devez. Eur vech e savaz beac'h etre servicherien Abraham ha re he niz ; hag ann den santel a lavaraz raktal : « Ann douar zo braz aleiz, hag arabat e ve ienien etrezomp. It enn eunn tu ha me a ielo enn tu all. » Loth a ieaz neuze da chom e kostez Sodom ha Gomor, a ioa douarou kaer enn dro d'ezho. Mez ar c'hearieu-ze a ioa goall droet ouz ar pec'hed, ha Doue a reaz he zonz d'ho dismantri dre ann tân. Koulz goude evel ma oa Loth eunn den mad, oue kaset daou eal da lavaret d'ezhan tec'het, araok ma vije skoet kear. Raktal ma oue e meaz gant he dud, e kouezaz tân ann env da zevi ar c'hearieu brein-ze. Daoust m'oa difennet gant Doue, greg Loth a zistroaz da zellet ar pezh a c'hoarveze, hag a oue ker buhan troet he c'horf enn eur bern c'hoalen.

Goulennou.

Da betra en em daolaz ann dud goude ma ouent dispartiet ? — Petra reaz neuze ann Aotrou Doue ? — Piou a choazaz da veza e penn he bobl ? — Diouz petra ec'h anavezet servicherien Doue ? — Pe hano oa niz Abraham ? — E pe leac'h edo o chom ? — Piou a reaz d'ezhan tec'het euz Sodom ? — Ha petra a ziguezaz gant he c'hreg ?

VIII

Sakrifiz Abraham.

Abraham ha Sara oa oaget braz, ha n'oa c'hoaz ganet krouadur ebet d'ezho. Goulz koude Doue en doa lavaret d'ezho e vijent tad ha mamm da eur bobl tud. O veza gortozet pell aoualc'h, e teuzaz

d'ezho eur mab a oue hanvet Isaac. Mez, eunn devez ann Aotrou Doue, evit gueleit peger kre oa ar feiz e kaloun Abraham, a lavaraz d'ezhan : « Kemerit ho mab Isaac da ginnik d'inn var eur menez a ziskuezin d'ehoc'h. » Raktal, petra ben-nak n'en devoa nemed ar bugel-ze, Abraham a zentaz ouz Doue, hag edo dija savet he zourn da



Sakrifiz Abraham.

skei, pa glevaz eur vouez euz ann env : « Na rit ket a zrouk d'ar c'hrouadur ; aoualc'h eo ; rak gouzout a ran ez oc'h sentuz. » Isaac, o pignat ouz ar menez, a zouge koad ar sakrifiz ; hag evel-se oa henvel ouz hor Zalver a zougaz var menez Kalvar ar groaz, m'oue lakeat varnezhi d'ar maro. Eur maout, en em gavaz stag var boez he gerniel ouz eur bod spern, a oue lazet e leac'h Isaac.

Abraham abalamour d'he zentidigez a oue galvet tad ann dud a feiz.

Goulennou.

Pe hano oa mab Abraham, ha petra a reaz ann tad ? — Petra a c'houlenne ar bugel, ha petra c'hoarvezaz var ar menez ? — Ouz piou oa henvel Isaac ?

IX

Esau ha Jacob.

Isaac a zimezas d'eur vaouez hanvet Rebecca, ha Doue a roaz d'ezho daou vab, var eunn dro, Esau ha Jacob. Esau a oa ganet da genta ; mez, eunn devez e verzaz d'he vreur, evit eur pladad piz munut, he zroajou a vab kosa.

Var fin he vuez, Isaac eat dall a lavaraz da Esau : « Kea da chaseal ha gra d'inn eur pred evel ma c'houzout e karan, ma roin did va bennoz araok mervel. » O klevet ze, ar vamm a lakeaz Jacob da laza diou c'havrik iouank, a reaz gantho eur pred a blije d'he fried, ha goude beza guisket da Jacob dillad Esau ha goloet gant kroc'hen al loened he zaouarn hag he c'houzouk, her c'hasaz da lakaat dirak he dad ar boued a c'houlenne. Koulz goude ar mab en doa aoun na vije anavezet ha na deuje varnezhan malloz e leac'h bennoz. Mez, he vamm a lavaraz : « Lezit ann dra-ze em c'hount-me. » Evit guir Isaac ouz he glevet a zonje : ar vouez zo mouez Jacob. « Tostait ama, emezhan, ma c'houezin ha c'hui eo Esau va mab kosa. » Goude beza hen dornatead, n'en devoe difi-

zianz ebet mui; dibri a reaz he bred a galoun vad, ha raktal goude, e roaz ar bennoñ he lakea da vab kosa, hag a ziskueze eo euz he lignez e tiskenje ar Messi.

Esau a ziguezaz neuze, hag a iez drouk braz ennhan o klevet petra oa diguezet : ha Rebecca, gant aoun na raje eur gual daol bennak d'he vreur, a gasaz hema da jom da di he eontr Laban. O veza enn hent, Jacob en em roaz da gousket, ha dre huvre, e velaz eur skeul a ioa eur penn anezhi var ann douar hag ar penn all a dize ann env. Dreizhi ann Elez a bigne hag a ziskenne heb paouez. E penn-huela ar skeul ann Aotrou Doue a vennige he zervicher. O tihuna, Jacob a c'halvaz al leac'h *Bethel* da c'houzout eo : *ti ann Aotrou Doue pe dor ar baradoz*. Digemeret mad gant Laban, e chomaz ganthan ugent vloaz, hag e timezaz da genta d'he giniterv Lia, ha goude d'he giniterv all, hanvet Rachel.

Goulennou.


Pe hano oa daou vab Isaac, ha pehini oa ar c'henta ganet ? — Penaoz e kollaz Esau he zroajou a vab kosa ? — Pe zoare en em gemeraz Rebecca evit ober d'ann tad benniga Jacob ? — Pe leac'h e tec'haz dioc'h koler Esau ? — Petra reaz enn hent hag e ti Laban ?

X

Joseph guerzet gant he vreudeur.

Jacob en devoue daouzek mab : Ruben, Simeon, Levi, Juda, Isakar, Dan, Nephtali, Gad, Azer, hag erfin, Joseph ha Benjamin, bugale da Rachel. Ann tad a garie Joseph dreist ar re all. Abalamour da-

ze he vreudeur n'her gouzanvet ket. Penn kaoz c'hoaz euz ho c'hasouni oa eunn huvre a ziskueze e vije mestr varnezho, eunn deiz. Kaset da c'houzout euz ho c'helou epad ma tiouallent ho loened pell diouz ar gear, ouz he velet o tostaat, hi 'reaz ho zonz d'he laza. Mez, var lavar Ruben, e lezont he vuez gant ho breur hag her guerzont da varc'hadourien o vont d'ann Egipt. Goude e soubont he zillad e goad eul loen, ha Jacob oc'h anaout sae Joseph, a lavaraz raktal : « Eul loen gouez en deuz lounket va mab. »



Joseph guerzet gant he vreudeur.

Putiphar, eunn den pinvidik, a brenaz Joseph digant ar varc'hadourien, hag heb dale e fiziaz ennhan he holl diegez. Greg Putiphar a c'hoanteaz lakaat Joseph da bec'hi, hag evel ne asantaz ket,

hen diskuillaz d'he fried ; hag' ann den iaouank a oue taolet er prizoun. Eno en em gavaz gant daou zervicher d'ar Roue o devoe peb a huvre, eunn nosvez. « Me, a lavaraz ann diskarger guin, a zonje oa ganen tri bodat rezin fresk, hag ho goasken e gueren ar Roue. » — « Ann dra-ze a verk, eme Joseph, e viot lakeat adarre enn ho karg abenn tri devez. » — « Evidon-me, a lavaraz ar fourner, a ioa teir baner var va fenn, mez, laboused ann env a zeuaz da zibri kement a oa ennh. » — « Kement-ze a ziskuez, eme Joseph, e rei ar Roue trouc'ha ho penn divar ho kouzouk, goude tri devez, hag al labouset a zidammo ho korf. » Ann traou-ze a ziguezaz guir hed a hed.

Nebent amzer goude, ar Roue, he unan, en devoe eunn huvre ha nikun euz he zivinerien ne c'huezaz petra oa. Da genta e velaz seiz beoc'h lard o peuri var ribl ar ster ; mez seiz beoc'h treud a zeuaz d'ho dibri. Goude e velaz seiz penn ed leun var eur goloen ; mez, seiz penn goullo ho lonkaz. Dont a reaz neuze sonj d'ann diskarger guin euz ann diviner en doa gueleter er prizoun, hag oue kemennet da Joseph dont dirak ar Roue. Ne oue ket pell o tisplega d'ezhan he huvre : « Ar seiz beoc'h lard hag' ar seiz penn leun, emezhan, a verk seiz blavez a eost kaer ha pinvidik ; mez, ar seiz beoc'h treud hag' ar seiz penn goullo a verk seiz blavez a eost fall a zeui var lerc'h ; kargit eta eunn den gouziek da zevel grignoliou dre ar vro ha da zastum ed epad ar bloaveziou pinvidik, abenn ar bloaveziou kernez. » — « Pa anavezit ker brao ann traou kuzet, piou guelloc'h evidoc'h a rafe al labour-ze ? » a respontaz Pharaon. Hag e lakeaz raktal Joseph da c'hoularn ar vro.

Goulennou.


Ped mab en devoe Jacob ? — Perak oa kaseat Joseph gant ar re all ? — Petra a rejont d'ezhan ha penaoz e kuzent ho zorfet ? — Da biou oue guerzet Joseph, ha perak oue taolet er prizoun ? — Gant piou ec'h en em gavaz eno, ha petra a lavaraz da zervicherien Pharaon ? — Petra oa huvre ar Roue, ha piou a gargaz da zastum ed abenn ar blaveziou kernez ?

XI

Joseph anavezet gant he vreudeur.

Pa deuaz ar blaveziou eost fall, n'eo ket enn Ejipt hebken e oue kernez, mez, bro Chanaan, e leac'h m'edo Jacob o chomm, e devoe ive dienez. Bugale Jacob a ieaz eta da brena ed d'ann Ejipt. Joseph ho anavezaz raktal, mez, ne oue ket anavezet gantho ; hag e reaz eur goulenn bennak outho var digarez gouzout hano ho zad hag a be vro oant. « Ni 'zo euz bro Chanaan, emezho, dont a reomp ama da brena ed, daouzek breur oamp, ar iaouanka a zo chomet er gear gant hon tad, ann hini all, siouaz ! a zo maro. » — « Me a ouezo, eme Joseph, ha c'hui a lavar guir. Unan ac'hanooc'h a jomo ama e goestl, bete ma tigasoc'h ho preur iaouank. » Simeon a jomaz enn Ejipt, ha Jacob a oue rannet he galoun pa glevaz e c'houlennet ive Benjamin. Koulz goude, evel ma kreske bepred ann dienez er vro, oue red d'ezhan kas adarre he baotred d'ann Ejipt, ha Benjamin gant-ho. Pa ziguezchont evit ann eil tro, Joseph a c'houlennaz kelou euz ho zad, a gomsaz outho gant madelez hag ho fedaz da leina ouz he daol.

Goude e kemennaz rei ed dezho, hag ec'hiz ar vech kenta, lakaat e peb sac'h ann arc'hant a oa deuet gantho, ha kuzet zoken e sac'h Benjamin ann tas arc'hant a vije ganthan oc'h eva ouz taol. Epad ma tistroe ar baotred d'ar gear ken dinec'h ha tra, setu eur mevel o redek var ho lerc'h. « Perak, emezhan, oc'h euz laeret tas arc'hant va



Joseph anavezet gant he vreudeur.

mestr ? » — « Ni n'omp ket laeron, eme indhi, klasket, hag ann hini a vo kavet ann tas ganthan c'hui a rei anezhan ar peb a garfet. » O furcha ann holl sier oue kavet ann tas arc'hant e sac'h Benjamin. Ann dra-ze a oue evel eunn taol kurun evitho ; ha Juda a lavaraz raktal : « Ma'z comp d'ar gear heb Benjamin, va zad a varvo sur aoualc'h ; lezit-hen eta da vont gant he vreudeur ;

me jomo enn he leac'h ; grit ouzin ho polontez. » Mez, Joseph, o tiroll da lenva a anzavaz outho : « Me eo Joseph oc'h euz guerzet, hag a zo lakeat da vestr en Ejipt, evit ho prasa mad. Roit ar c'he-lou-ze d'am zad, ha digasit hen ama buhana ma e'hellot gant holl dud he di. » O klevet e veve Joseph, ar c'heaz koz a vouelaz gant laouenedigez, hag o veza trugarekeat Doue e teuz da jomm enn Ejipt. Joseph a roaz d'ezhan ha d'he vugale ann douar pinvidika euz ar rouantelez, bro Jes-sen : eno e vevaz c'hoaz seitek vloaz. Evit Joseph a varvaz da zek vloaz ha kant ; eur skeuden eo euz Hor Zalver a oue ive guerzet gant Judas, ha lakeat d'ar maro gant ar Iuzevien, he vreudeur pe he genvroiz.


Goulennou.

E pe vro edo Jacob o chom ? — Petra a reaz pa zeuaz ar gernez ? — Petra a c'houlennaz Joseph ouz he vreudeur, ha penaoz ho digemeraz evit ann eil guech ? — Gant piou oue kavet ann tas arc'hant ? — Petra a ziskleriaz Juda divarbenn he dad ? — Ha Joseph petra reaz neuze ? — Pegait e vevaz Jacob enn Ejipt ? — Ouz piou en deuz Joseph eunn henveledigez bennak ?

ANN AOTROU-DOUE,
DA C'HOUDE M'EN DEUZ ROET EUL LEZENN NEVEZ
HAG EUR VRO NEVEZ D'HE BOBL.

XII
Moizez.

Eur pennad amzer goude maro Joseph, ar Iuzevien a ioa kement anezho m'o devoue ann Ejipsianed aoun na vijent treac'h d'ezho. Pharaon a gemennaz eta beuzi er ster kement paotr a vije ganet euz ho lignez, evit miret outho da greski



Moizez tennet euz ann dour.

ken. Mez eur c'hreg e leac'h senti a lakeaz he mab enn eur baner var c'horre ann dour, hag a lezaz eno he merc'h da velet petra en em gavche ganthan. Merc'h ar Roue, o veza kavet ar c'hrouadur, e devoue truez outhan, hag ar plac'hik a redaz raktal da glask he mamm evit beza magerez, d'ar bugel. Pa oue deuet braz aoualc'h, oue kaset da verc'h ar Roue ha savet er palez. Eunn devez e lazaz eunn Ejipsian a voall skoe eunn Hebreadd, ha gant aounn na vije great kement all d'ezhan he unan, e tec'haz neuze da eur vro estren. Eno oue lakeat da zioual al loened.

Goulennoù.

Pe lezenn a zougaz Pharaon eneb ann Hebreed ? — Petra a reaz mamm Moizez ? — Gant piou oue tennet hema euz ann dour ? — Perak e tilezaz palez ar Roue, ha da be leac'h ez eaz ?


XIII

Ann Hebreed o tec'het euz ann Ejipt.

Eunn devez m'edo Moizez var ar meaz gant he loened, e velaz ann tân enn eur vodenn ha ne zeye tamm ebet ; hag e tostaaz ouz ann tân evit gueleit petra oa. Mez euz kreiz ann tân eur vouez a lavaraz d'ezhan : « Al leac'h-ma a zo santel, tennit ho poutou araok tostaat. » Ha pa oue e kichen, Doue a gomsaz c'hoaz : « Truez am euz ouz anken va fobl enn Ejipt. C'hui ielo eta da gaout Pharaon hag a lavaro d'ezhan lezel ann Hebreed da vont kuit. » — « Petra oun me evit mont betek ar

Roue ? » eme Voizez. « N'o pezet ket aoun, me vezo ganeoc'h, » a lavaraz ann Aotrou Doue.

Moizez, goude digareal, o veza eat d'ann Ejipt, a gemeraz ganthan he vreur Aaron hag a ieaz da gaout Pharaon, evit kaz d'ezhan urz Doue. « Me ne anavezan ket Doue ann Hebreed, eme ar Roue, ha n'ho lezin ket da vont kuit. » Red e oue d'ann



Pharaon hag he zoudardet, beuzet er mor Ruz.

daou vreur ober meur a vurzud o klask her spounta. Eur vech, baz Aaron a chenchaz enn eunn aer; dour ar ster Nil a gemeraz liou ar goad; eur bern gueskleved, hag eur bern kellien goude a leuniaz ar vro; ar grizill, ar vosen hag eur guiskad killeien raden a zeuaz ive, ha Pharaon ne rea vãn. Doue a zigasaz erfin eunn eal da laza ar mab kosa euz a bep ti, ne vije merket ann or. Evit ma vije espernet ann Hebreed, oue lavaret d'ezho laza

eunn oan bloaz da zibri enn eur pred, ha gant he c'hoad merka ho doriou. Neuze e oue kãn v ha guelvan etouez ann Ejipsianet, ha Pharaon a laoskas ann Hebreed da vont kuit. Mez dont a reaz keuz d'ezhan, ha setu hen sevel eunn arme ha var ho lerc'h buhana ma c'helle. Edont e kenver ar Mor-Ruz, pa ouent tizet ganthan. Mez dre urz ann Aotrou Doue, Moizez a astennaz he zourn, hag ar mor en em dennaz enn daou du evit lezel pobl Israël da dremen. Ann Ejipsianet, o velet digor ann hent, a ieaz var lerc'h ann Hebreed; mez kentre ma oue ar re-ma enn tu all, Moizez a astennaz adarre he zourn, hag ar mor, o tistrei d'he blas kenta, a veuzaz Pharaon gant he holl zoudardet.

Goulennou.

Euz pe leac'h ha penaoz e komsaz Doue ouz Moizez ? — Mont a reaz a volonte vad da gaout Pharaon ? — Lezel a reaz ar Roue ann Hebreed da vont kuit ? — Pe vurzudou a reaz Moizez evit he spounta ? — Petra a ziguezaz er Mor-Ruz ?

XIV

Ann Hebreed enn desert. — Mene Sinaï.

Araok diguezout e bro Chanaan prometet d'ezho gant Doue, ann Hebreed en em gavaz gantho eunn desert braz da dreuzi; daou-ugent vloaz e ouent oc'h ober hent. A hed ann deiz, eur goumoulen tenval ho dioualle ouz ann heol, hag a ziskueze d'ezho pe varzu kerzet; hag hed ann noz, eur goabren ruz tan ho sklerijenne. Abenn daou viz ec'h en em gavent e mene Sinaï; hag eno Moizez



Taolennou al lezenn roet da Voizez.

a dremenaz daou-ugent devez, ha Doue a skrivaz d'ezhan he zek gourc'hemen var diou daol vean. Mez pa velaz ar bobl daoulinet evit adori eul leue aour, ez eaz kement a zrouk ennhan ma vruzunaz ann diou daolen roet d'ezhan e kreiz ar gurun hag al luc'het. Miret oa koulz goude peurvuia al lezenn-ze gant ar bobl, ha didruez oat ouz ann neb a dorre eur gourc'hemen bennak. Eur c'heaz den a oue brevet a daoliou mein, evit beza dastudet eun nebeut koad seac'h d'ann deiz a repoz. Eunn all c'hoaz evit beza kemeret hano Doue e vean.

Evit maga he bobl epad ann amzer-ze, Doue a lakeaz da gueza euz ann env eur bevanz galvet mân, hag a zastumet bep mintin araok sao heol, evit eunn devez hebken. Mez ar boued-ze a reaz

heug d'ho c'haloun, hag hi da glemm eneb Moizez, ha da geuzi da draou ann Ejipt. Eat drouk ennhan, Doue a laoskaz varnezho evel aeret askellek, a rea da galz tud mervel gant ho flemm bilimuz. Moizez a c'houlennaz truez evitho, hag a reaz, dre urz ann Aotrou Doue, eunn aer kuevr a oue savet dirak ann holl; o sellet hebken outhi neb a ioa flemmet en em gave raktal pare.

Ann aer kuevr-ze a zo eur skeuden euz Hor Zalver savet er groaz hag a bare ive ann holl bec'herien, pa zellont outhan gant glac'har ha fizianz. Ar mân digaset euz ann env d'ann Hebreed zo henvel ouz Mab Doue, a vag ive ar gristenien dre ar gommunion. Moizez o tenna ar bobl euz ann Ejipt zo ive henvel ouz Hor Zalver, a denn hon eneo euz daouarn ann drouk-spered.

Mez n'oa ket aoualc'h kaout boued da zibri, dour a vanke d'ezho ive da eva. Doue a gemennaz eta da Voizez skei eunn taol baz var eur garrek evit ma teuje dour anezhi. Evel ne strinkaz ket raktal, Moizez a skoaz eunn eil guech, hag abalamour ma touetaz euz ger ann Aotrou Doue, e varvaz araok mont e bro C'hanaan, ann douar santel, a jomaz ive sarret ouz kement hini ugent vloaz, a ioa etouez ar re em glemmaz euz ar mân.

Goulennou.

Pe hent o doa ann Hebreed da ober evit tizout ann douar santel ? — E kichen pe hano menez e oant abenn daou viz ? — Petra zigouezaz eno ? — Petra a reaz ann Hebreed da c'hortoz Moizez e traon ar menez ? — Pet gourc'hemen a roaz Doue ? — Miret mad oa al lezenn ? — Goall-skoet oue ar re he zorrzaz ? — Penaoz oa maget ann Hebreed ? — Evit petra e reaz Moizez eun aer kuevr ? — Hag ouz piou oa henvel ? — Evit kaout dour d'ar bobl, penaoz en em generaz Moizez ? — Perak n'ez eaz ket enn douar santel ?

XV

Ann Hebreed e bro Chanaan.

Moizez a varvaz d'ann oad a c'huec'h-ugent vloaz, e kichennek ann douar santel, ha Josue a gemeraz he blas e penn ar bobl.

Evit ober d'ezho tremen ster Jourden, Doue a renevezaz ar burzud c'hoarvezet er Mor Ruz; ann dour en em dennaz diouz ho hent. Kear Jericho a guezaz he mogeriou dirak ar Iuzevien, a reaz ann dro d'ezho abenn seiz guez; hag ar boblou a c'hoanteaz derc'hel penn d'ezho a oue, ann eil goude egile, taolet enn traon. Eunn devez zoken, evel ma tostea ann noz, ann heol a zentaz ouz Josue, hag a jomaz a zav ken na oue peur-diskaret ann holl enebourien; ha goude-ze e rannaz ar vro etre bugale Israël. Josue a zo henvel ouz Hor Zalver, n'euz nemethan hag a c'helfe digeri d'eomp ar guir douar prometet : ann Env.

Goulennou.

Piou a deuz varlerc'h Moizez, ha penaoz e treuzaz ster Jourden ? — Pe hano kear a guezaz he mogeriou epad ma rea ann Hebreed eur seizved tro d'ezhi ? — Penaoz ouent sikouret gant Doue eneb tud ar vro ? — Ouz piou eo henvel Josue ?

XVI

Ar Varnerien.

O veza diguezet er vro roet d'ezhan gant Doue, pobl Israël ne zalc'haz ket atao da zervicha he vestr. Meur a vech ec'h heuliaz gizioù ar baianed,

hag e teuz reuziou spontuz varnezhan. Pa deue keuz aoualc'h d'ar Iuzevien euz ho fec'hejou, Doue a zigase tud, goest d'ho diboania euz daouarn ho enebourien. Ar re vrudeta anezho a oue Jedeon, Jephthe, Samson ha Samuel. Ar c'henta, evit trec'hi ar Madianited, a gemeraz hebken tri c'hant den, peb a c'houlou gantho enn eur pod pri. O veza eat goustadik betek ho enebourien, e kreiz ann noz, ind a dorraz ar podou hag a zavaz peb hini he c'houlou. O velet ar sklerijen-ze, hag o klevet ann trouz, paotred Madian a spountaz, hag a redaz kuit buhana ma c'hellent. Ann Hebreed oue eta mistri heb stourmad ebet. Jephthe a c'hounezaz var ar Philistined. Evit Samson a oue treac'h da veur a rummad enebourien. N'oa c'hoaz nemet trivac'h vloaz, pa lazaz eul leon gant he zaouarn. Eur vech all e tiskaraz mil den gant eur javed azen. O veza



Samson gant eur javed azen.

paket tri c'hant louarn, e stagaz eur torchad plouz entanet ouz lost peb hini, hag e tevez evelse eost ar Philistined. Dalc'het gant he enebourien e kear Gaza, e tibradaz ann doriou, hag ho dougaz var eur menez. He nerz a ioa enn he vleio, hag eur vaouez, hanvet Dalila, ho zrouc'haz epad m'oa kousket. Goudeze ann holl a rea goab anezhan hag ar Philistined a reaz d'ezhan koll ar gullet, hag erfin evit c'hoarzin her lakeont e templ Dagon ho doue. Mez he vleio oc'h astenn a zigase nerz d'ezhan adarre, hag o taoler he zaouarn var daou biller e vuntaz varnezho ken na guezaz ann templ. Samson a varvaz eno, ha tri mil den a oue lazet ganthan.

Enn amzeriou-ze, epad eur gernez a zirollaz er vro, eunn intanvez keaz, hanvet Noemi, a dec'haz euz a Vethleem gant he daou mab. Ar re-ma a varvaz e touez ann estren, hag unan euz he merc'h et kaer he heuliaz, pa zistroaz e touez he zud. Ann dra-ma a ioa e mare ann eost, ha Booz, eunn den pinvidik braz euz ar vro, a lavaraz d'he labourerien lezel ed var ann douar, evit ma kavje ann intanvez iaouank peadra da zastum, pa 'zea da bennaoui enn he barkeier. Ouspenn-ze, e komsaz outhi evel-henn : « Ho tud ha va re a oa euz ar memez ouen, hag ann holl a lavar ez oc'h eur vaouez vad. » He c'hemeret a reaz eta evit pried, daoust ma oa eur baourez.

Doue a vennigaz ann tiegez-ze, o rei d'ezho eur mab a zo bet tad koz d'ar Roue David.

Goulennou.

Diguezet enn douar santel, bugale Israel hag hi a zalc'haz mad da zervich ar guir Doue ? — Penaoz e vezent neuze skoet gant Doue, ha piou a zigase d'ho zikour, pa ziskuezent keuz d'ho fec'hejou ? — Penaoz e c'hounnezaz Jedeon var enebourien Israel ? — Petra reaz kement a vrud da Samson ?

XVII

Ar Rouaned.

Ann diveza euz ar varnerien a oue Samuel. Hema a oa c'hoarvezet burzudou var he dro azalek he vugaleach. Eunn devez, he vamm, demezet pell a oa da eunn den mad, ha deuet dija var ann oad heb kaout bugel ebet, en em jale o pedi hag o vouela e Jerusalem. Kalz enkrez a rea d'ezhi chom heb krouadur ebet, hag ar groagez all a rea goab anezhi, evit kreski c'hoaz he foan. A dreuz he daelou e pede eta a vouez huel : « Va Done, emezhi, ma sellit a druez ouzinn ha ma roit d'inn eur paotr, me her goestlo d'eoc'h a vihanik. » Ouz he gullet hag ouz he c'hlevet, ar belek braz Heli a gredaz e devoa goall-evet hag he gourdrouzaz : « C'hui, emezhi, am c'hemer evit ar pezh n'ounn ket (a drugare Doue, va anken eo a ra d'inn pedi ha gouela ec'hiz ma ran », hag e c'hanzanvaz outhan he foaniou. « Mad, emezhan, ma lavarit ar virionez, plijet gant ann Holl-C'halloudek selaou ho pedenn. »

Doue o veza eta selaouet ar c'hreg keaz, hi a zigasaz he c'hrouadur d'ar belek braz, evit ma vije savet ha skoliet enn templ. Beza e oa eur paotr fur ha devot, hervez ma verk ann Histor Zantel. Eunn nosvez, epad he gousk, e klevaz eur vouez ouz he c'hervel dre he hano : « Samuel ! Samuel ! » O kredi oa ar belek braz her galve, hen a redaz daved Heli, hag a lavaraz : « Mestr, setu me ama. » — « N'am euz ket ho kalvet, eme Heli, distroit eta d'ho kuele ha kouskit e peoc'h. » Eunn

eil guech e c'hoarvezaz ar memez tra. Ann deirvet guech ma teuz ar bugel d'he gavout, ar belek braz o tiskredi oa kement-se eur burzud bennak a berz Doue, a lavaraz : « Va mab, n'am euz ket ho kalvet, kouskit eta a nevez ; ha ma vec'h c'hoaz galvet, lavarit evel-henn : « Komsit, va « Doue, rak ho servicher a zelaou. »

Samuel a reaz ec'hiz m'oa kemennet d'ezhan, ha mouez ann Aotrou Doue o komz outhan a ziskleriaz ann darvoudou spontuz, a oa varnez digouezout gant ar bobl ha gant Heli he-unan, abalamour n'en d'oa ket savet mad he vugale. Ne dalv ket d'ar gerent beza tud vad, ma ne boaniont ket da gelenn ho bugale e doujanz Doue.

Heb dale, daou vab Heli a oue lazet er brezel ; ann Arc'h santel a jomaz etre daouarn ann enebou-rien ; hag ar belek braz, o klevet ar c'helou-ze, a faoutaz he benn o koueza a stok korf d'ann douar.

Reuzeudik braz oa stad ann Israelited ; mez Samuel, lakeat da c'houarn evel barner, a reaz d'ezho ober pinijen ; ha pa ouent sentuz ouz Doue, ann euruzdet a deuz adarre enn dro.

Koulsgoude ar bobl, evel m'en divije da glemm euz Samuel, a c'houlennaz diganthan lakaat eur Roue e penn ar vro ; hag ar prophet a reaz hervez ho goulenn : ann Aotrou Doue a ziskuezaz d'ezhan ann hini a dlle beza lakeat da Roue, Saül he hano, eunn den euz ar re gaera. Ouz hen dis- kuez d'ar bobl, Samuel a gomsaz enn doare-man : « Setu ar Roue oc'h euz goulennet, hag a zo a dra zur eunn den goest, ne gafet ket unan enn tu all d'ezhan, na koulz hag hen, da vont e penn ho soudardet d'ar brezel. » Ar bobl a lavaraz enn eur vouez : « Guir eo ; buez hir da Zaül, hor roue ! » — « Ia, eme Zamuel, mez, o c'houlenñ kaout eur

Roue, c'hui oc'h euz roet da anaout ne felle ket d'ehoc'h beza gouarnet gant Doue he-unan, evel guechall ; great oc'h euz ive fae varnon-me ha var ar gark roet d'inn aberz Doue, ha ne zonz ket d'inn beza great gaou ouz nikun ac'hanoc'h. » — « Nan, eme ar bobl, n'euz netra da rebech d'ehoc'h ; c'hui a zo didamall e peb giz. »

Goulennou.

Piou a c'houarnaz ann Israelited da ziveza araok ar roue Saül, ha pe hano a reat anezhan ? — Piou oa he vamm ha petra a c'hoarvezaz ganthi e Jerusalem ? — Lavarit histor ar bugel Samuel. — Piou a oa neuze belek braz ? — Perak e tigouezaz drouk gant Heli hag ar bobl ? — Penaoz e komsaz Samuel ouz ann Israelited a c'houlenne eur Roue ?

ANN AOTROU-DOUE,
DA C'HOUEDE M'EN DEUZ ROET EUR ROUE
HAG EUNN TEMPL D'HE BOBL.

XVIII
Saül ha David.

Saül a zalc'haz mad da lezenn Doue, epad ma sentaz ouz Samuel. Mez goude eur pennadik, ne reaz mui van euz kuzulion ar prophet, ha Doue a glaskaz eunn all da veza roue enn he leac'h, hag



David o tiskuez penn Goliath.

a gemennaz da Zamuel sakri, evel roue, eur paotr iaouank, hanvet David : « Saül, eme ar prophet, a glevo kement-ze, hag a gemero kasouni ouzinn ; aoun am euz razhan. » Senti a reaz koulsgoude, hag e sakraz David, ne oa nemed eunn dioualler loened, evit beza roue varlerc'h Saül. D'ar mareouze e oa brezel etre ar Iuzevien hag ar Philistined. Ann diou arme a ioa ann eil dirak eben, hag eur pikol Philistin, a zek troatad, a deue bemdez var ann dachen d'ober goab euz ann Israelited, o lavaret dezho : « Deuet da c'houren ouzinn-me, unan bennak ac'hanoc'h, ma kredet. M'ar be treac'h d'inn, c'hui a c'hounezo ; mez ma trec'han me, c'hui a gollo, ha ni a rai lezenn d'ehoc'h. » Hini ebet ne grede mont. Epad daou-ugent devez e kendalc'haz, noz ha mintin, d'ho goapaat, ha Saül a oa enkrezet braz.


Neuze e tigueaz d'ar mesaer David dont da c'houlenn kelou euz he vreudeur a oa soudardet ; ha pa velaz Goliath oc'h ober ardou, e lavaraz raktal : « Me ia d'ezhan ! » — « Re iaouank oc'h c'hoaz, » eme Saül. Evel ma c'hoantea koulzgoude gouren ouz ar pikol den-ze, ar Roue a roaz d'ezhan he zillad a vrezel hag he armou ; mez, ar paotr n'en em gave ket gant ann traou-ze, hag a gemeraz hebken he vaz, he valtam hag eunn nebeut mein. « Doue, emezhan, en deuz va diouallet meur a vech euz al loened gouez hag am diuallo ive ouz ann den gallouduz-ze, a ra fac var he bobl ha dismeganz d'he hano santel. » Ouz he velet o tostaat : « Te am c'hemer eta evit eur c'hi, eme Goliath, pa deuez da stourm ouzinn gant eur vaz ? » — « Nann zûr, a lavaraz David ; va binviou a zo dister, evit guir, mez dont a ran enn hano Doue Israel oc'h euz kement goapeat, ha fizianz am euz ennhan. »

Casque à l'ok. Roue d'Israël.

Kerkent e lakeaz eur mean var he valtam, hag her strinkaz gant kement a nerz, ma sankaz e kreiz tal ar Philistin, a guezaz a stok he gorf. En eur redaden ez eaz betek Goliath, hag e kemeraz he gleze evit trouc'ha d'ezhan he benn. Pa veljont ho difennour astennet maro-mik, ar Philistinet a spontaz hag a dec'haz kuit buhanna ma c'hellent.

Dre gement leac'h ma tremene ar zoudardet goude, ann holl dud a gane : « Saül en deuz lazet mil a enebourien, ha David en deuz lazet dek mil. » Drouk a oue e Saül o klevet ar c'homsou-ze, hag e c'hoanteaz, ouspenn eur vech, lamet he vuez digant David ; mez hema a dec'haz bep tro, dre c'hraz Doue. Evit Saül, trec'het eur pennadik divezatoc'h gant he enebourien ha tost d'ezhan kuez a etre ho daouarn, a en em lazaz gant dizesper.

Deuet da veza Roue varlerc'h Saül, ne jomaz ket pell braz fur, hag enn despet da vadoberou Doue ha da guzuliou ar prophet Nathan, David a goezaz enn eur pec'het mezuz, a oue eur goallskuer evit tud he rouantelez. Eunn taol pounner meurbed a skoaz he galon ; rak he graouadur a varvaz ; hag eur mab all dezhan, he hano Absalon, a c'hoanteaz diskar he dad divar ann tron ; red e oue zoken d'ar roue paour tec'het euz he balez, gant aoun da veza lazeta. Mez erfin ann Aoutrou Doue en devoue truez outhan, hag ouspenn ma pardounaz he bec'hed, e roaz d'ezhan ive ar gounid var he vab kriz ha digaloun. Absalon a oue trec'hed gant servicherien ar Roue David. O tec'hed var gein eul loen, e chomaz a ispill var boez he vleio, ouz skourrou eur vezen, hag unan euz ar jeneraled, o tigouezout var al leac'h, hen lazaz petra bennak ma oa gourc'hemennet d'ann holl miret buez ann treitour.



*Ar Roue David o kana ar psalmou.

Ar Roue David zo brudet dreist peb tra dre ar psalmou ha kantikou dudiuz en deuz great. Ann darn-vuia anezho a gomz euz ar Zalver prometet d'ar bed, hag a ro da anaout petra e vezo, pell araok he zonedigez. Kalz anezho a vez c'hoaz kanet hirio ann deiz enn ofisou ann iliz.

Goulennou.

Piou oue kenta Roue Israël ? — Pe zoare den oa ? — Pell e chomaz sentuz ouz Doue ? — Pe hano oa ar pikol den a rea goab euz arme Saül, ha piou en em ginnigaz da stourm outhan ? — Ha gant pe zoare binviou e teuz a-benn anezhan ? — Penaoz e varvaz Saül ? — Pe zoare pec'hed a damaller d'ar Roue David ? — Ha penaoz e oue hen skoet gant Doue ? — Petra 'reaz d'ezhan he vab Absalon, ha penaoz e varvaz ann treitour ? — Petra 'reaz brud d'ar Roue David, ouspenn ar brezelioù a c'hounezaz var enebourien ar vro ?

XIX

Ar Roue Salomon.


Goude beza skullet daelou c'huero var maro Absalon, ar Roue David a zistroaz da Jerusalem, hag a oue great d'ezhan eunn digemer karantezuz. Koulsgoude a-benn eunn nebeudik amzer varlerc'h, e lakeaz he vab Salomon da c'houarn enn he blas, ec'hiz m'en devoa roet he c'her da Vetsabee, mamm ann den yaouank, hag e roaz d'ezhan kuzulioù euz ar c'haera : « Dalc'hit mad enn tu gant Doue, emezhan, rak, mar hen dilezit, hen ho tilezo. »

David en devoa c'hoanteat sevel eunn templ d'ann Aotrou Doue, e kear Jeruzalem; mez abalamour d'ar brezelioù en devoa bet da zouten koulz lavaret ouz he holl amezeien, dre 'n'abek ann niver tud en devoa lazet ha lakeat laza, ne falvezaz ket d'ann Aotrou Doue e vije great al labourze ganthan, petra bennak m'en devoa bolontezvad. Salomon eo a dlie sevel ar c'henta templ e Jeruzalem, hag hen ober a reaz ken kaer ha ken pinvidik, ma oa brudet dre ar bed dreist holl labourou ann dud. Ouspenn kant hanter kant mil micherour a labouraz varnezhan, a hed seiz vloaz amzer. Pa oue peur-c'hreat, Salomon a c'halvaz ar bobl evit ober lidou sakr, ha dougen ann arc'h santel el leac'h-ze. Neuze evit diskuez e kave mad ann ti savet d'ezhan, ann Aotrou Doue, kuzet enn eur goabren, a gomzaz ouz Salomon. o lavaret d'ezhan e kleva he beden, hag ouz he alia da ober c'hoaz eur goulenn bennak outhan. « Va Doue,

emezhan, va lakeat oc'h euz da veza Roue var ho pobl; mez iaouank oun, roit d'inn furnez ha skiant evit gouarn er c'hiz m'eo dleet. » Ar beden-ze a blijaz kalz da Zoue : « Abalamour, emezhan, n'oc'h euz goulennet na madou ann douar, na fouge, na galloud, me ho roi d'ehoc'h ive da heul ann traou, oc'h euz c'hoanteat kaout. »

Salomon a oue eta n'eo ket hebken ar fura, mez ive ar pinvidika, ha muia doujet euz Rouaned ann amzer-ze. He furnez a oue anavezet diouz ar varnedigez-man, a zougaz eur vech e kenver diou vaouez, a deuaz d'en em glemm dirazhan divarbenn kement-ma : O chom e oant er memez ti, hag ho diou o devoa peb a grouadur er memez oad pe var-dro; ar genta a gomsaz enn doare-ma : Houma e deuz mouget he bugel, hag epad ma oan kousket e deuz troket anezhan gant va hini; er mintin-ma p'ounn dihunet, n'em euz kavet em c'hichen nemed eur c'horf maro. En eur glevet kement all, ar Roue a lavaraz : « Digaset aman ar c'hrouadur beo, ma vezo rannet ha roet eunn tamm da bep hini euz ann diou c'hreg-man. » Mad tre, eme ar genta, evelse ne devezo hini ac'hanomp leac'h da glemm. Nan, Aotrou, eme ann eil, abalamour da Zoue, n'hen trouc'hit ket e daou! Guell eo d'inn hen lezell beo, hag e zafe abez ganthi! « Lezit eta he vuez gant ar bugel, eme Salomon d'he zervicherien, ha roïthen d'ar c'hreg-ma, rag houma eo ar vamm. »

Gouskoude, deuet var ann oad, ar Roue-ma a zilezaz hent ar furnez, hag en em daolaz da adori falz-doueoù ar merc'hed estren, en devoa kemet evit priejou. Evelse e kollaz mignoniac'h ann Aotrou-Doue o veza great fañ var guzul he dad, a lavare d'ezhan : « Dalc'het mad énn tu gant ann Aotrou-Doue, rak mar hen dilezit, hen ho tilezo



Barnedigez Salomon.

ive. » Ne ouzer ket pe e varvaz enn he zizursiou, pe e c'houlennaz pardoun gant keuz d'he bec'hejou.

Penaoz bennak e oue, Doue a roaz da anaout e vije rannet he rouantelez, abalamour m'oa bet dizent. E guirionez, dindan Roboam, he vab, ann daouzek rummad-tud en em rannaz, ha diou rouantelez oue great anezho. Ar genta oue rouantelez Israël gant Samarii da gear-benn, hag ann eil, rouantelez Juda, e devoue 'vit kear-benn Jerusalem.

Goulennou.

Pebez kuzulioù a roaz David d'he vab Salomon ? — Petra en devoa David c'hoant da ober evit henori Doue, ha petra 'viraz outhan d'hen ober ? — Pe zoare templ oue savet da Zoue gant Salomon, petra lavaraz Doue d'ezhan, ha pebez goulenn a reaz Salomon. — Diouz petra oue anavezet furnez Salomon ? — E pebez pec'hed e kouezaz Salomon, penaoz e varvaz, ha petra deuz da veza he rouantelez goude he varo ?

XX

Ar prophet Eli hag ar prophet Elisée.

Varlerc'h ar Roue Salomon, ann idolatri en em skignaz muioc'h mui e touez ar Iuzevien, pobl ha rouaned a jome aheurtet er pec'hed. Neuze Doue a zigassaz ar prophetet evit punissa ar Rouaned ha kelen ar bobl. Eur prophet eo eun den santel deuet a-berz Doue evit digass sonj d'ann dud euz ar Messi, hag a ree burzudou braz evit diskouez e komse enn hano Doue.

E mesk ar Rouaned fall, Akab a zo bet unan euz ar re falla, hag he c'hreg Jezabel a ioa c'hoaz falloc'h evithan : sevel a rejont eun templ d'ann diaoul, hanvet Baal gant ar baianet, hag e lake-jont d'ar maro beleien ann Aotrou-Doue.

Enn amzer-ze e veve ar prophet Eli, a ieaz da gaout ar Roue, hag a lavaraz d'ezhan : « Ker guir ha ma z'eo Doue, Doue, me lavar d'ehoc'h ne gouezo ket eur banne glao, keit ha ma plijo ganen. »

Kounnar a zavaz e kalon ar Roue varlerc'h ar c'homzou-ze ; hag ar prophet, evit tec'het enn-he-raok, a ieaz da guzat enn eul leac'h distro, e kichen eunn eienen-zour, hag eno diou vran a zigassaz d'ezhan kig ha bara bemdez. Mez ann eienen a zizec'haz gant ar zec'hor, neuze Eli a ieaz da c'houlenn, digant eunn intanvez, eur bannik dour, abalamour da Zoue. Evel ma z'ee ann intanvez da glask eur banne dour d'ezhan, hen a lavaraz c'hoaz : « Digassit ive eur begad bara, m'ar plij

ganehoc'h. » — « Mez, emezhi, ne jom mui nemet eunn dornad bleud em zi, evidon-me hag evit va mab; e m'oump dare da vervel gant ann naoun. » Eli a lavaraz : « Kerc'hit atao, ha grit eunn tamm bara d'inn. » Ann intañvez a zentaz; ha da c'houde, betek m'oue tremenet ar gernez, kaer e devoa kemer bleud, ar bleud ne vihanee ket ganthi.

Prest goude, e varvaz mab ann intañvez-ze : mez ar prophet Eli a gemeraz truez ouz ann hini e devoa bet truez outhan; hen a resusitaz ar c'hrouadur, hag a roaz he mab d'ezhi en-dro.

Epad tri bloaz, ne gouezaz ket eur banne glao : er-fin Eli a ieaz da gaout Akab : « Mall eo d'eomp gouzout, emezhan, piau 'zo Mestr enn Env, evit goulenn sikour outhan. Pignomp var ar menez, hag eno ni 'velo. Digasit daou ejen ganehoc'h. »

Pa oue destumet ann dud var lein ar menez, Eli a lavaraz : « Setu beleien ann idolou ha prophet ann Aotrou-Doue : pevar-c'hant hanter a zo anezho ; me 'zo, me, va unan-kaer. Hi a gemero eunn ejen, ha, goude beza he lazet, hen astenno var eur bern-koat, ha me reio ar memez tra d'eunn all. Neuze, hi 'c'houlennno tân digant Baal, ha me 'c'houlennno, me, digant ann Aotrou-Doue ; ann hini 'lakeio ann tân da zisken euz ann Env a vezo anavezet evit beza ar guir-Doue. » Ar bobl a respontaz : « Mad ! ra vezo great evel-se ! »

Beleien ann idolou a zestum eta eur bern-koat, hag a astenn varnezhan ann ejen, o devoa lazet. Mez kaer o deuz pedi Baal, euz ar mintin betek kresdeiz, ann idol ne respont ket ; hag Eli a ra goab anezho : « Savit huelloc'h ho mouez, va zud keiz, kousket eo Baal mer-vad, pe e man enn davarn marteze, savit huelloc'h ho mouez, evit ma

klevo. » Hen neuze a zestum ive, d'he dro, eur bernmein, lakât a ra meur a damm koat varnezhan, hag astenn ann ejen var gorre ; gleba 'ra ouspenn ar c'hoat, ken na rede ann dour tro-var-dro, hag e lavar : « Aotrou-Doue, diskouezit eo c'houi ar mestr, evit ma tistroio ouzoc'h ar bobl-ma. » Kerkent ann tân a ziskennaz euz ann env, hag a zevaz ar c'hoat, ann ejen, hag ar vein. O velet kement-se, ann dud a stouas d'ann daoulin, en eur lavaret : « Hini ar prophet eo ar mestr ! » Eli a lavar neuze d'ar Roue : « It d'ar gear brema, ha kerzit buhan, heb-dale e kouezo eur barrad glao. »

Eunn den, hanvet Naboth, en devoa eur vinien ; ha douget braz oa d'ezhi, abalamour ma 'z'oa deuet dezhan digant he dud. Ar roue Akab a c'hoanteaz



Elisee a vel ar prophet Eli kasset d'ann env var eur c'har-tân.

kaout ar c'hornad douar-ze evit kreski he jardin, hag ar Rouanez Jezabel a reaz laza Naboth evit le mell he leve diganthan. Mez n'oue ket pell, e tigouez Eli e ti ar Roue : « Abalamour m'o peuz lazet eunn den divlam, emezhan, ar chass a lipo ho koad c'houi ive, el leac'h m'o deuz lipet hini Naboth, hag hi a zebro Jezabel. »

Guir mad en devoa lavaret Eli. Akab, o tont euz ar brezel, a varvaz enn dachenn-ze; Jezabel oue bet taolet dre eur prenestr er meaz euz he zi, hag ar chass a zraillaz he c'horf, ken n'oue bet kavet pedost, var he lerc'h, nemed he bizied.

Eli en devoa choazet Elisée evit beza prophet var he lerc'h. Eunn dervez m'edont ho daou var ribl ar Jourden, eur c'har-tân a ziskennaz, enn eunn taol, dirazho, hag a zavaz Eli d'ann env. En eur vont kuit, e lauskaz he vantel gant Elisée, evit diskouez dezhan e tlie beza heritour d'he vestr ha prophet var he lerc'h.

Eur vech, e z'oa eur vanden bugale var-dro ar prophet Elisée; hi grie varnezhan, hag a reegoab, dre'n' abek m'en devoa eur penn divleo; mez kerkent loened gouez a zaillaz varnezho, ha daou ha daougent euz ar vugale divergont oue taget gantho.

Naaman a ioa eur c'habiten braz, ginidik euz ar Sirii : klevet en devoa komz euz ar prophet Elisée, hag e teuz da c'houlenn ar yec'hed diganthan, rak lor oa. Ar prophet ne zavaz ket zoken evit ober digemer d'eunn den a ioa ken pinvidik; hen lezel a reaz e tal ann or, hag e lavaraz d'he zervicher Jiezi : « Kasit kemenn d'ann Aotrou-ze da vont d'en em voalc'hi er Jourden, seiz guech, hag e vezo pare. »

Mez drouk oue e Naaman ma n'oa ket deuet Elisée he-unan d'he gaout, hag hen d'en em glemm : « Petra eo ann den-ze, emezhan ? N'eo ket savet zoken evit guelet ar c'hlenved am euz ! Ha n'eo ket ker mad ann dour em bro hag hini ar Jourden ? »

« Mestr, a respontaz he zervicherien, m'en defe lavaret dehoc'h ober eunn dra ziæz, c'houi pefe her great; perak eta ne rafec'h ket ann dra zister en deuz lavaret ? » Naaman a zentaz, ha goude beza diskennet seiz guech enn dour, oue bet guelleat dezhan.

Ar c'habiten a drugarekeaz er-vad Elisée : « Kaer e velan brema, emezhan, n'euz ken mestr enn Env nemed Doue. » Hag hen a ginnigaz d'ar prophet ar pez en defe karet kemer. Ar prophet a lavaraz : « Ne gemerinn netra. »

Mez eunn nebeut goude, Jiezi, a ioa mevel gant Elisée, a redaz varlerc'h Naaman : « Erruet euz d'eomp daou-zen yaouank, emezhan; roit eur guennek bennak d'eomp evelkent, hag eunn tamik dillad, mar karit, evit ma c'hellimp ho digemer. »

Pa deuz ann noz, ar prophet a c'houlennaz : « Jiezi, e peleac'h oc'h bet ? » — « Me ? a respont Jiezi : e nep leac'h ! » — « Eur gaou a lavarit : klasket oc'h euz arc'hant gant Naaman. Mad ! M'o peuz bet he arc'hant, c'houi o pezo he glenved ive. » Ha diouc'h-tu korf Jiezi a deuz da veza lor, penn da benn.

Elisée a reaz traou burzuduz, zoken goude m'oa tremenet. Eunn dervez ma z'oa tud o kass unan maro d'ann douar, e tigouezaz gantho eur vanden laëroun. O velet al laëroun, hi 'gemer aoun; ha spontet int kement, ma taolont ann hini maro, evit tec'het buhanoc'h enn-ho-raok. Mez ar c'horf en

em gavaz da goueza e bez ar prophet; ha setu, tra souezuz! kerkent m'en deuz tостeat diouz relegou Elisée, e tistro e buez.

Goulennou.

Petra eo eur prophet? — Perak e tec'haz ar prophet Eli araok ar Rouaned? — Piou en devoa maget Eli enn dezert? — Penaoz e trugarekeaz ann intanvez, e devoa roet ann aluzenn d'ezhan? — Lavarit penaoz ar prophet en devoa diskouezet oa krefoc'h ha galloudusoc'h ann Aotrou-Doue eget ann diaoul? — Penaoz ar Roue Akab a gemeraz evithan he vinien digant Naboth? — Petra' zigouezaz ganthan ha gant he bried dre'n abek ann torfed-ze? — Penaoz en deuz Eli kuiteat ann douar? — Petra en devoa lausket gant Elisée? — Petra 'erruaz gant ar vugale o devoa goapeet Elisée? — Pebez vad en devoa great Elisée da Naaman? — Perak en em stagaz klenved Naaman ouz Jiezi? — Pebez mirakl a reaz relegou Elisée?

XXI


Ar prophet Jonas.

Ann Aotrou-Doue a lavaraz, eunn dervez, da Jonas: « Tud Niniv a gouezo drouk varnezh, rak rên a reont eur vuez direiz hag int pec'herien euz ar re vrassa. Mez, araok ma vezint skoet, kerzit da lavaret d'ezho, c'hoaz eur vech, ober pinijenn! » Niniv a ioa eur gear vraz, e bro ar baianet, ha Jonas, kentoc'h eget mont d'ar vro fall-ze, a dro kein d'ezhi, hag a bign var eul lestr evit mont da leac'h all.

Mez e berr-amzer, e savaz eunn avel krên, tarziou-mor spontuz, hag al lestr a vranselle kement, ma kave d'ann holl edo o vont da goll. « Tennomp plouz-berr, eme ar vartolodet, evit gouzout piou a

zigass varnomp ar goall-amzer-ma. » Ar blouzen-verr a gouezaz gant Jonas, hag ar prophet a lavaraz neuze: « Kouezet mad eo ganen; me 'eo ann den kablu; ha ma n'em zaolit ket er mor, ne ehano ket ar goall varr-amzer a zo dirollet varnomp. » Taolet oue eta enn dour, ha kerkent ann avel a baouezaz var ar mor.

En em gaout a reaz eno just eur pesk braz, hag a zo hanvet balên: hen a lonkaz ar prophet, heb her glaza nag her mouda. Mez tri dervez varlerc'h, ar pesk hen dislonkaz hag hen taolaz var ann aod. Beo oa c'hoaz, ha iac'h evel diagent.



Jonas taolet gant eur balên var ann aod.

Neuze Jonas a ia da Niniv; ha prezek a ra kement ha ma c'hell. Hen a rede euz ann eil penn-d'egile da gear, hag a grie: « Daou-ugent dervez c'hoaz, ha Niniv a vezo dismantret! » O klevet ar

c'homzou-ze, tud Niniv a gemeraz aoun, hag ann holl en em roaz da ober pinijenn : « Piou c'hoar, a lavaraz ar Roue, mar karomp iun, holl, tud ha loenet, plijout a rei c'hoaz marteze gant Doue pardouni d'eomp ! » Hag hen a zonje mad : rak ann Aotrou-Doue, ouz ho guele o chom heb dibri nag eva, ne vennaz ket ho skei evel m'en devoa lavaret.

Goulennou.

Da beleac'h oue lavaret da Jonas mont da brezek ? — Penaoz ec'h erruaz drouk gant ar prophet Jonas ? — Ped dervez e chomaz e kov ar pesk ? — Petra 'reaz tud Niniv, pa oue deuet Jonas da brezek d'ezho ?

XXII

Judith.

Keit ma oue aketuz ar Iuzevien da heul lezenn Doue, enebour ebet ne c'helle beza treac'h d'ezho. Ar Rouaned n'oant ket holl, tud euz ar choaz ; meur a hini anezho goulzskoude oue mad, ha n'euz ket bet hini guelloc'h eget Ezekias. Enn he amzer e veve ar prophet Isai hag a lavare penaoz Mamm hor Zalver a vije eur Verc'hez.

E mare ar Roue santel Ezekias, Sennakerib, Roue ann Assirii, a ioa deuet, gant ar bai Janet a Niniv, betek Jerusalem, ha kredi mad a ree dont a-benn anezhi ; mez enn noz, epad m'edo Ezekias o pedi Doue, eunn eal a deuz var-dro ar bai Janet, hag a lazaz ann darn-vuia anezho ; ha red oue bet da Sennakerib mont kuit buhana ma c'helle.

Allaz ! eur vech m'o devoa tud Niniv c'hoanteat kaout bro ar Iuzevien, hi 'glaske bepret ann tu d'he c'hemer.


Holophern, jeneral a Assirii, a ioa deuet er vro ; ha krena ree ann dud holl enn he raok, rak n'oue ket da lakât enn he eneb kement a zoudarded evel m'en devoa. Goulzskoude eur gear, hanvet Bethulii, a zarr he doriou outhan ; mez ne vo ket tu da zerc'hell ennhi pell amzer : rak ne z'euz ebarz na puns na feunteun ebet ; ann dour a zeu a zianveaz, ha stanket eo bet ar gorzenn a zigasse dour d'ezhi. E berr-amzer eta, e vezo red digeri ann or.

E Bethulii e z'oa eunn intanvez iaouank, hanvet Judith. Daoust ma z'oa pinvidik, hi a veve 'vel eur zantez, hag e chome enn he zi da ober pinijenn. Eunn dervez, oue lavaret dezhi ne z'oa ken komz e kear, nemet da zigeri ann or d'ar bai Janet. « Perak ? emezhi ; evel ne ve ket Doue ato ar mestr !!! Pedomp anezhan, hag hen a roio d'eomp ann tu da c'hounit. » — « Guir a lavarit, a respont ar bobl : pedit ta evidomp, rak c'houi 'zo eur vaouez santel. » Hi-en em laka neuze da bedi, ha Doue a ro dezhi da anaout petra da ober evit dont a-benn euz ar bai Janet.

Guiska 'reaz he dillad kaera, hag e z'a, gant he mitez, da gaout Holophern. « Deuet oun davedoc'h, emezhi, rak n'euz ket mui leac'h da herzell e Bethulii. » Ar jeneral, sebezet o velet ar vaouezze, ker brao ma z'oa, ha ker koant ma komse, a ra dezhi digemer vad, hag her ped da goania ganthan. Mez, epad ar pred, Holophern a evaz kement m'en em roaz da gousket. Noz oa, ha Judith en em gavaz he-unan kaer ganthan. Neuze hi gouez d'ann daoulin : « Va Doue, emezhi, roit d'inn nerz ha kalon brema ! » Kleze ar jeneral a ioa a zistribill ouz postou ar guele : hi her c'hemer hag a zibenn Holophern. He mitez a ioa eur

zac'h ganthi : hi a lakeaz penn ar jeneral ebarz hag e z'echont buhan kuit. Hini euz ar zoudarded ne gredaz goulenn kelou ebet digantho. Antronoz-vintin, penn Holophern a oue lakeat a-vel d'ann holl var mogerioù Bethulii; ar baianet, p'her guelchont, a jomaz souezet, ar spont a grogaz enno, hag hi da redet, peb-unan d'he du, guella ma c'hellent.

« Trugarekait Doue, a lavar neuze Judith, rak ann Aotrou-Doue ne c'hoar ket dilezel neb en deuz fizians enno. »



Judith a zibenn Holophern.

Judith a zo eur skeudenn euz ar Verc'hez-Vari : ar Verc'hez a vezo treac'h d'ann diaoul, hag a flastro he benn d'ezhan.

Goulennou.

Petra en deuz lavaret ar prophet Isai divarbenn Mamm hor Zalver ? — Penaoz eo bet saveteet Jerusalem diouc'h Sennakerib ? — Piou oa Judith ? — Petra e deuz great evit laza Holophern ? — A betra Judith a zo ar skeudenn ?

XXIII

Ar luzevien e kaptivite.

Enn despet da vadelez ann Aotrou-Doue, ar luzevien a iea bepret var fallât. Mez er-fin e kouezaz varnezho poanioù braz, ha dre ho goall oa, rak ar prophet Jeremi a gomse euz ar maleurioùze abaoe pell amzer, mez den ne rea vâd d'her c'hlevet, ha goapeet oue c'hoaz ouspenn gant ann holl.

Nabukodonosor, Roue Babilon, a deuz var-dro Jerusalem ; ha netra ne c'helle herzell ouz he zoudarded ; ar gear a ioa bet dismantret, ann templ devet, ann tenzorioù hag ann danvez, a ioa ebarz, draillet pe laeret, ann dud holl kaset da vro Babilon, ar Roue a ioa bet flastret he zaoulagad d'ezhan enn he benn.

Nabukodonosor ne lezaz er vro nemed eunn nebeudik tud evit labourat ann douar, hag ar prophet Jeremi a jomaz gantho evit gouela ha pedi Doue. « Allaz ! emezhan, truez ha kaon a zo brema var henchou Jerusalem, n'int mui darempredet, rak d'ar gouelioù braz ne zeu mui den ebet ; eur zamm-glac'har a zo kouezet varnomp, sellit ha lavarit mar deuz eunn anken henvel ouz hon hini ! » Souezet e chom holl ann dud a zian-

veaz, ha pa dremenont dre ar vro : « Penaoz eo deuet da veza, emezho, ar gear gaer-ze n'e devoa ket he far var ann douar ! »

Neuze ar Iuzevien, e kreiz ho enkreiz, a deuaz sonj dezho euz ann Aotrou-Doue, hag a reaz pini-jenn. Huanadi 'reant gant ann anken euz ho bro, ha pa lavare d'ezho ar baianet : « Kanit d'eomp unan-bennak euz ar c'hanaouennou kaer, a ganech'g guechall e Jerusalem ? » — « Ha penaoz, emezho, e c'helfemp-ni kana hor c'hanaouennou santel, p'emaomp dianveaz hor bro ? » « O Jerusalem, a lavarent etrezho, ra zec'ho va divrec'h diouz va diouskoaz, mar teuan biken d'hoc'h ankounac'haat ! Ra stago va zeod ouz va staon, ma ne lakan ket va vlijadur da zonzal'ennhoc'h bepret !!! »

Ann Aotrou-Doue en devoa kaset ar prophet Ezechiel d'ar Iuzevien, evit rei kalon d'ezho, da c'hortoz dont en-dro da Jerusalem. Dek vloaz ha tri-ugent oue red d'ezho chom e Babilon..... Eunn dervez, Nabukodonosor a reaz sevel eunn idol aour, hag a c'hourc'hemennaz da gement a ioa e karg stoui ha daoulina dirazhi. Bez e z'oa, enn amzer-ze, tri zen iaouank e servich ar Roue, Iuzevien oant ho zri, hag hi a lavaraz ne adorjent ket ann idol-ze. Ar Roue, kounnaret enn-ho-eneb, a ra gori eur fourn, ha, pa z'eo ruz-poaz, teuler e-kreiz ann tri zen dizentuz. Ann dud, o devoa ho douget d'ar fourn, a ioa bet mouget gant tomder ann tân; ann tân a zevaz ive al liammou, a ioa var-dro ann dud yaouank, mez ne reaz drouk ebet d'ezho. E kreiz ar flammou-tân, oue fresk d'ezho evel dindan ar gliz, hag hi 'gane eno meuleudiou d'ann Aotrou-Doue. Nabukodonosor he-unan a deuaz da c'houzout ho doare, hag a jomaz spontet :

« Tri em boa lavaret teuler er fourn, emezhan, hag e m'aint pevar ebarz ! » Ia, pevar oant, evel ma lavare; mez ar pevare a ioa eunn eal, deuet a-berz Doue da gaout ann tri verzer. Ar Roue a lavaraz neuze : « Doue ar Iuzevien n'en deuz ket he bar evit ober vad : ra vezo lakeat d'ar maro ann neb a voall-gomz anezhan ! »

Goulennoù.

Piou en devoa dismantrèt ar gear a Jerusalem ? — Da be-leac'h oue bet kaset ar Iuzevien ? — Petra 'gane ar prophet Jeremi ? — Ar Iuzevien, hag hi o devoa dalc'het sonj euz ho bro ? — Pegeit amzer int bet chomet pell diouz Jerusalem ? — Perak en devoa Nabukodonosor taolet tri zen yaouank enn tân ? — Petra 'zigouezaz gantho er fourn ?

XXIV

Ar prophet Daniel.

Etouez ar Iuzevien kaset da Vabilon ez oa tud a renk huel : ar Roue Nabukodonosor a gemeraz meur a unan euz ar re iaouank anezho evit servich enn he di, ha deuet mad ouent holl gant-han, daoust ma choment fidel da lezenn Doue. Unan euz ar re yaouank-ze, hag heb douetanz ann desketa, oue Daniel.

Ar Roue Balthazar, o veza roet eul lein-vraz d'ann duchentil euz he rouantelez, a reaz digass, epad m'edont ouz taol, ar C'haliriu sakr euz templ Jerusalem, evit eva gantho. Mez kerkent e oue guelet eunn dourn hag a skrive geriou var ar voger, ha den ebet ne c'helle ho lenn. « It da glask Daniel, eme Valthazar, ha goulenit outhan

petra eo. » Daniel ne oue ket bet diæz dezhan lenn ar geriou burzuduz, hag e lavaraz d'ar Roue : « Pec'het o peuz eneb ho Toue, o kemer ann traou gouestlet d'ezhan ; setu perak en deuz skrivet ar geriou-ma dirak ho taoulagad : *Manè, Thècel, Pharès !* — *Manè*, da lavaret eo, merket en deuz Doue ann derveziou euz ho puez, ha setu erru ann termen anezho ; — *Thècel*, da lavaret eo, pouezet en deuz ho meritou, hag en deuz ho c'havet re skanv ; — *Pharès*, da lavaret eo, ho rouantelez a vezo rannet etre oc'h enebourien. »

Guir mad en devoa komzet Daniel, rak bez' ez 'oa eunn niver braz a zoudarded gant ar Roue Cyrus en-dro d'ar gear a Vabillon, hag, enn noz-ze zoken, hi a gavaz ann tu da vont ebarz. Balthazar a ioa bet lakeat d'ar maro.

Guellloc'h oue digemeret c'hoaz Daniel, gant ar mestr nevez, eget gant ar re a ziagent ; aliez ar Roue a c'houlenne kuzul diganthan, hag eur vech, hen' lavaraz : « Perak eta ne vennit ket, c'houi, adori ann aer a zo Doue ganeomp-ni ? » — « Nan, eme ar prophet : ne adoran, me, nemed ar guir Doue ; ann hini a adorit, c'houi, n'eo nemed eunn aer ; ha, mar karit, e z'an d'her laza heb kleze na baz ebet ! » — « Mad ! Lazit anezhan, 'ta, mar gellit ! » Daniel a gemer soa, peg ha bleo, a ra'vel eur voastell gantho, hag ho zaol e ginou ann aer. Ann aer ho lonkaz, mez mervel a reaz diouc'h-tu. « Sellit brema, eme ar prophet, peseurt Doue o peuz ! »

Mez dre'n'abek kement-ze, ar baianet o devoa kassouni, hag a lavare : « Setu deut ar Roue da veza iuzeo : lezet en deuz ann aer da veza lazet ! » En em zestumm a rejont eur vanden anezho en-dro d'ar Roue ; hag hi d'en em glemm, da lavaret,

drouk enno : « Taolit Daniel d'eomp, pe ni ho lazo, c'houi hag ho tud. » Ar Roue a garie kalz Daniel ; mez ne grédaz ket goulzskoude, gant aoun rak ar bobl, hen difenn eneb ar baianet.

E Babilon ez' oa eunn toul doñ, ha seiz lion ebarz : daou ejen ha daou benn-danvad a rankent da gaout bemdez da zibri ; mez enn derveziou-ze oant bet dalc'het var iun, hag ar baianet a daolaz d'ezho ar prophet Daniel.



Ar prophet Daniel e toul al leoned.

D'ar seizvet dervez, ar Roue a ieaz da velet petra ioa digouezet gant ar prophet e toul al leonet, hag ankenn braz en devoa. Sellet a ra, hag e chom sebezet : edo eno Daniel, azezet e kreiz al loened gouez. « Ah ! emezhan, nag eo braz ann Doue a adorit ! » Neuze e lavaraz tenna Daniel er

meaz, ha teuler ebarz enn he blas ann idolatred a glaske ober drouk d'ezhan. Ar re-ma oue stlapet d'al leounet, ha lonket gantho enn eunn taol. Daniel en deuz lavaret ive d'ar Iuzevien : « Tos-tât a ra ann amzer, ma teuio ar Messi, ha lakeat e vëzo d'ar maro. »

Kaout a c'heller c'hoaz e buez Daniel eur merk euz buez ar Messi : ann idolatred, destumet endro d'ar Roue evit goulenn ma vëzo lazët Daniel, a zigass sonj euz ar re destumet endro da Bilat, evit goulenn ma vëzo krusifiet Jezuz.

Goulennou.

E peleac'h e chome ar prophet Daniel ? — Petra en devoa diskleriet d'ar Roue Balthazar ? — Perak oue bet taolet Daniel e toul al leouned ? — Petra o devoa great al leouned d'ar prophet, ha petra, d'ann idolatred ? — Petra en deuz diskleriet Daniel d'ar Iuzevien ? — Penaoz e kaver e büez Daniel eur merk euz buez ar Messi ?

XXV

Esther.

Enn amzer Assueruz, Roue Babilon, ez' oa eur verc'h yaouank, hanvet Esther, hag e chome gant he eontr Mardochée er gear-benn euz ar vro. Hi a blijaz d'ar Roue ; hag, heb gouzout euz a beleac'h oa, hen a gemeraz anezhi da bried. Mardochée goulzkoude ne bellea ket diouc'h he nizez, rak aoun en devoa ne vije chomet heb miret lezenn Doue, etouez ar baianet : bepret eta ec'h en em zalc'he dirak dor ar palez ; hag eur vech, e kavaz ann tu da glevet eno daou-zen o devoa

lakeat enn ho zonj laza ar Roue Assueruz. Ker-kent e kassaz ar c'helou-ze da Esther, hag ann daou vuntrer oue anavezet, ha lakeet d'ar maro.

Er mare-ze, Assueruz a roaz ann huëla karg euz he rouantelez da Aman ; ha kalon ann den-ma a fougeaz kement, e kreiz ann henoriou, ma felle d'ezhan lakât ann dud holl da stoui d'ann daoulin dirazhan. Mez biskoaz Mardochée ne ven-naz plega ; hag e rea poan da Aman guelet anezhan bepret azezet etal ann or, pa veze ar re-all holl daoulinet ; kounnar a zavaz ennhan abalamour d'ann dra-ze ; hag evit dont a-benn euz Mardochée, e reaz embann dre ar vro e vije lazët ar Iuzevien.....

Kerkent m'oue erruet gant Esther ar brud a gement-ze, hi ieaz da gaout Assueruz ; n'eder ket var c'hed anez'hi ; mez ar Roue a ziskenn divar he drôn, d'he digemer, hag a lavar d'ezhi gant madelez : « N'o pezet ket aoun, Esther ; petra o peuz c'houi da c'houlenn ouzinn ? » — « Eunn dra hebken, emezhi, a c'houlennan : ma plijo gant va mestr dont varc'hoaz da leina ganen, ha ma teuio Aman ive ganehoc'h. »

Enn dervez-ze Aman a ioa laouenn-braz, hag e lavare d'he vaouez : « Sellit eta pegen henoret oun-me ! Ar Rouanez n'e deuz ket pedet hini-all da leina ganthi, nemet Assueruz ha me. Goulzkoude, emeza, netra ne rei plijadur d'inn, keit ha ma vëzo Mardochée var va hent, ha ma chomo heb ober vãn ebet ac'hanon ! » — « Penaoz ! a respont he vaouez, ne c'hellit ket sevel eur groaz, evit ma vëzo krouget ann den-ze diouc'h-tu ? » — « Guir-mad a lavarit, » emezhan ! Hag Aman a lakâ sevel eur groaz evit Mardochée.

Enn noz varlerc'h, Assueruz ne c'helle ket

kousket. En em lakât a ra neuze da lenn, ha da zonzal er pezh a ioa erruet ganthan, abaoue m'oa Roue; merket oue bet, var al lev, penaoz en devoa Mardochée diskuliet daou vuntr'er : « Petra 'zo bet roet, emezhan, d'ann den-ze, en deuz save-teet va buez d'inn? » — « Netra, » a respontaz ar zervicherien. — « Netra? Kerzit eta buhan da glask Aman. » Just, edo Aman o c'hortoz, rak doñt a rea da c'houlenn krouga Mardochée. « Aman, a lavar ar Roue d'ezhan, petra 'rankan-me da ober da unan em beuz c'hoant braz da henori? » Aman a grede oa anez'han e komse Assueruz. — « Red e ve, emezhan, guiska d'ann den-ze mantel ar Roue, lakât kurunen ar Roue var he benn, hag ober eunn dro bale ganthan dre gear, var marc'h ar Roue : ar c'henta euz prised



Mardochée henoret.

ar palez a zalc'ho penn ar marc'h, hag embannet e ve : « Setu penaoz e vez henoret ann hini en « deuz c'hoant ar Roue da henori ! » — « Mad, eme ar Roue, grit eta henor da Vardochée, er mod m'o peuz lavaret. » Chom a reaz Aman mantret ; mez senti a rankaz d'ar Roue, ha red oue mont.

Varlerc'h ann dro-bale, Aman a redaz da guzat ; ha gouela 'reaz, kement a zrouk a ioa ennhan. Goulzkoude ann dervez-ze oa dervez al lein, e ti ar Rouanez ; hag e teujer d'her c'hask evit leina ganthi. « Petra 'o peuz da c'houlenn diganen, eme Assueruz da Esther epad lein. Me 'roio dehoc'h ar pezh a geroc'h, ha pa ve ann hanter euz va rouantelez ! » — « O va mestr, a respontaz Esther, saveteit ac'hanon ha saveteit va fobl, rag ni dle beza lakeet d'ar maro. » — « Ha piou gred ober eur seurt tra ? » — « Piou ? Aman eta, hon enebour touet. » Assueruz, souezet muioc'h-mui, a zao diouc'h taol, ha nebeut varlerc'h e ma krouget Aman ouz ar groaz en devoa savet evit Mardochée.

Ar Rouanez Esther a zigass sonj d'eomp euz ar Verc'hez Vari. Ar Verc'hez Vari a zo Rouanez ann env, ha bep-vech ma c'houlenn eur c'hass ben-nak, ar Roue Jezuz a ro d'ezhi he goulenn, evel m'en devoa Assueruz roet he goulenn da Esther. Hi 'zifenn ar bobl kristen eneb ann diaoul, evel m'e devoa Esther difennet he fobl eneb Aman.

Goulennou.

E pe vro e veve Esther, ha gant piou ? — Perak e chome he contr ganthi ? — Pe vad en devoa great Mardochée evit Assueruz ? — Piou oa ministr Assueruz ? — Penaoz e kemeraz

Aman kassouni ouz ar Iuzevien ? — Penaoz e devoa Esther kavet ann tu da denna karantez ar Roue varnezhi ha var ar Iuzevien ? — Penaoz ec'h erruaz gant Mardochee ann henor en devoa goulennet Aman evithan-he-unan ? — Penaoz ec'h erruaz gant Aman ann drouk en devoa klasket ober da Vardochee ? — Penaoz ar Rouanez Esther a zigass sonj euz ar Verc'hez Vari ?

XXVI

Tobi.

Ar Iuzevien a ioa bet kasset d'ann harlu, lod e bro Niniv, lod all e bro Babilon : e bro Niniv ne jomaz kazimant den ebet fidel da Zoue : holl oant deuet da veza paianet.

Bez' ez' oa unan goulzkoude hag a zalc'haz bepret d'al lezenn, daoust d'ar fallagriez a ioa enndro d'ezhan : Tobi oa hanvet.

Tobi n'en devoa ken evez nemet da ober vad : mont a rea da velet ann dud poaniet, evit kass ann aluzenn d'ar re-baour, ha louzeier d'ar re glanv. D'ann noz, ec'h enterre ar re varo a veze dilezet aliez var ar blasenn.

Ha gouskoude n'oa ket goall-binvidik, hag ouspenn, e koezaz c'hoaz trubuil varnezhan : dont a reaz da veza dall. Mez Tobi n'en em glemme a netra, pasianted en devoa evel ann den santel Job, hag he vaouez Anna a laboure evitho-ho-daou.

Eur mab en devoa, hag araok mervel, setu ama ann aliou mad, a roaz d'ezhan : « Va mab, emezhan, va zelaouit-me, ha dalc'hit sonj enn ho kalon euz ar pezh a lavarinn dehoc'h.

« O pezet sonj euz ar boan e deuz bet ho mamm

d'ho sevel : henorit anez'hi bepret. Ne rit biskoaz d'ar re all ar pezh ne garfec'h ket a ve great dehoc'h-hoc'h unan. Goulennit ato kuzul digant ann dud fur. Roit ann aluzenn diouc'h ho tanvez : kalz, m'o peuz kalz, nebeut, m'o peuz nebeut, mez ato a galon vad. Pedit ann Aotrou-Doue d'ho kouarn, ha n'o pezet aoun rak netra. Va mab, stard eo d'comp beva dre-ama ; mez pinvidik e vezimp eunn dervez, mar karomp suji da Zoue hag heul he lezenn. »

Tobi a lavaraz c'hoaz : « Arc'hant em beuz prestet da eunn den hanvet Gabelus hag a jom pell ac'hann, e Rajès ; d'he gaout em beuz c'hoant ho kass. »

Ar paotr a ioa hanvet Tobi evel he dad, hag a respontaz : « Ar pezh o peuz lavaret d'inn da ober a vezo great ; mez evit ann arc'hant-ze, ne c'houlzon ket ann hent da vont d'her c'hask !

— « Va mab, c'hui gavo unan bennak da ziskuez ann hent dehoc'h... »

Just d'am ampoent, epad ma komsent, e tigouez eunn den etal ann or, eunn den yaouank a zoare, hag a ioa tiz varnezhan da vont pell.

« A beleac'h oc'h-c'houi ? » a c'houlennont out-han.

— « Me'zo, me, a bobl ann Aotrou-Doue, » emezhan.

— « Ne anavezit ket ann hent da Rajès ?

— « M'hen anavez mad : bet oun bet aliez eno, e ti eunn den hanvet Gabelus.

— « Ne garfec'h ket, eme Tobi, diskuez ann hent d'am mab ?


— « Ma kar ho mab dont ganen, a respont ann dianvezour, me her c'hasso da Rajès, hag hen digasso enn-dro, iac'h mad hag heb drouk ebet.

— « Kerzit eta, va bugale, dindan skoazell Doue, ha plijet ganthan digass eunn eal evit ho ren betek ann distro ! »

Ann den yaouank-ze oa ann eal Raphaël, mez Tobi ne c'houie ket.

Mab Tobi oue buhan prest, kemer a ra he gi ganthan, hag hen, enn hent gant ann dianvezour. Setu hi erruet, var-dro ann noz, e kichen eur ster vraz, ha Tobi a ioa diskennet var ribl ar ster, evit goalc'hi he dreid. Mez eur pesk euz ar re vrassa a zaillaz a-benn d'ezhan enn eunn taol, ha Tobi oue spontet. « Krogit ennhan, heb aoun, a lavaraz ann eal, hag hen tennit ganehoc'h. »

Goude m'en devoa tennet ar pesk er meaz euz ann dour, e skarzaz anezhan ; « rak, a lavare c'hoaz ann eal, ni hen debro enn hent ; hag enn



Tobi a denn eur pesk er meaz euz ann dour.

diabarz e z'euz danvez louzou ; he vestl a vezo mad evit ann daoulagad. »

Euruz oa bet ho zro gantho penn-da-benn, ha digemeret mad oant bet.

Goulzkoude kerent Tobi a ioa nec'het braz ne deue ket d'ar gear, hag he vamm Anna ne rea nemet huanadi : « Perak, emezhi, kass ar paour-keaz paotr-ze ker pell-all ? Guelloc'h oa d'eomp derc'hel hor mab ha koll ann arc'hant ! » Hi iea var eur menez bemdez da velet peur e tigoueje he faotr enn-dro.

Er-fin eunn dervez, her guelaz o tistrei ; ha setu hi da redet d'ann ti, buhana ma c'helle : « Erru eo ar paotr, emezhi, erru eo ! » Ki ar veajourien a ioa deuet enn-ho-raok, hag hen a droe hag a zistroe, hag a fiche he lost, tro var dro da Dobi-goz, evit rei da anaout d'ar paour-keaz dall oa erruet ann dud.

Gouela 'reant, koz ha iaouank, gant al levenez. Ar paotr a frottaz diouc'h-tu daoulagad he dad gant vestl ar pesk, ha kerkent ann den santel Tobi a velaz ker mad ha diagent.

Tobi a ginnik neuze d'he vignoun ann hanter euz he vadou, mez hen a respont : « Nan ; trugarekait hebken ann Aotrou-Doue, rak mad eo bet evidhoc'h. Pa bedac'h ha pa'z eac'h enn noz da zebelia ar re-varo, me 'zouge ho pedennou betek Doue, ha brema ann Aotrou-Doue en deuz va digasset evit ho parea ; me eo ann eal Raphaël. » En eur glevet ar c'homzou-ze, hi a gouez d'ann daoulin, hag ann eal a ia kuit.

Ann histor-ma, histor Tobi a zigass sonj d'eomp e tleer ober vad d'ann nessa, guella ma c'heller, hag en deuz peb-unan eunn eal enn he gichen, evit her gouarn korf hag ene.

Goulennou.

E pelec'h e chome Tobî ? — Oc'h ober petra e tennaz bennoz Doue varnezhan ? — Penaoz e oue erruet drouk ganthan ? — Pebez aliou a roaz Tobî d'he vab araok mervel ? — Pïou en devoa diskouezet ann hent da baotr Tobî ? — Petra erruaz ganthan var ribl ar ster ? — Penaoz en devoa paotr Tobî pareet daoulagad he dad ? — A betra e tigass sonj d'eomp histor Tobî ?

XXVII

Eleazar hag ar seiz breur Makabée.

Dek-vloaz ha tri-ugent e chomaz ar Iuzevien er meaz euz ho bro ; varlerc'h ann termen-ze er-fin, ar Roue a Vablon ho lezaz da zont enn-dro, ha da zevel a nevez ann templ e Jerusalem.

Kastizet oant bet rust, ha skuillet o devoa eleiz a zaelou ; mez, siouaz ! ar Iuzevien a ioa henvel ouz bugale dibenn ha digalon : kaer a zo ho c'helenn, ober vad d'ezho, ne reont nemeur a vann. E berr-amzer e teujont da veza falloc'h eget biskoaz. Doue a skuizaz gantho, ha pa velaz he bobl o trei kein d'ezhan, en despet d'ann aliou mad ha karantezuz a gasse d'ezho, ho lezaz da goueza etre daouarn Antiokuz.

Antiokuz a ioa eur Roue paian. Lazet en devoa ann darn-vuia euz ar Iuzevien, hag oa sonj ganthan distaga ar re-all diouz lezenn Doue, dre nerz pe dre-gaer. Mez, e mesk ar re-falla, e vez bepret unan bennak hag a ziskuez, gant sikour Doue, penaoz e tleer beva, ha penaoz, mar d'eo red, e tleer mervel.

E Jerusalem ez 'oa eunn doktor braz hag ana-

vezet mad : Eleazar, he hano. Antiokuz a vennaz lakât ann den-ze da ober eur pec'hed, en eur zibri kig gouestlet d'ann idolou : « Nan, eme Eleazar : ar vuez ne dal ket beza prenet gant eur pec'hed ; guell eo ganen mervel. »

Meur a hini a gemeraz truez outhan, hag a lavaraz : « Grit hebken ann neuz da zibri, hag e vezo kredet o peuz sentet d'ar Roue.

— « Nan, emezhan : ne zere ket ouz eunn den a zek vloaz ha pevar-ugent ober ar pez a lavarit : ann dud iaouank a gredfe e ma deuet Eleazar da veza paian ! Hag ouspenn, petra dal d'inn-metec'het araok ar Roue, p'e guir ne c'hellan ket tec'het araok ann Aotrou-Doue ? Setu perak eo guelloc'h ganen mervel brema, evit diskuez d'ar re iaouank penaoz eo red derc'hell stard d'al lezenn. »

Kerkent oue bet lakeat d'ar maro.

Eur skuer vad a zoug ato frouez : ar pez en devoa great Eleazar, seiz paotr yaouank hag ho mamm o deuz bet kalon aoualc'h evit ober ar memez tra : Hounnez eo histor ar seiz breur Makabée.

Eunn nebeut goude maro Eleazar, oue digasset eur vamm dirak ar Roue, hag he bugale ganthi : seiz paotr oant. Antiokuz a lavar d'ezho dibri ar pez a ioa difennet gant ho lezenn : « Rak, emezhan, ne z'euz mui lezenn ebet nemet hini ar Roue. »

Ho mamm a respontaz : « Ne zebrimp ket ! » Hag ar paotr kossa a lavaraz c'hoaz : « Guell eo ganeomp mervell ! »

Glask a reaz neuze Antiokuz dont a-benn anez-


ho : lakât a eure ho merzeria, ann eil varlerc'h egile, dirak ho mamm.

Trouc'het oue bet he deod d'ar c'henta, diskro-
c'hennet oue bet he benn, ha trouc'het he vizied;
ha goude m'oue bet lakeat er stad truezuz-ze,
oue taolet enn tân da zevi.

He vamm hag he vreudeur a ioa o sellet out-
han, hag ar pezh a velent a roe muioc'h - mui a
galon d'ezho, evit dere'hell stard d'ho lezenn.

Ann eil varlerc'h egile, oue bet draillet ho holl
izili d'ezho, hag hini ne ziskuezaz en devoa tamm
keuz ebet da vervel : « Ah ! a lavaraz unan anez-
ho, c'houi a lamm diganen ar vuez-ma ; mez ann
Aotrou-Doue a roio eunn all d'inn enn he leac'h,
hag a bado da viken. »

Nec'het braz oa ar Roue o kaout tud da her-



Ar seiz breur Makabée hag ho mamm merzeriet.

zell kement outhan, ha melkoni en devoa, ma ne
c'helle ket dont a-benn euz bugale ken dister.

Unan a jome c'hoaz, ar iaouanka : ar Roue a
glaskaz her gounit dre gaer. Mez ar paotr ne rea
vân ebet anezhan. « Grit d'ho mab senti ! » a lavar
Antiokuz d'ar vamm ; hag ar vamm a dosta ouz
he mab : « Va c'hrouadur, emezhi, n'o pezet ket
aoun, ha dalc'hit mad evel ho preudeur, evit m'en
em gavimp, ann eil hag egile, er Baradoz ! »

Ar paotrik a gri neuze, a bouez he benn : « Perak
e taleit ? N'eo ket da lezenn ar Roue e vennan-me
senti, mez da lezenn Doue... Evid'hoc'h c'houi,
Antiokuz, ho tro a zeuio ive, ne vezo ket pell, da
goueza etre daouarn ann Aotrou-Doue ! »

Koll a reaz Antiokuz he benn o velet hag o
klevet ann dra-ze ; hag e lakeaz ar c'hrouadur
da c'houzanv poaniou krissoc'h c'hoaz eget he
vreudeur.

Er-fin, mamm ar verzerien, goude m'oue bet
lazet he bugale dirak he daoulagad, a oue laz et
he-unan.

Mamm ar seiz Makabée a zo eur skuer-vad evit
ar mammou kristen ; rak, daoust m'az oa anken-
niet he c'halon, ne ehanaz ket da lavaret d'he
bugale : « Guell eo mervel eget displij da Zoue. »

Ar Makabeet a zo eur skuer ive evit ar vugale :
guell eo mervel eget ober eur pec'hed ! Ar maro
a zigor ar Baradoz d'ann dud vad, ar pec'hed a
zigor ann Ifern.

Goulennoù.

Ped vloaz oant chomet ar Iuzevien er meaz euz ho bro ? —
Perak ann Aotrou-Doue en devoa lezet he bobl da goueza enn-
dro dindan galloud eur paian ? — Pe hano en devoa ar Roue
paian-ze ? — Petra felle d'ezhan da ober d'ar Iuzevien ? —

*Doue eo ar deus-se d'ann an eile-man ; eger ann deus-se
d'ann a-dreus ann deus-se a gaoz*

Piou en devoa kredet lavaret : « Nan ! » d'ar Roue Antiokuz ? — Petra en devoa respontet d'ar Roue, ha d'he genvroiz ? — Petra da entent dre ar gomz-ma : « Eur skuer vad a zoug ato frouez ? » — Petra 'felle d'ar Roue lakât ar seiz Makabée da ober ? — Petra en devoa respontet unan euz ar baotred ? — Petra 'lavaraz ar vamm d'ar bihana ? — Petra 'ziskleriaz d'ar Roue ? — Pebez skuer-vad a ro mamm ar Makabeet d'ar mammou kristen ? — Pebez skuer-vad a ro ar Makabeet d'ar vugale ?

XXVIII

Judaz Makabée.

Enn amzer Antiokuz, oa reuzeudik ha truezuz ho stad gant ar Iuzevien. Goulz Koude, m'az oa dibenn ha digalon ann darn-vuia euz ann dud, biskoaz n'euz bet gueleit tud startoc'h da zervicha ann Aotrou-Doue.

Kentoc'h eget plega d'ar falz-lezennou, lod a ioa maro, lod all a vrezellekeaz.

Eunn den a galon hag a feiz, hanvet Mathathiaz, a zavaz eneb ar re a glasse diskar ar Relijion etouez ann dud : « Ha pa zentfe holl ar re-all da lezenn Antiokuz, emezhan, na me na va bugale ne zentimp nemet da lezenn ann Aotrou-Doue ! »

En em denna 'reaz eta er meaz a gear, en eur lavaret a vouez huel : « Ann neb a gred da lezenn Doue hag a fell d'ezhan he miret, dont var va lerc'h ! » Ar skuer-vad en devoa diskuezet a roaz kalon d'ar re-all, ha stank oue ann dud en em zestumaz enn-dro d'ezhan. Hi a jomaz da vrezellekât var ar meneziou, diskar a reant bep emgann soudarded ar Roue, ar gounid a veze bepret gantho.

Goude m'oue maro Mathathiaz, Judaz Makabée, he vab, a zalc'haz da ober brezell gant ar pezik a dud a ioa gantho : « Dalc'homp ato, emezhan ; Doue ne zell ket mar deuz kalz a zoudarded, hen a lak ann neb a gar da c'hounit : deomp dindan bolontez Doue ! » Lakât a rea he genvroiz da bedi Doue ha da ober pinijenn ; ha n'oue ket da herpell outhan. Ann holl enebourien a ioa bet kasset kuit, ha Judaz Makabée a renevezaz ann ofisou santel er gear a Jerusalem.

Antiokuz a iezaz neuze kounnar ennhan : « Mont a ran, emezhan, me daolo Jerusalem d'ann traon ; hag ar Iuzevien a vezo sebeliet dindannhi. » Dont a reaz eta, ha mall en devoa d'en em gaout, mez edo ann Aotrou-Doue ouz he c'hortoz var ann hent... Koueza reaz divar he gar, he gorf oue draillet hag a deuz zoken da vreina : debret oue gant ar prened araok he varo, distaga 'rea ar c'hig tamm ha tamm diouc'h he eskern, hag ar c'houez euz he c'houliou a rea donjer d'ann neb a dostea outhan : skrijuz oa he velet o vervel.

Goulenno.

Penaos e tiskuezaz ann dud vad, enn amzer Antiokuz, oa stard ar feiz enn ho c'halon ? — Petra 'lavare Mathathiaz, pa vele kazimant ann dud holl o kemer gizio ar baianet ? — Penaos en devoa great evit destum tud da vrezellekât eneb ar Roue ? — Penaos o devoa brezellekeat ? — Pa oue maro Mathathiaz, piou en devoa kemeret he blass ? — Petra lavare Judaz Makabée evit rei kalon d'he zoudarded ? — Petra 'rea evit gounit ar victor ? — Pebez gourdrizou a reaz Antiokuz da Jerusalem ? — Petra oue erruet gantho enn hent ? — Gant pe-seurt klenved e man maro ?


XXIX

Tostât a ra ar Messi.

Enn amzer-ze, ann douar holl, koulz lavaret, a ioa dindan galloud Rom : euz ar sao-heol betek ar c'huz-heol, ar Romaned a ioa ar vistri, hag hi a lakeaz Herodes da veza Roue e bro ar Iuzevien.

Tostât a ra ann amzer merket gant ar propheet; kaer eo gouzout e ma ar Messi dindan dont, rag ar Roue Herodes a zo eunn dianvezour, hag, evel m'en devoa diskleriet Jacob, e tlie ar Messi dont var ann douar, pa vije deuet eunn dianvezour da veza Roue ar Iuzevien.

Ha guir eo, e ma ann dud var c'hed euz eur Zalver.



Ar prophetet.

Komz a zo anezhan e kement leac'h; ha mall-braz eo ma teuio : rak etouez ar Iuzevien evel etouez ar baianet, var voassât ez 'ea ann traou.

Lod euz ar Iuzevien o devoa ann doare da veza tud vad, mez n'o devoa nemet ann doare: ne z'euz enn ho c'halon nemet gevier ha fallagriez : ar reze eo ar pharizianet.

Lod euz ar baianet, ive, a zo tud desket; mez hini ne anavez ann Aotrou-Doue, ha gounezet oa ann holl gant ann techou mezussa.

Ezomm a ioa eta da voalc'hi ann douar, evel guechall, enn amzer ann diluj; mez e leac'h he goalc'hi, ar vech-ma, gant eunn diluj dour, Doue a zisklenno he-unan evit renevezi peb tra, hag eo gant he c'hoad e voalc'ho ann douar brema....

D'ar mare ma teu ar Messi da lammet pec'hed hon tad kenta Adam, e z'euz ouspenn pevar mil bloaz m'eo bet an den kasset kuit euz Baradoz ann douar.

Goulennou.

Piou a ioa bet lakeat da veza Roue ar Iuzevien enn amzer ar Romaned ? — Petra dlïe erruout, pa vije deuet eunn dianvezour da veza Roue, e Jerusalem ? — Petra en devoa diskleriet Jacob ? — Peseurt ezomm en devoa ar bed euz donedigez eur Zalver ? — E pe stad ec'h en em gave ar Iuzevien hag ar baianet ? — Petra en devoa great ann Aotrou-Doue, ar vech kenta, p'edo ar gounit d'ar fallagriez var ann douar ? — Petra reio ar vech-ma ? — Pegeit amzer a ioa tremenet araok donedigez hor Zalver ?

**Ama eo echu ar pezh a hanver
ann Testament Koz.**

Brema e tigouez ann Testament Nevez.



ANN

TESTAMANT NEVEZ



Noz Nedelek.

ANN TESTAMANT NEVEZ

JEZUZ,
ENN AMZER M'OA IAOUANK.

I Kerent Jezuz.

Biskoaz ar bed ne vije bet salvet, ma ne ve ket deuet ann Aotrou-Doue he-unan var ann douar, evit savetei ann dud; gortoz en devoa great pevar mil bloaz : setu hen o tont evelkent.

Sant Joachim ha santez Anna. — Var-dro ann termen-ze, e z'oa daou bried, hanvet Joachim hag Anna : kalz a zanvez n'o devoa ket, petra bennak m'az oant heritourien ar Roue David ; hag oajet braz oant ho daou. Miret a reant mad lezenn Doue, hag hi eo a dlle beza tad ha mamm d'ar Verchez.

Anaout a reer, bete-vrema, teir vamm hag a ioa ho hano Anna : mamm Samuel, mamm Tobi, mamm Mari : teir vamm o deuz gouezet sevel ho bugale hervez bolontez Doue. Komz a reer c'hoaz euz eunn all hag a ioa intanvez ; chom a rea deiz ha noz e ti ann Aotrou-Doue, ha ne ehane ket da

bedi : hounnez eo a velaz ar Messi, pa oue bet douget Jezuz d'ann templ.

Genel a reaz eur verc'hik da Joachim ha da Anna, hag hi he galvaz Mari ; ne z'euz bet biskoaz, ha biken ne vezo, krouadur ebet ker santel hag hi ; heb pec'het oue konsevet ; biskoaz ann distera blonsadur ne dosteaz ouz he c'halon, hag ann elez, er Baradoz, ne velent netra kaeroc'h, eget ene ar verc'hik-ma.



Santez Anna hag ar Verc'hez.

Ar Verc'hez Vari ha sant Joseph. — A vihanik, ar Verc'hez en em voestlaz da Zoue, ha, pa oue deuet enn oad, hi a gemeraz eur pried hanvet Joseph, evit lakât he guerc'hded dindan skoazell eunn den santel.

Joseph a ioa micherour, er gear a Nazareth,

*Gabriel a vez kaset
he ren : e vije m'ed k'ell he guerc'hded
dehoaz : Santez Elizabeth* — 89 — *ann d'hoaz zo deuet p'el tra
fur ha santel oa, 'vel ma tlie beza, 'vit gouarn ar
Verc'hez.*

Eunn dervez m'edo ar Verc'hez Vari o pedi enn he zi, ann eal Gabriel a ia d'he c'haout, hag a lavar d'ezhi : « Me ho salud, emezhan, c'houi a zo leun a c'hras, ann Aotrou-Doue a zo ganehoc'h, benniget oc'h dreist ann holl gragez. »

O klevet ar c'homzou-ze, hag o velet, enn he zi, eunn eal hag a ioa henvel ouz eunn den yaouank, e krenaz he c'halon ; mez ann eal a lavaraz c'hoaz : « N'o pezet ket aoun, ô Mari ! » hag e c'houlennaz diganthe, neuze, mar kare beza mamm da Zoue.

Ar Verc'hez Vari a jome heb respont. Goulz-koude pa lavaraz d'ezhi e vije mamm heb koll he guerc'hded, Mari a zeu da asanti : « Me 'zo servicherez da Zoue : ra vezo great ac'hanon hervez he volentez ! »

Kerkent m'e devoe lavaret « Ia », hi 'zeuaz da veza mamm : ann eil ferson euz ann Dreinded-Santel a ziskennaz var ann douar evit beza Salver ar bed, hag ar Spered-Glân a grouaz evithan eur c'horf hag eunn ene henvel ouz hon re-ni.


Santez Elizabeth ha sant Ian. — Ar Verc'hez Vari e devoa eur giniterv, hanvet Elizabeth, hag a jome pell diouz Nazareth. Hi 'dlie kaout ive eur c'hrouadur dindan berr-amzer.

Diouc'h-tu m'e devoa klevet ar Verc'hez ar c'helou-ze gant ann eal, e icaz abenn-kaer da velet he c'hiniterv. Houma, en eur ober digemer vraz d'ezhi, a anavezaz dre volentez Doue ar mister euz ann Inkarnasion : « Na penaoz, emezhi, e teu mamm ann Aotrou-Doue d'am c'haout ? Benniget oc'h dreist ann holl gragez, ha benniget eo ar

1. De la femme - 64. De la femme une jeune.

an droad ar mignon
 skipt eo l'annadur
 godel he gouchas
 an niver
 euz moud
 — 90 —

frouez a zougít. » Ar Verc'hez a ganaz neuze eno evit ar vech kenta ar *Magnificat*, da drugarekât ha da veuli ann Aotrou-Doue.



Ar Verc'hez a ia da velet santez Elizabeth.

Tri miz varlerc'h oue ganet eur c'hrouadur da zantez Elizabeth, hag ann dud a lavare : « Petra 'gav d'ehoc'h e vezo ar c'hrouadur-ma ? » Tad ar c'hrouadur, hag a ioa mut bete-neuze, a respontaz : « Ian e vezo hanvet ; eur prophet e vezo, ha kerzet a rei araok ann Aotrou-Doue evit ober hent d'ezhan. »

Goulennou.

Piou ioa red d'ezhan dont evit ma vije saveteet ar bed ? — Pe hano o devoa tad ha mamm ar Verc'hez ? — Piou a ana-verzer bete-vrema hag a ioa hanvet Anna ? — A be-seurt lignez oa kerent ar Verc'hez ? — Lavarit peger santel oa, a

a c'hoarigez he mamm
 — 91 —

vihanik ? — Da biou e timezaz ar Verc'hez, ha perak e timezaz ? — Petra oa sant Joseph, hag e peleac'h e chome ? — Piou a ioa deuet da c'houlenn digant ar Verc'hez ma kare beza mamm da Zoue ? — Petra lavaraz ann eal ha petra respontaz ar Verc'hez ? — Da velet piou oa eat ar Verc'hez ? — Gant piou eo bet kanet ar *Magnificat* evit ar vech kenta ? — Pe hano a ioa bet roet da vab santez Elizabeth, ha petra en devoa diskleriet he dad evithan ?

II

Ginivelez Jezuz

Enn amzer ar Roue Herodes, ann Impalaer a Rom, August he hano, a lakeaz enn he zonz klask pegement a dud a ioa enn he rouantelez, hag embann a reaz da bep-unan mont da verka he hano er gear m'oa savet anezhi. Sant Joseph ha Mari, dre ma ouent ho daou euz lignez David, oa red eta d'ezho dont da gear ar Roue David, e Bethleem. Pa zigouejont, oa leun ann hostaleriou hag ann tiez gant ann niver braz a dud a ioa deuet ; ne z'oa leac'h ebet da dremen ann noz evit ann daou bried, nemet eur c'hraou, er meaz a gear.

Er c'hraou-ze, var-dro hanter-noz, eo deuet hor Zalver-Jezuz-Krist er bed. Ar Verc'hez-Vari, he vamm, her mailluraz hag hen astennaz eno, var eur dournad plouz, rak n'e devoa evithan na guele na kavel ebet. Daou loen hebken, hervez ma leve-*hender* rer, a ioa enn-dro dezho, eunn ejen hag eunn azen, evit toma ar c'hrouadur.

Bez 'ez 'oa pastoret o tiouall ho loenet var ar meaz tro var dro, ha setu eunn eal o tiskenn d'ho

eun dornal. eun dornal. eun guchin eun moud. eun bannal
 eun naderit filiz
 P. 1890 a ioa 200 200

c'haout, hag eur sklerijenn gaer o para. Hi a gemeraz aoun o velet kement-all. « N'o pezet ket aoun, emezhan, rak dont a ran da lavaret dehoc'h eunn dra hag a rei plijadur vraz : Ganet eo ar Messi, hirio e ma ganet, enn ho kichen, hag e vezo eaz dehoc'h hen anaout; c'houi a gavo eur c'hrouadur enn eur c'hraou, mailluret paour, gourvezet var eunn nebeut plouz : Héñ eo ! »

Kerkent hi a velaz hag a glevaz eur vandenn all a elez o nijal, o tont, ha kana 'reant : « *Gloria in excelsis Deo*, Gloar da Zoue e barr ann envou, ha peoc'h var ann douar d'ann dud a volentez-vad ! »

Pa oue eat ann elez kuit, ar bastoret a lavare ann eil egile : « Deomp da Vethleem, ha guelomp petra eo. » Mont a rejont eta, hag hi a gav, evel ma z'oa bet lavaret d'ezho, Joseph ha Mari, hag eur c'hrouadurik gantho var ar plouz. Hi a bleg ho daoulin dirazhan, ha goude beza hen adoret, a zistro var-dro ho loened en eur gana meuleudi da Zoue.

Eiz dervez varlerc'h, oue bet roet dezhan ann hano a JEZUZ, hag hanvet mad oa, rak ar ger-ze a zo ar memez tra gant SALVER : deuet oa Jezuz evit savetei ar bed.

Daou-ugent dervez goude, he vamm hen dougaz da Jerusalem, evel m'oa red kinnik da Zoue ar mab kenta ganet a bep tiegez.

Eunn den koz ha santel, hanvet Simeon, en em gavaz eno gantho, ha p'en devoa anavezet ann Aotrou-Doue, dindan eur c'horfig ken dister, e kemeraz ar c'hrouadur etre he zivrec'h, hag e lavaraz : « Breman, ô va Doue, va lezit da vervel, p'o deuz va daoulagad guelet Salver ar bed : Henez eo a zigasso ar sklerijenn d'ann dud holl. »

Gouennou.

Perak oa deuet sant Joseph hag ar Verc'hez da Vethleem ? — Perak n'oant ket diskennet enn hostaleri ? — E peleac'h oant en em dennet ? — Var-dro ped heur e ma ganet Jezuz ? — Piou eo ar re-genta deuet da adori Jezuz ? — Piou a ioa bet ouz ho c'hlask ? — Petra 'gane ann elez ? — Penaoz o devoa ar bastoret kavet Jezuz ? — Peur eo bet roet d'hor Zalver ann hano a Jezuz ? — Petra eo ann hano-ze ? — Peur, ha perak eo bet douget d'ann templi ? — Petra lavaraz Simeon en eur velet Jezuz ?

III

laouankiz Jezuz.


Ann tri Roue. — D'ann amzer-ze, e teuaz tri Roue da Jerusalem euz/bro ar sao-heol, hag hi lavare : « Ama eo ganet Roue ar Iuzevien ? Guelet or beuz he stereden, hag e teuomp d'hen adori. »

Pa glev ar Roue Herodes komz euz eur Roue nevez, e sao aoun ganthan da goll he rouantelez, hag e c'houlenn digant ann doktored e pe leac'h e tlie genel ar Messi. « E Bethleem, emezho, hervez ma lavar ar brophetet ! »

Neuze Herodes a lavar d'ann tri Roue : « It, ha klaskit ar c'hrouadur-ze. Ha pa vezo kavet ganehoc'h, deuit da zigass ar c'helou d'inn, ha me ielo, me, d'hen adori ive. »

La veac'h m'oue deuet ann tri Roue'er meaz a gear, ar stereden, o devoa guêlet enn ho bro, a bâr a nevez dirak ho daoulagad, hag ho c'hass betek ar c'hraou m'edo ar c'hrouadur. E ma Jezuz enô gant he vamm, hag hi da zaoulina dirazhan evit hen adori.

A. de Gouennou a vamm



Ann tri Roue.

Goudeze e tisplegont ann traou kaer o devoa digasset gantho, hag e kinnigont d'ezhan aour, ezans ha mirrh, evit diskuez oa guir Roue, guir Doue, ha guir den.


Ho zonzj oa mont varlerc'h da Jerusalem evit kass ar c'helou d'ar Roue Herodes, mez eunn eal a gemennaz d'ezho distrei d'ho bro dre eunn hent all.

Herodes, o klevet oant eat ann tri Roue d'ar gear dre eunn hent all, a ieaz eur gounnar spon-tuz ennhan. Kass a ra soudarded da Vethleem evit laza ann holl vugale ac'hano ha divar dro, betek ann oad a zaou vloaz : sonj en devoa, er giz-ze, laza Jezuz ive gant ar re-all. Mez eunn eal a deuaz, a-berz Doue, da lavaret da Joseph mont d'ann Ejipt gant ar c'hrouadur hag he vamm, ha chom eno, ken na vije roet kelou dezhan.

Ar Roue dinatur-ze oue skoet gant dourn Doue, Ar bloaz varlerc'h, eur c'hlenved euzuz a grogaz ennhan. Birvi a rea ar prênved enn he 'gorf, ha c'huez ker fall a ioa enn dro d'ezhan, m'oue lezet da vervel dilezet gant ann holl.

Pa oue maro ar Roue Herodes, sant Joseph, var gomz ann eal, a deuaz enn-dro da jom da Naza-reth.

Jezuz e kreiz ann doktored. — Sant Joseph hag ar Verc'hez Vari a iea bep bloaz da Jerusalem evit goueliou Pask. Jezuz a ieaz ive gantho d'ann



Jezuz e kreiz ann doktored.

oad a zaouzek vloaz, mez etouez ann niver a dud a ioa eno hi a gollaz ho mabik : chom a reaz var ho lerc'h, heb gouzout d'he dad ha d'he vamm. Goude beza he glasket epad tri dervez, var ann

hent hag e kear, her c'havjont enn templ. Azezet oa e kreiz ann doktored o tiviz gantho, hag ar re-man a ioa sebezet ouz her selaou. He vamm en em glemmaz gant dousder : « Perak, emezhi, ober d'eomp kement-all ? Setu tri dervez m'emaomp, ho tad ha me, poaniet ouz ho klask ! » — « Perak, a respont Jezuz, klask ac'hanon ? Ne c'houiec'h ket e tlien en em emell euz traou va Zad, pehini zo enn env ? »

Divar-neuze, Jezuz a labouraz var he vicher gant sant Joseph : sentuz oa, ha diouc'h ma kreske enn oad, e kreske e furnez hag e gouiziegez ive.

Betek ann oad a dregont vloaz e chomaz Jezuz e Nazareth : var-dro ar pred-ze, e varvaz sant Joseph.

Goulennou.

Petra en devoa roet sonj d'ann tri Roue da glask hor Zalver ? — Pe seurt sonj en devoa great Herodes pa glevaz komz euz eur Roue nevez ganet, ha petra lavaraz d'ann tri Roue ? — Penaoz e kavaz ann tri Roue ann hent euz Jerusalem betek ti hor Zalver ? — Pe seurt traou kaer o devoa roet da Jezuz, ha petra 'verke ann traou kaer-ze ? — Perak ann tri Roue n'oant ket deuet da gass ar c'helou d'ar Roue Herodes ? — Petra en devoa kemennet da ober evit kaout ann tu da laza Jezuz ? — Penaoz en devoa Jezuz tec'het enn he raok ? — Betek pegeit oue chomet Jezuz enn Ejipt ? — Gant pe seurt klenved eo maro ar Roue Herodes ? — Da be-oad oa eat Jezuz gant he dud da Jerusalem ? — Gant piou oa chomet var ho lerc'h ? — Evit petra e lavare oa chomet enn templ ? — Penaoz en deuz tremenet he amzer betek ann oad a dregont vloaz ?

JEZUZ,

ENN AMZER MA PREZEGE ANN AVIEL.

IV


Sant Ian Vadezour.

Jezuz a jomaz e Nazareth betek tregont vloaz, heb beza anavezet evit ar pezh ma'z oa. Mez pa dosteaz ar mare ma tlie en em ziskuez, e teuz eur prezezer da lakat ar bobl er stad da zigemer ar Messi. Sant Ian oa ar prezezer-ze.

Bevet en devoa ar Zant bete-neuze enn eul leac'h distro, ha pa deuaz ann heur da brezek, e z'ez var ribl ar Jourden, hag e lavare : « Grit pinijenn : tostât a ra Rouantelez Doue ! » Goall-galed oa he vuez : n'en devoa var he gein nemet eur vantel great gant bleo kanval, ha ne zebre nemet killeien-raden hag ar mel a glaske er c'hoajou. Ann dud en em zestume enn-dro dezhan, hag e prezege, e vadeze, lod a grede oa hen ar Messi : « N'e ket me ar Messi, emezhan, dont a ran da gempenn ann hent dirazhan ; tost eo, e ma enn ho touez. »

Eunn dervez, Jezuz a deuaz ive e-mesk ann dud all, evit beza badezet ganthan. Hag e lavare sant Ian : « D'inn-me eo kentoc'h beza badezet ganehoc'h ! » — « Nan, a respont Jezuz, va lezit da ober ar pezh a dle beza great ! » Jezuz a ziskenn eta er ster evit beza badezet, ha pa deu er meaz,

ann env a zigor, hag e oue gullet ar Spered-Santel dindan furn eur goulm dreist he benn, ha klevet eur vouez a lavare : « Hema eo va mab muia-karet, va holl levenez em beuz lakeat ennhan. »



Jezuz badezet gant sant Ian.

Da c'houde ann dervez-ze, sant Ian ne ehane da lavaret : « Setu ann hini a c'hortozec'h : hennez eo ! »

Sant Ian a brezege stard enep ann techou fall, hag ar re a rene eur vuez direol o devoa, dre n'abek kement-ze, kassouni outhan. Eunn dervez m'az oa eul lein vraz e ti ar Roue, eur verc'h iaouank a zanzaz dirazhan, hag a reaz kement a blijadur dezhan, ma lavaraz d'ezhi goulenn diganthan ar pez a garie, ha pa ve ann hanter euz he rouantelez. Hi a c'houlennaz penn sant Ian. Dibennet oue neuze sant Ian, ha digasset he benn var eur plad d'ar plac'h divergont.

Goulennou.

Perak en deuz prezeget sant Ian ? — E peleac'h en devoa bevet evit gortoz ann heur da brezek, penaoz oa guisket, ha gant petra e c'hen em vage ? — Petra brezege sant Ian ? — Petra zigouezaz pa oue badezet Jezuz gant sant Ian ? — Perak meur-a-hini a gemere kassouni ouz sant Ian ? — Piou en devoa goulennet ma vije lakeat sant Ian d'ar maro, ha perak ar Roue en devoa roet he goulenn d'ann danserez ?

V

Koraiz Jezuz-Krist.

Araok mont da brezek ann Aviel, Jezuz a jomaz daou-ugent dervez ha daou-ugent nosvez enn eul leac'h distro heb dibri nag eva.

Mez goude beza iunet evel-se, e teuaz naoun d'ezhan, hag ann diaoul, ne c'houie ket re m'az oa. Doue pe n'oa ket, a doteaz evit gouzout. « Mar doc'h Mab Doue, emezhan, livirit d'ar veinma en em chench e bara ! » Jezuz a respontaz : « Skrivet eo : N'eo ket gant bara hebken e vev ann den, mez gant kement komz a zeu a c'hinou Doue. »

Neuze ann diaoul hen dougaz betek ar gear a Jerusalem, hag her savaz var lein ann templ. « Mar doc'h Mab Doue, emezhan, en em daolit d'ann traon, rak skrivet eo en deuz kemennet d'he elez ho terc'hel etre ho daouarn. » Jezuz a lavaraz dezhan : « Skrivet eo ive : Ne dentoc'h ket ann Aotrou ho Toue ! »

Ann diaoul hen dougaz c'hoaz var eur menez braz, diskuez a ra dezhan holl rouanteleziou ann douar, hag e lavar : « Ann traou-ze holl a roin

dehoc'h, mar kirit stoui dirazhon evit va adori. » Jezuz a respontaz : « Kerz adren, Satan, rak skrivet eo : Adori a reoc'h ann Aotrou ho Toue, ha ne zervichoc'h nemethan. »

Ann diaoul a ieaz kuit neuze, ha setu kerkent ann elez o tostât hag ouz he zervicha.

Goulennou :

Pegail eo padet koraiz Jezuz-Krist ? — Penaoz en deuz iunet ? — Perak ann diaoul en devoa tentet Jezuz ? — Ped guech en deuz tentet Jezuz, petra' lavaraz da Jezuz, ha petra respontaz Jezuz dezhan ar vech kenta, ann eil guech, ann trede guech ?

VI

Kenta Diskibien hor Zalver Jezuz-Krist.

Epad tri bloaz en deuz prezeget Jezuz ann Aviel. Etouez ann dud a volentez vad a gave var he hent, e tibabaz daouzek : pesketourien oant kazimant holl, ha tud paour. « Deuit ganen, a lavaraz d'ezho, me rei ac'hanoc'h pesketourien tud. » Ar re-ze a vez great ann Ebestel anezho, ha daouzek oant eta : Per hag Andre, he vreur, Jakez ha Ian, a ioa breudeur ive, Philipp ha Barthelemi, Maze ha Thomas, Simon, Jud hag he vreur Jakez, er-fin Judaz.

Per a ioa he hano kenta Simon, Jezuz eo en deuz roet ann hano-ze d'ezhan ; ar ger *Per* a zinfimean.

Eunn dervez, Jezuz a c'houlennaz ouz he Ebestel petra lavare ann dud anezhan. « Lod a lavar, emezho, c'houi 'zo sant Ian deut enn-dro da veza



Kenta Diskibien hor Zalver Jezuz-Krist.

beo, lod all a lavar c'houi 'zo Eli, pe Jeremi, pe unan euz ar brophetet. » — « Ha c'houi, a c'houlenn Jezuz, piou a gredit oun-me ? » — « C'houi, a respont ker buhan sant Per, c'houi eo Jezuz-Krist, Mab Doue ! » — « Ha c'houi, eme Jezuz ker buhan ive, c'houi 'zo Per, c'houi vezo ar mean-font euz va Iliz, ha biken ann ifern ne c'hello dont a-benn anezhi. Me roio dehoc'h alc'houeziou ar Baradoz. »

Jezuz a lakeaz evez da gelenn mad he Ebestel, hag a lavaraz dezho : « Ann hini a gomzo mad ac'hanon dirak ann dud, me 'gomso mad anezhan dirak va Zad a zo enn Env. Mar teu ar bed d'ho tisprizout, o pezet sonj ounn-me bet disprizet enn ho raok. Klasket e vezo ober poan dehoc'h, mez n'o pezet ket aoun rak ar re a ra drouk d'ar c'horf hebken, ha ne c'hellont ket ober drouk d'ann ene.

Ann neb a rei digemer mad dehoc'h a vezo great dezhan evel m'en defe va digemeret me va-unan.» — « Mez, a c'houlennaz ann Ebestel, outhan, penaoz e tleomp-ni pedi ? » — « Setu penaoz ! » eme Jezuz. Hag hen a zeskaz dezho ar *Bater* penn-da-benn : « Hon tad pehini zo enn env, etc..... »

Goulennou.

Pegait amzer en deuz prezeget Jezuz ? — Pe-seurt micher o devoa ann Ebestel ? — Petra 'lavaraz Jezuz dezho da genta ? — Pe hano o devoa ann daouzek Abostol ? — Pehini oa ar c'henta Abostol, ha petra 'zinifi ann hano en devoa roet Jezuz dezhan ? — Penaoz sant Per en devoa kavet ann tro da ziskleria oa Jezuz Mab Doue ? — Petra en devoa respontet Jezuz da zant Per ? — Pebez aliou en devoa roet Jezuz d'he Ebestel, ha pe seurt pedenn en devoa desket dezho ?

VII


Mirakl ar guin ha mirakl ar bara.

Var dro ar mare kenta m'edo Jezuz o prezek, oue eunn eured e Kana, tost da Nazareth. Jezuz a ioa bet pedet da vont d'ar banket, hag he vamm ive.

Epad ar pred, e teuaz ar guin da vankout. Ar Verc'hez a lavar neuze d'he mab : « Ann dud-ma n'o deuz mui a vin. » Ar Verc'hez a lavare kement-ze, 'vit ma raje Jezuz eunn dra bennak evitho. — « Goaz-aze, eme Jezuz, n'eo ket deuet c'hoaz va amzer. » Ar Verc'hez a lavar evelkent d'ar zervicherien : « Grit ar pezh a lavaro dehoc'h. » Bez 'ez oa eno c'huec'h laouer-vean evit lakat dour da c'hoalc'hi. « Kargit anezho a zour », eme Jezuz.

Hag ouent lakeat reaz. « Brema, a lavaraz c'hoaz, tennit podadou aleze, hag ho c'hassit ouz taol. » Ha p'o devoue tanveat ar mestr hag ar zervicherien, heb gouzout a beleac'h e teue ar guin : « Penaoz 'ta ? emezho, miret eo bet ar guin guella bete-vrema ? »

Jezuz en devoa troet ann dour e guin, hag hennez eo ar c'henta mirakl oue bet guelet oc'h ober. Mez a neuze ne ehanaz ket da ober traou burzuduz, ha kement-ze evit diskouez oa Doue hag evit ober vad ive d'ann dud.



Mirakl ar bara.

Kement a viraklou a rea, ma rede ar bobl var he lerc'h. Eur vech ez 'oa pemp mil den ouz her selaou o prezek, heb komz euz ar merc'het nag euz ar vugale. Ann abardaez a ioa, hag e lavare ann Ebestel da Jezuz : « Mestr, erru ann noz, kas-

sit ann dud-ma d'ar gear, ma c'hellint kaout eunn dra bennak da zibri. » Jezuz a respontaz : « Truez em beuz, outho ! M'ho c'hassan d'ar gear, hi a jomo enn hent hag a varvo gant ann naoun. » Petra da ober eta ? eme ann Ebestel. Ne z'euz ama nemet pemp bara ha daou besk : ha petra eo ann dra-ze etre kement all a dud ? « Grit d'ezho azeza, » a lavaraz Jezuz. Jezuz a gemer ar pemp bara hag ar pesket, ha goude beza ho benniget, e ra kinnik eunn tammig da beb-unan. Kresket oa ann traou etre daouarn hor Zalver. Rak ann dud o devoa aoualc'h da zibri, ha pa oue echu gantho, e lavaraz Jezus d'ann Ebestel : « Destumit brema ar pezh a jom, evit ne d'ai netra da goll. » Ann Ebestel a leuniaz daouzek paner gant ann tammou chomet a zilerc'h ar re o devoa debret. Souezet oue ar bobl, hag e lavare peb-unan : « Hennez eo ar Messi ! »

Goulennou.

E pelec'h en deuz Jezuz great he genta mirakl ? — Pe seurt mirakl en devoa great ? — Perak e rea Jezuz miraklou ? — Perak oue nec'het ann Ebestel abalamour d'ann dud a ioa destumet enn-dro da Jezuz ? — Petra respontaz Jezuz ? — Penaoz en devoa Jezuz maget ar bobl ? — Petra jomaz varlerc'h ar pred ? — Petra lavare ann dud divarbenn Jezuz ?

VIII

Jezuz etouez ann dud a vor.

Jezuz ne oue ket bet digemeret mad e Nazareth ; eunn dervez e prezege d'he genvroiz hag e tiskueze kaer dezho oa hen ar Messi. « Bah ! emezho, hennez eo mab Joseph, Joseph ar miche-

rour ! » Hag o devoa kassouni outhan, rak diaez e kavent guelet unan a anavezent a vihanik savet hueloc'h evitho.

« Allaz ! a lavar neuze Jezuz, den n'eo prophet enn he vro. » Drouk a iez enno o klevet kement-ze, her c'hass a rejont kuit, ha lod zoken mont var he lerc'h evit her laza.

A-neuze, Jezuz a iez da jom gant he vamm etouez ann dud a vor, enn ho zouez ive e kenez he Ebestel, hag e reaz evitho burzudou braz.

Eur vech, oa destumet eur hoblad tud var ann aod evit her selaou, ha n'oa ket eaz d'ezhan komz outho. Jezuz a bignaz neuze e bag sant Per da brezek ac'hano d'ar bobl, ha pa oue echu he brezegenn-ganthan, e lavaraz da zant Per : « Deomp pelloc'h er mor evit pesketa. » Sant Per a respontaz : « Mestr, labouret or beuz hed ann noz, ha netra n'or beuz paket.... Gouskoude, mar d'eo ho polontez, me ia c'hoaz da deuler va rouejou. » Kerkent oue paket kement a besket, ma roge ar rouejou, red oa dont d'ho zikour gant eur vag all, hag ann diou vag, karget leun, a ioa beac'h gantho chom var ann dour.

O velet kement-all, sant Per en em strinkaz da dreid Jezuz : « Tec'hit diouzinn, Aotrou, emezhan, rak ne d'ounn nemet eur pec'her ! » — « N'o pezet ket aoun, a lavar Jezuz, n'e ket mui pesket a bakoc'h, ho micher breman a vezo paka tud evit ho c'hass d'ar baradoz ! »

Eur vech all m'oa Jezuz var vor gant he Ebestel, e tirollaz goall-amzer, krén oa ann avel, ar mor a eonenne, ann dour a lamme er vag, ha Jezuz a ioa kousket !

Ann Ebestel spontet a zihun Jezuz : « Mestr, emezho, e m'aomp o vont da goll ! »

Jezuz a respont : « Rak petra o peuz aoun, tud a nebeut a feiz ! » Neuze e sao, hag e ra eur zell tro var dro : kerkent ann avel hag ar mor a deu da veza sioul.

Ar re a ioa ganthan a lavaraz : « Piou eo hema-ta, a zent outhan ann avel hag ar mor ? »

Eunn nosvez, edo bag sant Per pell er mor, ha gant ann amzer-fall ne c'helle ket ar besketourien douara e tu ebet. Mez da c'houlou-deiz Jezuz a ia betek-ennho en eur gerzet var ann dour. « Eur spêz eo, » emezho spontet. Jezuz a lavar dezho : « N'o pezet ket aoun, me eo ! »

« Oh ! Mar d'eo c'houi eo, eme sant Per, grit ma z'inn d'ho kaout, var ann dour ! » — « Deuit, » a respont Jezuz. Diouc'h-tu sant Per a lamm er meaz euz ar vag, hag a gerz ive var ann dour. Mez kreski 'ra ann avel, sant Per a gemer aoun, krena 'ra, ha setu hen o voeledi a nebeudou er mor.

« Mestr, emezhan, saveteit ac'hanon ! »

Jezuz a astenn he zourn dezhan hag a lavar : « O den skanv a feiz, perak beza ken aounik ! »

Jezuz hen tenn ganthan er vag, ar mor a deu da gaerât, hag e tsteont holl heb poan diouz ann aod.

Goulennou.

Perak o devoa he genvroiz kemeret kassouni ouz Jezuz ? — Petra 'lavaraz Jezuz o velet n'oa ket selaouet e Nazareth ? — Da beleac'h e z'eaz da jom varlerc'h ? — Penaoz oue bet great miraki ar pesket ? — Petra lavaraz Jezuz varlerc'h da zant Per ? — Petra 'zigouezaz gant ann Ebestel var vor, ha penaoz ouent saveteet gant Jezuz ? — Penaoz oue bet kemeret Jezuz evit eur spêz gant ann Ebestel ? — Petra en devoa great sant Per evit mont da gaout Jezuz, ha petra erruaz ganthan ? — Penaoz oue saveteet gant Jezuz ?

IX

Jezuz o prezek d'ann dud divar ar meaz.

Jezuz a iea da brezek dre ar vro-holl, hag aliez e lavare d'ann dud eur barabolen bennak evit rei easoc'h dezho da entent. Eur barabolen a zo eunn histor hag a vez kuzet eur virionez dindann-hi.

Ar banket-eured. — Eunn den, eme Jezuz, a reaz eur banket evit eured he vab, hag en devoa pedet eleiz a dud, mez evel ne dosteant ket, ar mestr a gassaz he zervicher da lavaret dezho dont. Holl e kavent eunn digarez bennak. Kement-ze a lavaraz ar zervicher d'ar mestr. « Mad, a respont ar mestr, it e kear, digassit ganehoc'h ar re a gafoc'h. » Ar zervicher a iezaz eta da bedi ann dud a ioa var leur-gear. « Mestr, emezhan eunn nebeut goude, digasset em beuz ar re zo kavet, hag e z'euz c'hoaz plass ouz taol. » Ar mestr a respont : « It er meaz a gear, klaskit tud var ann henchou, ha grit dezho dont a galon vad pe dre nerz. C'hoant em beuz e ve tud eleiz, hag e lavaran dehoc'h hini euz ar re em beuz pedet ne danveo netra em zi. »

Ar barabolen-ma 'zo 'vit diskuez ne vije ket ar luzevien ar gristenien genta, daoust m'az oant ar re-genta galvet.

Ann had. — Eul labourer a iezaz da hada. Lod euz ann had a guezaz var ann hent, hag al laboused ho debraz. Lod a guezaz etouez ar vein, hag a zizec'haz a veac'h diouanet, rak n'oa ket leiz

enn-dro dezho. Lod a guezaz e kreiz ar spern, ha dre ma savent e save ar spern ive, hag ouent mouget gantho. Lod a guezaz ive enn douar-mad, ar re-ze hebken a zavaz, a greskaz, hag a roaz greun.

Komzou ann Aotrou-Doue a zo kalz pe nebeut talvouduz da galon ann den, diouc'h ma kuezont enn eur galon vad pe fall.

Ar pastor mad. — « Me eo ar pastor mad, eme Jezuz. Me a anavez va denved, hag hi am anavez-me, ha va buez a roan evitho. Denved all am euz c'hoaz, n'int ket euz ar vandenn-ma, red e vezo d'inn ho digass da gaout ar re-ma ive, ha ne vezo mui var ann douar nemet eur vandenn-zenved hag eur pastor hebken. »

Jezuz a zo deuet evit destumm ann dud holl dindan lezenn Doue, ha ne ehan ket da glask e peb leac'h ar re zianket. « Piou ac'hanoc'h, a lavare, hag en deuz kant danvad, mar teu da goll unan bennak, ne lezo ket ann naontek ha pevar-ugent all evit redet varlerc'h ann hini kollet. Eur vech m'en deuz her c'havet, hen laka var he ziouskoaz, hag hen digass d'ar gear. »

Jezuz eo ar pastor mad, he zenved eo ar gristenien, ann denved a jomm er meaz eo ar re a zo er meaz ive euz ann Iliz, ann danvad dianket eo ar pec'her.

Ar mab prodik. — Eunn den en devoa daou vab ; ar iaouanka a lavaraz d'he dad : « Roit d'inn va lod danvez. » Hag he dad a roaz he lod dezhan. Mont a reaz d'eur vro-bell, hag o ren eno eur vuez direol e kollaz buhan ar pezh en devoa.

Eur gernez vraz o veza deuet er vro, evit herzell ouz ann naoun, oue red dezhan mont da zionall ar



Ar mab prodik.

moc'h, ha ken truezuz oa he stad) ma karje dibri ar memez boued gantho, mez den ne roe dezhan. Sonjal a reaz neuze er gear : « Nag a bed mevel e ti va zad, emezhan, o deuz eleiz a vara da zibri, ha me 'zo ama o vervel gant ann naoun ! » Gant ar zonz-ze, e tistroaz d'ar gear, hag o kueza d'ann daoulin : « Va zad, emezhan, pec'het am euz a enep Doue hag enep dehoc'h, n'ounn mui din da veza galvet ho mab ! » He dad a ioa eat d'hen diarbenn a lammaz d'he vriata ha da boket dezhan. « It buhan, a lavaraz d'he zervicherien, da gerc'hat he zillad kaera, lazit al leue larta 'zo er c'hraou, ha grit eur bannet euz ar re vrassa, rag kollet oa va mab, ha setu hen kavet, maro oa, ha setu hen beo adarre ! »

Evel-se 'z'euz levenez etouez ann elez er Baradoz pa deu eur pec'her da ober pinijenn.

Ar falz-pinvidik hag ar paour-keaz Lazar. — Bez 'ez oa eunn den pinvidik en em viske kaer hag a rea fest bemdez.

Bez 'ez oa ive eunn den paour, hanvet Lazar, gourvezet etal ann or, hag a ioa gouliet penn da benn. Karet en dije ferri he naoun gant ar bruznachou a guezze divar daol ann den pinvidik, mez hini n'ho roe dezhan ; ne dostea nemet chass ann ti da lipât he c'houliou.

Mervel a reaz ar paour-keaz, hag ann elez⁷ hen dougaz da gaout Abraham enn eul leac'h eüruz.

Ann den pinvidik a varvaz ive, hag ann diaoul⁷ hen taolaz enn ifern. E kreiz ann tan, o veza savet he zaoulagad, e velaz a ziabell Abraham ha Lazar enn he gichen. « Tad Abraham, emezhan, o pezet truez ouzinn, digassit Lazar da zouba penn he viz enn dour ha da lakat da zivera eur beradik var va zeod, rak poan vraz am euz enn tân-ma ! » Abraham a respont : « O pet sonj peger kaer⁷ oa ho puez var ann douar, ha peger fall oa hini Lazar. Setu perak e ma el levenez, ha c'houi⁷ zo er boan ! »

Ar barabolen-ma a zesk d'eomp kemeret hor poan gant pasianted, peb unan en devezo he dro : kant guech easoc'h e vezo d'ar paour mont d'ar Baradoz eget d'ar pinvidik a zo stag ouz ann arc'hant.

Goulennou.

Penaoz e prezege Jezuz evit lakat ann dud da entent guelloc'h ? — Petra eo eur barabolen ? — Penaoz e ma parabolen ar banket-eured ? — Petra verke ar barabolen-ma divarbenn ar Iuzevien ? — Penaoz e ma parabolen ann had ? — Petra verk ar barabolen-ma ? — Penaoz eo Jezuz ar pastor mad ? — Petra 'ra eur pastor mad p'en deuz kollet eunn danvad bennek ? — Petra ziskuez ar barabolen-ma ? — Petra en devoa goulennet ar mab prodik ouz he dad ? — Pebez buez a renaz

el leac'h m'oa eat, ha pebez micher a deuaz da gaout ? — Petra lavaraz o sonjal e ti he dad ha peseurt digemer a reaz he dad dezhan ? — Petra ziskuez ar barabolen-ma ? — Penaoz oa ar falz pinvidik ? — Penaoz oa ar paour-keaz Lazar ? — Da beleac'h oa eat ar pinvidik varlerc'h he varo ? — Da beleac'h oa eat ann hini paour ? — Petra c'houlenne ann den pinvidik enn Ifern, ha petra 'oue respontet dezhan ? — Da biou eo ann eassa mont d'ar Baradoz ?

X

Miraklou Jezuz.

PAREA 'RA AR RE-GLANV.

Klasket e veze Jezuz gant ann holl evit klevet ann traou kaer a lavare ha goulenn sikour digan-
than, ha Jezuz a iea eta e peb leac'h o skigna etouez ann dud ar virionez hag ar iec'hed.

Mével ar c'hantener. — Eunn dervez, eur c'hantener pe eur c'habiten soudarded a reaz da Jezuz ar bedenn-ma : « Aotrou, m'em euz eur zervicher em zi hag a zo seizet, poan vraz en deuz. » Jezuz a lavaraz : « Me ielo d'he barea. » — « Aotrou, a respontaz ar c'hantener, n'ounn ket din e teuffac'h d'am zi, mez lavarit eur ger hebken, ha va zervicher a vezo pare. » Souezet oue Jezuz o klevet ann den-ze, hag e lavaraz : « N'em euz ket kavet kement a feiz enn Israël.... Kerzit d'ar gear, emezhan d'ar c'habiten, great e vezo dehoc'h hervez m'o peuz kredet. » Ha d'ann heur ma komze Jezuz, ar mevel en em gavaz pare.

Ann den seizet. — Eunn dervez m'edo Jezuz o prezek, oa leun ann ti a dud, deuet ez' oa zoken pharizianet ha doktoret euz al lezenn, hag enn aner pevar goaz a glaske tostât outhan gant eunn den seizet astennet var eur guele. Pignat a rejont neuze var ann doen, ha dre eunn toull a ioa ebarz hi 'diskenn ann hini klân, guele hag all, dirak Jezuz. Jezuz, o velet feiz ann dud-ze, a lavaraz d'ar c'hlanvour : « Va mab, ho pec'hejou a zo pardounet dehoc'h ! » « Piou eo hema ? a zonje ar Pharizianet enno ho-unan. Blasfemi a ra, rak n'euz nemet Doue a c'hell pardouni ar pec'hejou ! » Mez Jezuz o c'houzout pe seurt sonj o devoa, a c'houlenn outho : « Petra zo eassoc'h da lavaret : Pardounet eo ho pec'hejou, pe : Savit enn ho sa ha kerzit ? » Neuze, evit diskuez e c'helle pardouni ar pec'hejou koulz ha ma c'helle parea klenvejou ar c'horf, e reaz eur mirakl : « Savit, emezhan d'ann den seizet, kassit ho kuele ganehoc'h ha kerzit d'ar gear. » Ker buhan hen sevel, kemer he vele, ha mont d'ar gear en eur veuli Doue.

Ann den ganet dall. — Jezuz a gavaz eunn den hag a ioa ganet dall, ha neuze goude beza kranchet d'ann douar e reaz eunn tammik pri gant he granch, hag e lakeaz ann dra-ze var daoulagad ann hini dall en eur lavaret dezhan : « It brema d'en em voalc'hi. » Ann den dal a ieaz, ha kerkent he zaoulagad a zigoraz sklear.

Ann dek den lor. — Eur vech e c'hen em gavaz gant Jezuz dek den lor. Ne gredient ket tostât ; mez hi a grië a ziabell : « Jezuz, o pet truez ouzomp ! » Jezuz a lavaraz dezho : « It d'en

em ziskuez d'ar veleien ! » Ha setu, epad m'edont o vont, ec'h en em gavchont pare. Unan anezho o velet oa pare a deuaz enn dro : trugarekât a ra Jezuz, hag e konez d'ann daoulin evit hen adori. « Me grede em boa pareet dek, a lavar Jezuz, e pelec'h ema ann nao all ? »

Tud aoualc'h a vez kavet da c'houlenn, mez nebeut a ziskuez ho anaoudegez-vad.

Eleiz a vurzudou all en deuz great Jezuz : aoualc'h or beuz lavaret gouskoude evit rei da anaout eo Hor Zalver Doue, hag eunn Doue karan-tezuz.

Euz ho zu ive, ann dud a dle ober eur vad ben-nak evit Jezuz, gant aoun ne zigouesfe gantho evel gant ar vezenn fyez, da veza milliget evel-dhi. Eunn dervez, mintin-mad, tost da Jerusalem, Jezuz a velaz eur vezenn fyez hag a zisplege he deliou glaz a-ziouc'h ann hent. Tostat a ra 'vit kemer eur fyezenn : siouaz ! frouezenn ebet ne z'oa enni. Ha Jezuz a lavaraz dezhi : « Biken den ne zebro euz ho frouez. » Antronoz vintin Jezuz a dremene c'hoaz dre eno : seac'h-korn oa ar vezenn. N'oa mad nemet da ober tân.

Goulennoù.

Perak e klaske ann dud Jezuz ? — Petra 'choulenne ar c'han-tener ouz Jezuz ? — Perak ne felle ket dezhan e vije deuet Jezuz enn he di ? — Penaoz ann den seizet a oue bet digasset dirak Jezuz ? — Petra en devoa lavaret Jezuz dezhan ? — Perak oa souezet ar Pharizianet ? — Petra en devoa c'hoant Jezuz diskuez dre ar mirakl-ma ? — Lavarit mirakl ann den ganet dall. — Lavarit mirakl ann dek den lor. — Petra verk d'eomp ar mirakl-ma ? — Petra verk d'eomp ar vezenn fyez milliget gant hor Zalver ?


XI

Miraklou Jezuz.

KONVERTISSA 'RA AR BEC'HERIEN.

Mari-Madalen. — Dispar oa karantez Jezuz evit ar bec'herien : selaout histor Mari-Madalen.

Eunn dervez, Jezuz a leinaz e ti eur pharizian he hano Simon, hag e teuz d'he gaout eno eur plac'h a vuez fall, Mari-Madalen. Ha setu hi da stoui dirak Jezuz, da boket d'he dreid, d'ho goal-c'hi gant he daelou ha d'ho zec'ha gant he bleo.



Mari-Madalen eharz treid hor Zalver.

Ha Simon, o velet kement-ze, a lavare ennhan he-unan : « Ma vije bet Jezuz eur prophet, evel ma leverer, ne vije ket heb gouzout eo ar vaouez-ma eur bec'herez ! » Jezuz a vel ar pezh a dremen enn he galon, hag a lavar : « Simon, pardounet a zo eleiz a bec'hejou d'ar vaouez-ma, rak hi e deuz diskuezet eur garantez vraz evit ann Aotrou-Doue. » Neuze e sell ouz Mari-Madalen : « It e peoc'h, emezhan dezhi, ho feiz e deuz ho save-teet. »

Zachée. — Er gear a Jericho, ez 'oa eunn den hanvet Zachée, hag en devoa danvez braz, mez destumet ganthan a gleiz hag a zeou. C'hoant a zavaz ganthan da velet Jezuz. Eunn dervez eta, e c'hen em gavaz Jezuz e Jericho, mez bihan a vent oa Zachée, hag evel m'az oa kalz tud, ne c'helle ket gueleit dreist pennou ar re-all. Petra ra neuze ? Pignat var eur vezenn sikomor. En eur erruout dirak ar vezenn-ze, Jezuz a zao he zaoulagad hag a lavar : « Zachée, diskennit buhan, rak enn ho ti e ma va zonz chom hirio. » Zachée a ziskenn, laouenn da zigemer Jezuz enn he di. Ar bobl ne gave ket deread gueleit Jezuz o vont da di eur pec'her. « Aotrou, a lavaraz neuze Zachée da Jezuz, me roio ann hanter euz va danvez d'ar paour, ha mar em euz great gaou ouz unan ben-nak, m'hen digollo peder guech diouz ar pezh en deuz kollet. »

Konvertisset oa Zachée, hag e lavare Jezuz d'ann dud : « Deuet eo ar Zalver var ann douar evit savetei ar pezh a ioa eat da goll. »

Goulennou.

E peleac'h oa deuet Mari-Madalen da gaout hor Zalver ? — Petra e devoa great evit diskuez he c'harantez da Jezuz ? — Petra 'lavaraz Simon ar pharizian da Jezuz, ha petra 'respontaz Jezuz dezhan ? — Petra oa Zachée ? — Petra en devoa great evit gueleit Jezuz ? — Perak oa drouk-kountant ann dud ? — Petra 'lavaraz Zachée da Jezuz, ha petra 'lavaraz Jezuz d'ann dud ?

XII

Miraklou Jezuz.

KASS A RA KUIT ANN DIAOULOU.

Ann drouk-spered a zo ato o klask ann tu da ober gaou ouzomp, ha pa ne vir ket Doue outhan, e taol klenvejou varnomp, hon doug d'ar pec'hed, avechou zoken e z'a da jom e korf ann den, hag ann den a vez neuze ar pez a hanver *possedet*. Jezuz a ziboaniaz tud dalc'het er mod-ze.....

Bez ez oa unan possedet ha den ne c'helle derc'hel outhan, n'hen devoa lojeiz e nep-leac'h, pa veze staget e torre he jadennou, diouc'h ann noz e veze klevet o iudal evel eul loen gouez. Eunn dervez ma velaz hor Zalver o tostât outhan, en em lakeaz da grial : « Jezuz, Mab Doue, perak e teuit da ober poan d'eomp ? » — « Pe hano o peuz ? » a c'houlenn Jezuz. — « Eur vandenn, » oue lavaret dezhan. Guir a responte ann drouk-speret, rag ann drouk-spered eo a gomze dre he c'hinou, eur vandenn diaoulou a ioa enn he gorf.

Eno e z'oa tostik d'ar mor eur vandenn moc'h. « Hon lezit, emezho, da vont da jom e korf ar

moc'h-ze ! » Jezuz ho lezaz da vont, eno o dije kavet mad chom bepret, mez ar moc'h, kerkent m'oa eat ann diaoulou ennhou, a redaz er mor, ha beuzet ouent holl.

Goulennou.

Petra eo eunn den possedet ? — Petra en devoa respontet ann diaoul da Jezuz ? — Da beleac'h en devoa goulennet mont ? — Petra o devoa great ar moc'h, pa oue eat ann diaoul ennhou ?

XIII

Miraklou Jezuz.

RESUSITA 'RA AR RE-VARO.

Jezuz a zo mestr var ar vuez ha var ar maro : epad m'oue var ann douar, en deuz tennet a varo da veo merc'h Jaïr, mab ann intanvez, ha Lazar.

Merc'h Jaïr. — Eunn den a renk huel, he hano Jaïr, a lavare da Jezuz : « Deuit d'am zi, emezhan, eur verc'hik a zaouzek vloaz am euz, hag a zo o vont da vervel. » Jezuz a ieaz ganthan. Araok m'oant erruet enn ti, e tejer da lavaret da Jaïr : « Ne dal ket ar boan dieza ar mestr heb ezomm, ho merc'h a zo maro. » Mez Jezuz a lavaraz : « N'o pet ket aoun, kredit hebken, hag e vevo ho merc'h. » Leun oa ann ti a dud, hag ann holl a vouele. « Ne vouelit ket, eme Jezuz, ar verc'h-ma n'e ket maro, kousket eo hebken. » Hag ann dud a rea goab anezhan, rak hi a c'houie oa maro. Neuze Jezuz a gemer he dourn : « Plac'h iacouank, emezhan, savit ! » Kerkent e zavaz, hag en em lakeaz da zibri evel unan iac'h.

Mab eunn intanvez. — Eur vech all, e kichen Naïm, tost da Nazareth, Jezuz en em gav ganthan eunn enterramant var ann hent : eunn den yaouank eder o kass d'ar veret, mab eunn intanvez, ha n'e devoa ken krouadur nemethan. Kalz tud a ioa oc'h heul. Jezuz, o kemeret truez ouz ar vamm glac'haret, a lavar dezhi : « Ne vouelit ket. » Tostât a ra neuze, hag e laka he zourn var ann arched. Ann dougerien a jom a za, ha Jezuz a gomz ouz ann hini maro : « Den yaouank, m'her lavar dehoc'h, savit ! » Diouc'h-tu ann den yaouank a zavaz, hag en em lakeaz da gomz : ha Jezuz hen roaz d'he vamm....

Lazar. — Bez 'ez oa e Bethanii, tost da Jerusalema, (diou c'hoar, hanvet Martha ha Mari, a jome gant ho breur Lazar) Jezuz ho c'harie, rak aliez enn he veachou oa bet digemeret gantho. Eur vech m'edo er penn-all euz ar vro, e teuz kelou dezhan oa klanv Lazar. N'oue ket ankenniet evelkent, « rak, emezhan, n'eo ket evit mervel e ma klanv, mez evit ober henor da Zoue. »

Daou zervez varlerc'h, Lazar a varvaz ; neuze Jezuz a lavar d'he Ebestel : « Maro eo Lazar ! » hag e z'ez gantho da Vethanii. Pa oue dindan erruout eno, Martha a redaz betek ennan : « Aotrou, emezhi, ma vijec'h bet ama, va breur ne vije ket maro, ha setu aze pevar dervez 'zo e ma er bez, mez gouzout a ran brema zoken e roïo Doue dehoc'h ar pez a c'houlennoc'h outhan. » — « Ho preur a zeuio enn-dro da veza beo, eme Jezuz dezhi. Ann hini a gred ennhon, ha pa ve maro, a vevo, hag ann hini a vev hag a gred ennhon, ne varvo ket. » Kasset oue d'ar bez, ha goude beza great lemmel ar mean divarnhezan, e lavaraz :

« Va Zad, m'ho trugareka dre m'az ounn bet selaouet ganehoc'h bete-vrema, gouzout a rean e vijen selaouet ato ganehoc'h ; mez m'hel lavar abalamour d'ann dud-ma, 'vit ma kredint eo c'houi o peuz va digasset ! » Neuze, Jezuz a lavaraz a vouez huel : « Lazar, deuit er meaz ! » Ha kerkent Lazar a zavaz euz ar bez, leun a vuez.

O velet eunn dra ken burzuduz, eleiz a dud a deuaz d'en em gonvertissa, ha setu perak ar Pharizianet, aoun gantho ne vije anavezet Jezuz evit ar Messi, a reaz ho zonj her lakât d'ar maro.

Goulennou.

Lavarit penaoz oue resusitet merc'h Jaïr... mab ann intanvez ? — E peleac'h edo Lazar o chom ? — Pe hano o devoa he ziou c'hoar ? — Perak Jezuz n'en devoa ket great vâ da genta o klevet oa klanv Lazar ? — Petra lavaraz Martha da Jezuz ha petra respontaz Jezuz dezhi ? — Peseurt pedenn a reaz Jezuz araok resusita Lazar ? — Petra zonje ober ar Pharizianet ?

JEZUZ,

ENN AMZER M'OUÉ ENN HE BASSION.

Kaer en deuz bet Jezuz tremen en eur ober vad, n'en deuz ket gellet plijout d'ann holl : enebourien en deuz. A hent all, ar Pharizianet o devoa mez gueleet ho zroiou-kamm, ho zechou-fall dizoloet ganthan, hag a gemeraz outhan kassouni vraz : klask a reint ann tu d'her laza. Hogen, d'ann amzer ma klasko ar Pharizianet hag ar re-all lakât Jezuz d'ar maro, Jezuz he-unan a vezo he zonj ive mervel : rak deuet eo er bed-ma da c'houzaonv poan ha da vervel evit pec'hejou ann dud.

XIV

Transfiguration hor Zalver Jezuz-Krist.

Petra bennak m'en devoa Jezuz epad tri bloaz prezeget ann Aviel ha great burzudou braz, e chome gouskoude laosk ar feiz e kalon ann Ebessel, ne ententent ket kalz perak oa deuet var ann douar. Hag evelkent e tostea amzer he Bassion. Mall eo eta lakât ar gredenn-ze ennh, evit miret outho da falgoulouni, p'her guelint poaniet ha lazet.

Eunn dervez Jezuz a gemeraz Per, Jakez ha Ian, hag o c'hassaz ganthan var menez Thabor, c'hoant en devoa da ziskuez sklear dezho penaoz oa Doue. En em lakat a ra eno da bedi, hag epad ma pede, he dal a deuz da veza skeduz evel ann

heol, hag he viskamant guenn evel ann erc'h. Ha setu Moizez hag Eli o tont hag o komz ganthan. Sant Per a lavaraz neuze : « Mestr, mad eo chom ama, mad e ve sevel tri del, unan evidhoc'h, unan evit Moizez, hag eunn all evit Eli. » Edont c'hoaz o komz, hag eur goabrenn lugernuz a bâr enn-dro dezho, hag int goloet ganthi a sklerder. Klevet a reont a greiz ar goabrenn eur vouez o lavaret : « Hema eo va mab muia-karet, selaouit-hên. » Spontet ouent, hag e kouejont d'ann douar. « Savit, eme Jezuz, ha n'o pezet ket aoun. » Hi sevel, ha ne veljont mui den enn-dro dezho nemet Jezuz he-unan. Eunn nebeut goude Jezuz a lavaraz d'he Ebessel : « Lakeat e vezo ho Salver etre daouarn ann dud, d'ar maro e vezo lakeat ive, mez tri dervez varlero'h e savo euz a varo da veo. »

Goulennou.

Perak Jezuz en deuz diskuezet d'he Ebessel burzud ann Transfiguration ? — E pelec'h oue great ar burzud-ze ? — Piou en devoa Jezuz kaset ganthan var ar menez ? — Piou a ioa enn-dro da Jezuz epad ar burzud ? — Petra 'lavaraz sant Per ? — Petra 'lavaraz ann Tad Eternel euz lein ann env ? — Petra en devoa lavaret Jezuz d'he Ebessel eunn nebeut goude ar burzud ?

XV


Ar Zui Bleuniou.

Araok mervel e Jerusalem evel eunn torfetour, Jezuz a c'hoanteaz dont er gear-ze evel eur Roue. Vardro goueliou Pask oa. Bep bloaz, da Bask, ar luzevien a laze eunn oan, abaoe m'oant bet ten-

net euz sklavaj ann Ejipt. Er bla-ma hi lazo Jezuz, ha Jezuz, evit tenna ar bobl euz sklavaj ann Ifern, a jomo gantho, evel eunn oan, da veza lakeat d'ar maro.

Erruet eta e kichen kear, Jezuz a lavaraz da zaou euz he Ziskibien : « It d'ar bourg a zo aze dirazoc'h, c'houi'gavo eno eunn azenez staget hag he azenn bihan ganthi : distagit-ho hag ho digassit d'inn. Ha ma vez goulennet ouzoc'h perak, livirit : « Ar mestr en deuz ezomm anezho. » Diouc'htu e vezint roet deoc'h. » Kement-ze oue great, evit ma teuje da veza guir komz ar prophet : « O kear Sion, setu ho Roue o tont daved'hoc'h, leun a zouzder, var gein eunn azenez, hag azenn bihan ar vamm a zo sparlet. »

O veza eat, ann Diskibien a reaz evel m'en devoa lavaret Jezuz d'ezho. Digass a rejont gantho



Jezuz o vont e kear Jerusalem.

ann azenez hag he azenn bihan, ha goude beza taolet ho dillad varnho, e lakejont hor Zalver da azeza var c'horre evit mont e kear.

Epad m'edo Jezuz oc'h antren evelse e Jerusalem, lod euz ann dud a astenne ho dillad var ann douar, dre ma tremene, lod-all a drouc'he skourrou guez hag ho zaole var ann hent dirazhan. Hag e kanent holl a vuez huel : « *Hosanna !* Gloar da vab David ! Benniget ra vezo ann hini a deu enn hano ann Aotrou-Doue ! »

Deuet oa ar Pharizianet ive etouez ar bobl, mez poan o devoa o velet hag o klevet ann henoriou great da Jezuz. « Mestr, a lavarjont dezhan, grit d'ann dud-ze tevel ! » — « Mar chomont peoc'h, a respontaz Jezuz, ar vein ho-unan a grio. » Ann deiz varlerc'h, ar vugale ive a gane enn templ, a-bouez ho venn : « Gloar da vab David ! » Ha n'oa tu ebet da viret outho da grial....

Ar Pharizianet a lavare entrezho : « Ne c'hel-lomp ket dont a-benn anezhan. » Aoun o devoa rak ar bobl. Hag en-dra ma komzent evelse, Judaz, unan euz ann Ebestel, a deu d'ho c'haout, hag a lavar dezho : « Petra 'rooc'h d'inn, ha m'hen lakeio etre ho taouarn ? » N'edont ket o c'hedal kement-all, ha gant plijadur eo e kinnijont dezhan tregont pezh arc'hant.

Setu great ar marc'had milliget : guerzet eo Salver ar bed !

Goulennou.

Petra c'hoanteaz Jezuz ober araok mervel ? — Penaoz oa deuet e kear Jerusalem ? — Pebez digemer a reaz ar bobl da Jezuz ? — Petra ganent dezhan ? — Petra 'zonje ar Pharizianet euz ann digemer great da Jezuz ? — Petra 'respontaz Jezuz dezho ? — Pe seurt marc'had oue great etre Judaz hag ar Pharizianed ?

XVI

Ar Iau-Gamblid.

Jezuz a ro ho Vask d'ann Ebestel, hervez lezenn Moizez.

D'ar iau oa dleet dibri ann oan Paskal, er bla-
ze, hervez lezenn Moizez.

« C'hoant braz em boa, eme Jezuz, da ober ar
Pask-ma ganehoc'h. »

Sant Per ha sant Ian a ieaz neuze e kear, ha pa
oue deuet ar mare, hi a gempennaz enn eur zal
vraz ann traou ioa red evit ober ar Pask.

Diouc'h ann noz, Jezuz hag he Ebestel a zo
azezet ouz taol, ha p'edont o tibri, hen a-lavaraz
d'ezho : « Unan ac'hanoc'h am guerzo. » Ar c'hom-
zou-ze a ra dezho poan vraz hag hi 'chom souezet.
Peb-unan a c'houlenne outhan : « Mestr, na me
eo ? » — « Ann hini a laka he zourn er memez
plad ganen, emezhan, hennez eo !... Guell e vije
bet dezhan ne vije deuet biskoaz var ann douar ! »

Jezuz a c'hoalc'h ho zreid d'ann Ebestel.

Goude beza debret ann oan Paskal, Jezuz a zao
diouc'h taol, a gemer eunn torch lien guenn, hag
o veza lakeat dour enn eur plad dounn, e za da
voalc'hi ho zreid d'ann Ebestel.

Mont a ra da gaout sant Per da genta. Mez hema
ne c'helle ket lakât enn he benn e teuje Jezuz da
voalc'hi he dreid dezhan. « C'houi, emezhan, c'houi
a voalc'hfe va zreid-me ? » — « Ne ententit ket ar
pez a z'an da ober, a lavar Jezuz, c'houi entento
divezatoc'h. » — « Biken, eme sant Per, biken ne

voalc'hoc'h va zreid d'inn-me ! » — « Mad, a lavar
Jezuz dezhan, ma ne voalc'han ket ho treid de-
hoc'h, n'o pezo ket a lod em rouantelez. » — « Mar
deo evelse eo, a respont sant Per, goalc'hit va
zreid, ha goalc'hit ive va fenn ha va daouarn. »
Jezuz a voalc'haz eta ho zreid d'ann Ebestel :
« Brema, c'houi zo neat, emezhan : siouaz ! n'oc'h
ket holl gouskoude ! »

E Judaz e sonje ato.

Jezuz a voalc'h treid ann Ebestel araok ar
gommunion, evit diskuez ne dleer ket tostât ouz
Sakramant ann Aoter araok beza goalc'het ar
goustianz.

Jezuz a ro ho Vask d'ann Ebestel, hervez
al lezenn-nevez.


Jezuz en deuz goalc'het ho zreid d'he Ebestel,
hag e z'a brema da rei d'ann dud ar brassa merk
a garantez a c'helle da rei.

Jezuz a gemeraz bara, a vennigaz ar bara-ze, a
reaz tammou anezhan, hen roaz da zibri d'he Zis-
kibien, en eur lavaret dezho : « Kemerit ha debrit,
ann dra-ma eo va c'horf. »

Varlerc'h e kemeraz guin enn eur c'halir, e
vennigaz ive ar guin-ze, evel m'en devoa benniget
ar bara, hag hen roaz da eva d'he Ziskibien, en
eur lavaret dezho : « Evit holl : ann dra-ma eo va
goad, goad ann allianz nevez, a vezo skuillet
evidhoc'h hag evit eleiz a dud, ma vezo pardounet
dezho ho vec'hejou. »

Dre ar c'homzou-ze eo deuet ar bara hag ar
guin da veza korf ha goad hor Zalver Jezuz-Krist.
Ar pez en deuz great Jezuz, Jezuz a ro galloud
d'ann Ebestel d'hen ober evel dhan, ha d'ar veleien,

var ho lerc'h, betek fin ar bed. Karet a ra kement ann dud ma z'eo falvezet ganthan chom ganeomp, keit ma vezo tud var ann douar..... Setu petra eo Sakramant ann Aoter.



Jezuz oc'h institui Sakramant ann Aoter.

Neuze Judaz, ann diaoul enn he galon, a ieaz buhan er meaz euz ar zal evit peur-echui he dor-fet. Pa oue eat kuit, Jezuz a lavaraz d'he Ziski-bien : « Va bugale, n'em euz mui nemet eunn nebeut amzer da jom ganehoc'h.

— « Da beleac'h ez'it, c'houi ? » a c'houlenn sant Per.

— « D'al leac'h ma'z ann, ne c'hellit ket dont c'hoaz, a respont Jezuz, c'houi deuio divezatoc'h.

— « Perak ne c'helfemp ket mont diouc'h-tu ? Me 'zo prest da vervel evidhoc'h.

— « Holl e viot dispartiet enn noz-ma, ha c'houi va dilezo.

— « Hag e vec'h dilezet gant ar re-all, me n'ho tilezinn ket.

— « Paour keaz Per, a lavar Jezuz dezhan, araok m'en devezo kanet diou vech ar c'hillok, enn noz-ma, c'houi 'pezo va nac'het teir guech. »

Muioc'h a galon eget a volonteiz en devoa sant Per.

Jezuz er Jardin Olivet.

D'ar iaou da noz, Jezuz a ieaz d'ar Jardin Olivet, eul leac'h distro er meaz a gear, eno ec'h en em denne aliez evit pedi. Kemeret a reaz ganthan tri hebken euz he Ebestel, Per, Jakez ha Ian, ann tri a ioa bet ive ganthan var menez Thabor, hag e lavaraz dezho : « Anken ar maro a zo em c'halon ; gortozit ama, ha beillit ganen. »

Neuze e pelleaz dioutho eunn tammik, koeza 'ra d'ann daoulinn, hag he benn harp enn douar, e lavar d'he dad : « Va zad, distroït ar c'halir-ma diouzinn ! Gouskoude ho polontez bezet great ! » Dont a ra da gaout he Ebestel, mez kousket oant ho zri. « Per, emezhan, ne c'hellit ket beilla ganen eunn heur hebken ? » Jezuz a ia enn-dro da bedi, ha lavaret a ra ar memez pedenn, evel ar vech kenta.

Mez ne harze ket, mont ha dont a ra, hag e teu c'hoaz da gaout he Ebestel. Ar re-ma a ioa kousket ato, ha Jezuz a zistro da lavaret ar memez pedenn evit ann drede guech. Teir guech eta e c'houlennaz ouz he Dad pellât ar c'halir diouthan, mez teir guech ive e lavaraz : « Gouskoude ho polontez bezet great ! » Setu hen o koeza enn angouni, krena 'ra, hirvoudi 'ra, ha ken tenn eo varnhezan, ma tiver diouz he gorf var ann douar

evel eur c'houezenn a c'hoad. Flastret eo dindan puez pec'hejou ann dud evel dindan eur waskell.

Eunn eal a ziskennaz euz ann env evit rei nerz ha kalon da Jezuz.



Jezuz er jardin Olivet.

Ann Ebestel a jome kousket ato, lavaret a reaz d'ezho neuze : « Savit brema, ann hini en deuz va guerzet, n'e ma mui pell. »

Judaz o rei Jezuz da anaout d'ar Iuzevien.

Judaz a ioa bet roet dezhan eur vandenn soudarded evit kemer Jezuz, hag e tenont var-heleerc'h, klezeier, bisier ha leterniou gantho enn ho daouarn. Lavaret en devoa dezho : « Ann hini ma roin eur pok dezhan, hennez eo ; krogit ennhan. »

Pa vel eta Jezuz er jardin, e tosta outhan hag e ro dezhan eur pok. « Va mignoun, eme Jezuz, d'ober petra oc'h-hu deuet ama ? » Jezuz a ia neuze a-benn d'ar zoudarded, hag a c'houlenn outho piou a glaskent. « Jezuz a Nazareth, » emezho. « Me eo ! » a lavar Jezuz. Ha kerkent hi gouezaz d'ann douar, evel ma vijent bet skoet gant eunn tarz-kurun. Jezuz a rea kement-ze dezho evit diskuez ne jome etre ho daouarn nemet anezhan he-unan. Ha pa ouent savet, e c'houlenn digantho eur vech c'hoaz : « Piou a glaskit ? » — « Jezuz a Nazareth ! » emezho. Ha Jezuz a respont : « Me eo, em euz lavaret dehoc'h dija ! Deuet oc'h d'am c'hemer gant klezeier ha bisier, evel pa ven eul laër. Perak n'o peuz ket kroget ennhon kentoc'h, p'edon bemdez enn ho touez, o prezek ? » Ar zoudarded en em zestum tro var dro dezhan evit her c'hemer. Sant Per a ioa eno, ha p'o guelaz oc'h astenn ho daouarn evit kregi enn he Vestr, e tennaz he gleze, hag e trouc'haz skouarn unan anezho. Mez Jezuz a lavar dezhan : « Lezit ho kleze, n'em euz nemet goulenn ouz va Zad a zo enn env, hag e tigasso elez aoualc'h d'am, difenn. » Hag e pareaz he skouarn d'ar zoudard. Neuze ar zoudarded a grog e Jezuz, hag her c'hassont gantho goude beza he liammet evel eunn torfetour.

Ann Diskibien a zo tec'het kuit, ne z'euz chomet nemet Per ha Ian : ar re-ma a heuliaz ho Mestr a ziabell.

Jezuz dirak Kaïphaz.

Euz ar Jardin Olivet oue bet kasset Jezuz da di Kaïphaz. Kaïphaz oa belek braz ar Iuzevien, hag enn he di edo ann doktoret euz al lezenn gant


eleiz a Pharizianed. Goulenn a ra digant Jezuz petra eo al lezenn nevez a brezege d'ar bobl. Ha Jezuz a respont : « Prezeget em euz dirak ann holl, mar fell dehoc'h gouzout petra em euz prezeget, goulennit digant ar re o deuz va c'hlevet. » Unan euz ar re a ioa eno a zao neuze he zourn evit rei eur javedad da Jezuz : « Hag evelse eo, emezhan, e komser ouz ar belek braz ? » Jezuz a respont gant douzder : « Mar em euz komzet fall, lavarit d'inn penaoz, mar em euz komzet mad, perak e skoit ganen ? » Kaer o devoa klask testoufaoz, test ebet ne gavent da c'hellout tamall eunn torfet bennak d'ezhan, ha Jezuz ne responte netra d'ar pezh a veze lavaret enn he enep. Er-fin, ar belek-braz a zao : « Enn hano Doue, emezhan, me lavar d'ehoc'h respont d'eomp : ha c'houi eo ar Messi ? » — « Ia, a respont Jezuz, me eo. » Hag eunn dervez e veloc'h mab-ann-den, azezet enn tu deou da Zoue, he Dad, o tont var goabrenn ann env evit barn ann dud holl. » O klevet ar respontze, Kaïphaz a rogaz he zillad, enn eur lavaret : « Blasfemet en deuz, pe seurt ezomm or beuz c'hoaz a destou ? Petra zonjit a gement-se ? » Hag ar Iuzevien da respont holl : « Din eo a varo ! »

Sant Per ha Judaz epad ar Bassion.

Epad m'edo Jezuz e ti Kaïphaz, ar zoudarded ha servicherien ar belek braz a ioa chomet er porz, da doma etal ann tân. Sant Per en devoa heuliet he Vestr betek ann ti, hag, evel m'az oa goall-ien ann noz, oa deuet da doma eno etouez ar re-all. Eur plac'h euz ann ti a dosta outhan, ha, goude beza sellet piz, e lavar : « C'houi ive a ioa gant Jezuz ! » — « Me ? a respont Per, ne

c'houzon ket petra lavarit. » Ha kerkent e kanaz ar c'hillok.

Eunn nebeut varlerc'h, eur plac'h all a lavar c'hoaz : « Hema a ioa ive gant Jezuz ! » — « N'e ket guir, a respont Per, n'em euz anaoudegez ebet anezhan. » Er-fin, prest goude, ann dud a dome etal ann tân a lavar d'ezhan : « C'houi a zo sûr unan euz ar re a ioa ganthan ? » — « Nan, emezhan, n'edon ket. » — « Mez, me em beuz ho kuelek ganthan er jardin Olivet », a lavar eunn den all, hag a ioa kar d'ann hini en devoa trouc'het he skouarn dezhan gant eun taol kleze. Ouspenn diouc'h ho klevet o komz eo anad oc'h evel-dhan euz ar Galilee. Neuze Per, spontet holl hag evel kollet he benn ganthan, en em laka da doui hag a lavar n'en deuz biskoaz anavezet ann denze.



Per o nac'h he Vestr.

Allaz ! hen anaout mad a rea gouskoude : guechall en devoa lavaret dezhan : « C'hui eo hor Zalver ! c'houi 'zo mab d'ann Aotrou-Doue ! » Mez eassoc'h eo chom mad etouez ar re-vad eget etouez ar re-fall : Melkoni en deuz da veza anavezet evit he ziskib.

D'ann ampoent ma komze Per, ar c'hilloc a ganaz ann eil guech, hag edo Jezuz o tont er meaz euz ann ti. Jezuz a ra eur zell a druez var he Abostol, ha diouc'h-tu e teu da zonj da Ber euz ar pez en devoa lavaret he Vestr : « Araok m'en devezo kanet diou vech ar c'hilloc, enn noz-ma, c'houi pezo va nac'het teir guech. »

Varlerc'h ar zell karantezuz en devoa taolet he Vestr varnezhan, sant Per oue rannet he galon, hag hen mont er meaz euz ar porz da vouela d'he bec'het.

Judaz a ioa deuet ive da di Kaïphaz : Sonjal a rea penaoz Jezuz a ioa en em dennet euz a-dre daouarn ann dud fall. Gounit arc'hant a glaske kentoc'h eget ober drouk. Mez pa velaz oa koundaonet Jezuz, e savaz keuz ganthan, hag e z'eaz da gaout ar re o devoa roet arc'hant dezhan : « Pec'het am euz, emezhan, o verza eunn den n'en deuz great netra fall ebet. » Hi a respontaz : « Petra 'ra-ze d'eomp-ni ? Kement-se a zell ouzoc'h. » Judaz teuler ann arc'hant a ioa ganthan, ha mont d'en em grouga.

Sant Per varlerc'h he bec'het en deuz bet esperanz e madelez Doue, ha Judaz n'en deuz ket bet. Setu aze ar c'hemm a zo entrezho : Ar c'henta 'zo deuet da veza Sant, ann hini-all 'zo..... daonet.

Goulennoù.

Penaoz en devoa Jezuz roet d'ann Ebestel ho Vask, hervez lezen-Moïez ? — Penaoz en devoa diskuezet ec'h anaveze mad ar pez a c'hoantea Judaz da ober ? — Petra en devoa great Jezuz varlerc'h ? — Piou ne felle ket dezhan e vije goalc'het he dreid ? — Evit petra Jezuz en devoa goalc'het ho zreid d'ann Ebestel ? — Penaoz en devoa Jezuz roet d'ann Ebestel ho Vask, hervez al lezenn-nevez ? — Perak en devoa instituet Sakramant ann Aoter ? — Petra en devoa diskleriet da zant Per ? — Da beleac'h oue eat Jezuz goude beza roet ar gommunion d'ann Ebestel ? — Piou en devoa kaset ganthan er jardin ? — Da beleac'h en devoa kaset ann tri-ze ganthan guechall ? — Petra en devoa lavaret dezho da ober, ha petra o devoa great ? — Peseurt pedenn a reaz Jezuz er Jardin Olivet ? — Ped guech e lavaraz he bedenn ? — E peseurt stad eo bet epad he angouni ? — Penaoz Judaz a roaz Jezuz da anaout d'ar Iuzevien ? — Penaoz Jezuz a ziskuezaz oa hen ar Mestr ? — Da beleac'h oue bet kaset Jezuz euz ar Jardin Olivet ? — Petra 'choulennaz ar belek braz diganthen ? — Ha petra 'respontaz Jezuz ? — Petra 'choulennaz er-fin Kaïphaz, ha petra 'respontaz Jezuz ? — Perak oue koundaonet Jezuz e ti Kaïphaz ? — Ped guech sant Per en deuz nac'het Jezuz ? — Penaoz ? — E peleac'h ? — Dirak piou ? — Petra en devoa lavaret sant Per guechall da Jezuz ? — Perak en deuz nac'het he Vestr ? — Petra en devoa digasset sonj d'ezhan euz he bec'het ? — Petra 'reaz pa anavezaz he bec'het ? — Perak Judaz en devoa guerzet Jezuz ? — Petra 'zonje en dije great Jezuz ? — Petra oue lavaret dezhan gant ar re m'en devoa bet arc'hant diganthen, ha peseurt respont a reaz ? — Petra 'reaz Judaz, pa anavezaz he bec'het ?

XVII

Guener ar Groaz.

Jezuz dirak Pons-Pilat.

Jezuz a ioa bet koundaonet gant Kaïphaz, mez ar luzevien o veza n'oañt ket mui ar vistri, pe guir edo ho bro dindan galloud ann Impalaer a Rom, ne c'hellent ket lakât den ebet d'ar maro. Pons-Pilat a rene enn amzer-ze ar vro enn hano ann Impalaer. Diouz ar mintin eta oue kasset Jezuz da di Bilat. « Petra 'damallit d'ann den-ma ? » a c'houlennaz outho. « Ma vije bet divlamm, emezho, n'or bije ket hen digasset dehoc'h. » Pilat a c'houlenn digant Jezuz piou oa, petra 'rea; mez kaer en devoa, ne gave netra da damall d'ezhan. Pilat a anaveze mad ar Pharizianet, hag a vele o devoa kassouni ouz Jezuz. Allaz ! Pilat n'oa ket eunn den a galon, ne grede ket komz d'ar luzevien evel m'oa dleet, hag e klaske kentoc'h digareziou evit tenna Jezuz euz-a-dre ho daouarn. Mez n'e ket gant digareziou e c'heller herzell ouz eur bobl kounnaret. « Ne gavan abek ebet enn den-ze, » emezhan.

Ar luzevien, gant aoun ne vije lezet Jezuz, a zave ho mouez goassoc'h-goaz enn he enep : « Azalêk ar Galilee betek Jerusalem, emezho, ne ra nemet prezek enep ar c'houarnamant. » Pilat o klevet komz oa Jezuz euz ar Galilee, a lavaraz : « Mar deo euz ar Galilee, e ma dindan galloud Herodes a zo o rên ar vro-ze ; kassit anezhan da Herodes. »

Herodes a ioa d'ar mare-ze e kear Jerusalem.


Hennez eo en devoa lakeat sant Iañ d'ar maro ^{Breizh} evit plijout d'eunn danserez. C'hoant en devoa e raje Jezuz eur mirakl bennak dirazhan, mez ne felle ket da Jezuz ober netra dirak eunn den a vuez fall hag eur muntre evel m'oa Herodes ; ha d'ann holl goulennou oue great dezhan, ne respontaz ger ebet. Setu perak ar Roue a iez drouk ennhan, ha goude beza her goapeat aoualc'h, e reaz guiska eur zaë-venn d'ezhan, evel da eunn den diskiantet, hag her c'hassaz enn-dro da Bilat.

Pilat en dije karet chom heb ober drouk da Jezuz, hag ouspenn spontet oa bet gant ar pezh en devoa klevet gant he vaouez : « N'en em emellomp ket euz ann den santel-ze, emezhi, rag bet em beuz enn noz-ma divar-he-benn eunn hunvre hag en deuz great poan vraz d'inn. »

Evit savetei Jezuz, setu ama penaoz e c'hen em gemeraz : Da c'houeliou Pask edo ar c'hiz da denna eunn torfetour er meaz euz ar prizoun. Er blavez-ze ez 'oa er prizoun eunn torfetour braz, hanvet Barabbaz : « Piou a lakein er bla-ma er meaz euz ar prizoun ? Barabbaz pe Jezuz ? » Ne grede ket e vije bet guell gantho savetei eunn den ken divalo, kentoc'h eget lezel Jezuz. Mez fazia 'rea, rak hi a c'houlenn Barabbaz. Ha gouskoude Barabbaz a ioa eul laer hag eur muntre ! « Petra eta a rinn-me euz Jezuz-Krist ? » — « Stagit anezhan ouz ar groaz. » — « Mez peseurt drouk en deuz great », a lavar Pilat eur vech c'hoaz ? — « Stagit anezhan ouz ar groaz », a gri ato ar bobl.

Evelkent, Pilat a gave diez plega da dud kounnaret, ha neuze, evit ober dezho tevel, e ra he zonz lakât Jezuz enn eur stad truezuz, hag e lavar d'ar zoudarded her skourjeza.

Ar zoudarded her c'hass eta gantho : hen divizka 'reont, ha goude beza her staget ouz eur peul, e tispennont he gorf a dauliou : ne ehanont da skei, ken na oue he gorf leun a c'hoad ha goloet a c'houliou. Da c'houde, e taolont var he ziouskoaz eur vantel ruz, evel ma ve Roue, evit ober goab anezhan, abalamour m'en devoa lavaret oa Roue. Lakat a reont eur benduen enn he zourn, hag eur gurunen-spern var he benn. Neuze e stouont dirazhan, enn eur lavaret dre farserez : « Ni ho salud, Roue ar Iuzevien ! » Ha Jezuz n'en em glemme ket : he visaj dudiuz, a gouez dirazhan elez ar Baradoz evit hen adori, hen lezel a ra da veza labezet gant ann dud fall var ann douar !



Jezuz skourjezet.

Pilat, pa velaz Jezuz enn eur stad ken din a druez, hen digassaz enn-dro dirak ar bobl, hag a

1. Caer I eur yoduen

2. Goll Muelan eur benduen

lavaraz ouz hen diskuez : « Setu ama ann den ! » Guir a lavare Pilat : setu ann den n'en deuz great nemet vad etouez ann dud, ann den a rea burzudou ker kaer e kement leac'h ma tremene, ann den a lakea da dec'het ann diaoul, a barea ar reglanv, a resusite ar re-varo, setu ar Messi a c'hortoze ann holl abaoe pevar mil bloaz, setu ann den ! E ma dianavezet ive gant ann holl ! Ar goad a zivere euz he gorf, mez ar goad, eleac'h mouda kounnar al loened gouez-ze, a rea d'ezho iudal goassoc'h goaz : « Ra vezo staget ouz ar groaz ! » Pilat a lavar ato : « Ne gavan netra da damall d'ezhan. » Hag ar Iuzevien a respont : « Roue eo en deuz lavaret, ha nep piou bennak a glask beza Roue en em zav a enep ann Impalaer : mar lezit hema da vont kuit, n'oc'h ket mignoun d'ann Impalaer. »

Ar c'homzou-ze a ra aoun da Bilat. Pilat ne glaske ket ober drouk, mez guelloc'h oa ganthan eveikent koll Jezuz eget koll he garg. Digass a reaz dour d'ezhan, goalc'hi 'ra he zaouarn, hag e lavar : « Her c'hassit ganhoc'h, ha stagit anezhan ouz ar groaz, mar kirit : evidon-me a zo didamall euz maro ann den-ze ! »

Pilat a rea eur gaou : rak eunn den a zo divlamm a ve eunn torfet her lakat d'ar maro, ha Pilat a dlie difenn Jezuz p'e guir ne gave abek ebet ennan hag ouspenn hen oa ar mestr. Ha setu perak hano Pilat a zo eunn hano milliget ; hag ar gristenien a lavaro bepret enn ho fedenn diouz ar minton ha diouz ann noz : « Jezuz en deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat. »

Ar bobl, pa oue bet laosket Jezuz gantho, a griaz holl : « He c'hoad, mar kar, ra gouezo var-nomp-ni ha var hor bugale ! »

Roet en deuz ann Aotrou-Doue ho goulenn dezho. Goad Jezuz-Krist a zo kouezet e guirionez var ar Iuzevien, rak chomet int abaoe neuze da veza eur bobl milliget ha disprizet gant ann holl !

Hent ar groaz.

Douget eo bet eta ar zetanz, Jezuz a zo o vont da veza lakeat d'ar maro. Ar Iuzevien a visk dezhan adarre he zillad, ha goudeze e sammjont ar groaz pounner var he ziouskoaz, hag her stlejont etrezek menez Kalvar.



Ar Veronik o sec'hi he visaj da Jezuz.

Eunn druez oa guelet Jezuz, daou-bleget dindan ar beac'h, bruzunet dindan ann taoliou, melkoniet dindan ar goall-gomzou. Teir guech e kouezaz var ann hent, hag oue red da eunn den a

Ciren, he hano Simon, rei sikour dezhan da zougen he groaz. Peleac'h e ma eta ann Ebestel ? Allaz ! Aoun o deuz, eat int da guzât ! Eur vaouez e deuz muioc'h a galon evitho : heb aoun na mez ebet, e treuz ar vanden dud dinatur, a ioa o iudal enn-dro da Jezuz, hag e z'a da zec'hi he visaj, goloet a c'huezen hag a c'hoad. Jezuz he zrugarekaz hag a lezaz merk he visaj var al lyenen m'e devoa en em zervichet : ar vaouez-ze eo san-tez Veronik.

Merc'hed a Jerusalem a heulie Jezuz var menez Kalvar, hag a skuille d'elou. Jezuz a lavaraz d'ezho : « Ne vouelit ket varnon-me, mez gouelit kentoc'h varnoc'h-oc'h-unan ha var ho pugale, rak dont a reio eunn dervez ma vezo truezuz doare ar mammou abalamour d'ho bugale ! »

Var menez Kalvar.

P'oue erruet er-fin Jezuz var menez Kalvar, ar zoudarded a ginnigaz dezhan guin ha vestl mesket enn eunn douez evit bihanât he boan ; mez Jezuz n'oa ket he zonj bihanât he boan, ha ne falvezaz ket ganthan eva. Hen diviska reont neuze hag hen astenn var ar groaz. Goude beza staget gant tachou he zaouarn hag he dreid, oue savet ar groaz enn he za. Var dro krezdeiz oa d'ar mare-ze. Diou groaz-all a ioa bet savet a gleiz hag a zeou da Jezuz, evit ann daou laër a dlle beza krusifiet enn-dro dezhan.

Truezuz oa guelet Jezuz var ar groaz : he c'hoad a zivere diouz he gorf var ann douar. Mez plijadur a gemere c'hoaz ar Iuzevien oc'h ober goab anezhan, hag e lavarent : « Mar doc'h Mab

Done, diskennit eta divar ar groaz-ze ! » Lod a oje ho fenn : « Sell, emezho, saveteat en deuz re-all ha ne c'hell ket en em zavetei he-unan ! » Ar zoudarded ive ne reant nemet c'hoarzin. Poan en devoa Jezuz o velet kement-all, hag e lavare : « Va Zad, pardounit dezho, rak ne c'houzont ket petra 'reont ! »


Unan euz al laëroun, a ioa krusifiet gant Jezuz, a voall-gomze enn he enep. Mez ann'hini all, furoc'h, a lavare : « Ni 'c'houzanv poaniou 'zo dleet d'eomp : hag hema, peseurt drouk en deuz great ? » Distrei-ra neuze ouz Jezuz : « Mestr, emezhan, o pet sonj ac'hanon, pa vioc'h eat d'ho rouantelezh ! » Jezuz a zo bepret digor he galon evit selaou pedenn ar bec'herien hag a respont dezhan raktal : « Hirio zoken c'houi 'vezo ganèn er Baradoz ! »

Ar Verc'hez-Vari a ioa eharz treid ar groaz gant sant Ian ha Mari-Madalen.

Var hent menez Kalvar, pebez rann-galon oa bet evit ar vamm baour-ze gullet he mab Jezuz enn eur stad ken glac'haruz ? E tal ar groaz, e chomm enn he za, rak hi felle dezhi gouzanv ar Bassion, a-unan gant he mab, evit he zikour da zavetei ann dud. Ha setu perak araok mervel, Jezuz a ra evit-hi hag evidomp eun dra karan-tez-meurbet. En eur zellet ouz sant Ian a ioa chomet ganthi eharz treid ar groaz, e lavar dezhi : « Setu aze ho mab ! » Ha da c'houde e lavar ive da zant Ian en eur ziskuez ar Verc'hez : « Setu aze ho mamm ! » A zivar-neuze ar re-holl 'zo fidel da Jezuz, evel sant Ian, evel sant Ian, a zo bugale d'ar Verc'hez Vari ha breudeur da Jezuz-Krist. Peb kristen a c'hell goulenn skoazell diganthi evel digant ar vamm garantezussa.

A. en un ija - 1890

Var dro krezdeiz, ann env hag ann douar oue goloet a denvalijen, hag a jomaz enn denvalijen, epad m'edo beo Jezuz var ar groaz. Eur vech Jezuz en em glemm : « Sec'het am euz ! » emezhan ; evel ma vije o c'houlenn da eva. Eur zoudard a ginnik dezhan eur berad guinegr, gant eunn tamm spoue, e penn eur vaz. Ne ra nemet tanva hebken, hag e lavar neuze gant eur vouez krèn : « Echu eo peb tra ! » Varlerc'h ar ger-ze Jezuz a zoubl he benn, a rent eunn huanad diveza, hag e ma maro !



Jezuz o vervel var ar groaz.

Kerkent m'oa tremenet, ann douar a gren, ann heol a deu da denvalât, ar reier a faout, hag ar re-varo a zao er meaz euz ho bez.

Ann dud, a ioa eno evit sellet ha goapât, a zis-

kenn e kear, spontet-holl. Ar c'habiten hag he zoudarded, en em gave ivê var menez Kalvar, a sko var boul ho c'halon, o lavaret : « E guirionez, hennez eo Mab ann Aotrou-Doue ! »

Diouc'h ann noz, eur zoudard a zigoraz kostez hor Zalver gant eun taol lans, evit gouzout ha maro oa : kerkent e redaz dour ha goad euz Kalon Sakr Jezuz.

Joseph a Arimathii a ioa eunn den pinvidik hag a garie Jezuz. Eur park en devoa tost da venez Kalvar, hag e c'houlennaz ouz Pilat enterri Jezuz ennhan. Pilat a roaz dezhan kounje. Nikodem, hag a ioa eunn doktor santel, a iezag ganthan da zistaga ar c'horf diouc'h ar groaz, he lyena 'rejoint gant eul linser venn, ha goudeze e lakejont anezhan enn eur bez nevêz e park Joseph.

Antronoz-vintin, ar Pharizianed en em zestum c'hoaz e ti Pilat : « Aotrou, emezho, dont a ra da zonzj d'eomp en deuz lavaret ann den-ze epad he vuez : « Me zavo a varo da veo abenn tri dervez ! » Mad e ve eta lakât soudarded enn-dro d'ar bez, gant aoun na deuffe he ziskibien da gerc'hat he gorf, rag hi lavarfe neuze goude eo savet euz a varo da veo. » Pilat a respond : « Soudarded o peuz ; diouallit anezhan evel ma keroc'h. »

Kass a rejont eta soudarded da ziuall ar bez, hag ar ziel oue lakeat gantho var ar mean, a ioa ouz he stanka.

Goulennou.

Perak ar Iuzevien n'o devoa ket lakeat Jezuz d'ar maro diouc'h-tu m'oue bet koundaonet gant Kaïphaz ? — Piou oa ar mestr e Jerusalem d'ar mare-ze ? — Peseurt sonj en devoa Pilat e kever Jezuz ? — Pebez digareziou en devoa klasket Pilat evit savetei Jezuz ? — Petra en devoa diskleriet Pilat goude beza goulennet ouz Jezuz, piou oa ha petra 'rea ? —

Perak en devoa he gasset d'ar Roue Herodes ? — Petra 'felle da Herodes en dije great Jezuz, ha petra 'lavaraz Jezuz d'ezhan ? — Petra oa Barabbaz ? — Peseurt sonj en devoe Pilat o lakât Jezuz e kemm gant Barabbaz ? — Pilat, goude beza manket, c'hoaz eur vech, gant Barabbaz, petra en devoa klasket da ober evit savetei Jezuz ? — Penaoz ar zoudarded o devoa goapeat Jezuz abalamour ma'z 'oa Roue ? — Petra en devoa lavaret Pilat d'ar Iuzevien en eur ziskuez Jezuz d'ezho ? — Petra 'zonjit, c'houi, euz ar ger-ze ? — Petra 'respontaz ar Iuzevien ? — Penaoz ar Iuzevien o devoa great aoun da Bilat, ha deuet a-benn anezhan ? — Perak Pilat en deuz er-fin koundaonet Jezuz d'ar maro ? — Petra en deuz great evit diskuez oa dibec'h he goustianz ? — Pilat, hag hen a lavare ar virionez, pa lavare oa divlamm ? — Perak e tlie hag e c'helle Pilat savetei Jezuz ? — Perak n'en deuz ket he zave-teat ? — Penaoz eo bet milliget Pilat ? — Petra o devoa respontet ar Iuzevien, p'oue bet koundaonet Jezuz d'ar maro, ha penaoz o deuz bet ho goulenn ? — Penaoz en deuz Jezuz kerez var menez Kalvar ? — Piou 'roaz sikour dezhan da zougen he groaz ? — Piou 'zec'haz he visaj ? — Petra 'oue bet kiniget da Jezuz, stag ouz ar groaz, evit bihanât he boan ? — Var-dro ped heur eo bet savet ar groaz var menez Kalvar ? — Piou 'zo bet krusifiet a gleiz hag a zeou ganthan ? — Petra 'lavare ar Iuzevien evit goapât Jezuz var ar groaz ? Ha petra 'respontaz Jezuz ? — Petra 'lavare ann daou laër a ioa krusifiet gant Jezuz ? — E pelec'h edo ar Verc'hez-Vari epad m'oa he mab var ar groaz ? — Piou a ioa ganthi ? — Petra en deuz lavaret Jezuz d'he vamm ha da zant Ian, ha petra 'zo da entent dre he gomzou ? — Penaoz e teuz da veza ann env hag ann douar, p'edo Jezuz o vont da vervel ? — Pebez komzou en deuz lavaret Jezuz araok mervel ? — Petra 'lavaraz ar c'habiten a ioa chomet da ziuall Jezuz ? — Perak eur zoudard en deuz digoret kostez hor Zalver ? — Piou o devoa enterret Jezuz ? — Petra o devoa great ar Pharizianet evit diouall Jezuz er bez.

JEZUZ,
ENN AMZER M'OA RESUSITET.

XVIII
Sul Vask.

D'ar zul-vintin, kerkent ha goulou-deiz, Mari-Madalen, Mari, mamm da Jakez, ha Salome, a deuaz d'ar bez, evit skuill louzou a c'houez-vad var gorf hor Zalver. Hag hi 'lavare entrezho : « Piou a lammo ar mean a zo lakeat da stanka ar bez ? » Ne zonjent ket petra a ioa erruet.



Jezuz-Krist o sevel euz ar bez.

Ene Jezuz-Krist a ioa diskennet d'al limbou, da glask ann dud santel her gortoze eno. Mez ann ene-ze, tri dervez goude m'oa bet dispartiet diouz he gorf, a zistroaz da rei buez dezhan, ha neuze Jezuz, deuet a nevez da veza beo, a dreuz ar mean, hag a zao d'ann env, epad m'edo ann douar o krena.

Eunn eal a ioa diskennet euz ar Baradoz : hen eo a lammaz ar mean divar ar bez, ha brema edo azezet var c'horre ar mean. Guenn oa 'vel ann erc'h ha skeduz evel eul luc'heden : ouz he velet, ar zoudarded spontet a gouez d'ann douar, ha goudeze e tech'hjont kuit buhana ma c'hellent.

Savet oa ann heol, pa erruaz Mari-Madalen gant ar merc'het all. Ha neuze pebez estlamm ha pebez glac'har evitho ! Digor oa ar bez, ar mean a ioa lammet, al linser taolet enn eunn tu, soudard ebet var dro, eunn eal o tiouall. Mari-Madalen a iez da gass ar c'helou da zant Per ha da zant Ian : « Tennet o deuz va Zalver euz ar bez, emezhi, ha ne c'houzon ket e peleac'h eo lakeat gantho ! » Hini anezho ne zonje e c'helle beza resusitet.

Ken na oue echu he Bassion gant hor Zalver, ann Ebestel a c'hede m'en dije Jezuz great eur burzud bennak, evit brassa mez ar Pharizianet ; p'o devoue her gueleit o vervel, e teujont da goll kalon, ha da Zul-Vask' oa stard dezho kredi e vije resusitet.

Eaz eo gouzout, Jezuz en em ziskuezaz da genta d'he vamm.

Mari-Madalen her guelaz varlerc'h. Goude beza kasset kelou da zant Per ha da zant Ian euz ar pez a ioa erruet, e teuzaz adarre d'ar bez, hag e chomaz eno da glask tro-var-dro. Er-fin, hi a velaz eunn den henvel ouz eur jardiner : « Mar

d'e c'houi eo o peuz he lammet, emezhi, lavarit d'inn e peleac'h e ma, ha m'her c'hasso ganen ! » — « Mari ! » a lavar d'ezhi.

Hi a zell hag hen anavez : Jezuz oa. En em strinka ra d'he dreid hag e lavar d'he zro : « O va Mestr ! » Eur pennadik goude, keit m'edo ar merc'het santel var ann hent da gear, Jezuz en em ziskuez d'ezho evit ho zrugarekât da veza heuliet ar Verc'hez ha chomet ganthi epad ar Bassion. Hen a lavar d'ezho : « Me ho salud ! » hag a zesk evelse eo resusitet.

Sant Per a velaz he Vestr ive, var dro kreiz ann deiz, ha meur-a-hini all c'hoaz, evel daou ziskib var hent Emmaüz. Ar re-ma, er memez devez, dioc'h ann abardaez, a ioa eta o vont da Emmaüz, hag en eur ober hent a gomse entrezho euz ar pez oue c'hoarvezet. Peb-hini a lavare he c'her divarbenn ann traou-ze, hag oant nec'het ho daou. Epad ma tivizent evelse, setu eunn divroad oc'h en em gaout : goulenn a reaz ober hent gantho. « Euz a betra e komzit eta, emezhan, ha perak oc'h ken glac'haret ? » — « Mez, a respont unan anezho, n'euz nemedhoc'h ne oufe ket ar pez a zo tremenet enn deiziou-ma ? » — « Petra eta 'zo c'hoarvezet ? » — « Jezuz, ar prophet braz, ken brudet dre he vuzudou, a zo bet koundaonet ha lakeat d'ar maro ! » Hag hi kounta ann traou a ioa digouezet, ha lavaret dezhan pegen ankenniet oant. Guir eo, merc'het o deuz diskleriet oa resusitet Jezuz, mez ne m'aint ket da gredi. « Me gav d'inn, eme ann divroad, n'oc'h ket mad da entent ar Skritur-Sakr. Ne fell ket dehoc'h eta kredi kement zo diskleriet gant ar prophetet ! » Hag e tiskuezaz dezho e tlie en em gaout ar pez a ioa en em gavet.

O veza erruet e Emmaüz, Jezuz a reaz ann neuz da vont pelloc'h. « Nann, emezho, pardaez eo dija, chomit ganeomp ! » Ann divroad a jomaz enn ho c'houmpagnunez, hag ez eaz enn ti gantho. Epad m'edont ouz taol, e kemeraz eunn tamm bara, hag o veza he venniget ha rannet etre daou, her c'hinnigaz dezho da zibri. Kerkent, ho daoulagad a zigoraz hag hen anavesjont : Jezuz oa. Mez, ker buhan e tisparissaz.

Lavaret a reant ann eil d'egile : « N'oa ket tomm bero hor c'halon enn hor c'hreiz epad ma komze ganeomp enn hent ha ma tisplege d'eomp ar Skritur ? »


Hi a zistroaz dioc'h-tu da Jerusalem, evit lavarit ar pez o devoa gullet. Mez n'ouent ket kredet.

Varlerc'h kuz-heol, ann Ebestel a ioa assambllet enn eur zal ; alc'houezet o devoa ann doriou, gant aoun rak ar Iuzevien. N'oa ken kaoz nemet euz ar pez a lavare meur-a-unan oa resusitet hor Zalver. Ha setu, enn eunn taol, hi a vel Jezuz enn ho zouez : « Ar peoc'h-ra vezo ganehoc'h ! » emezhan. Ann Ebestel oue souezet ha spontet holl : rak ne c'hellent ket kredi, ann doriou o veza serret, e vije deuet eunn den beo enn ho zouez. Neuze, Jezuz a lavaraz : « Perak e chomit var ar zonzouze ? Sellit ouz va daouarn hag ouz va zreid, ha touchit outho ; eurspered n'en deuz na kig nag askorn, evel a velit am euz-me. » Eunn nebeut goude, e c'houlennaz outho eunn dra bennak da zibri.

Sant Thomas n'edo ket gant ann Ebestel all. Ar re-ma a lavaraz eta dezhan : « Ni hor beuz gullet ar Mestr. » Mez sant Thomas ne grede ket. « Ma ne lakân ket va biz e toull ann tachou, ha va dourn e goul he gostez, ne gredinn ket, » emezhan.

Eiz dez goude, ann Ebestel a ioa assambllet

adarre, er memez sal, hag ar vech-ma edo Thomas gantho. Evel ar vech kenta, Jezuz en em gav, enn eunn taol, enn ho zouez, hag a lavar da zant Thomas : « Lakit ho piz ama, sellit ouz va daouarn, ha lakiit ive ho tourn em c'hostez. Kredit brema. » Sant Thomas a gouez d'ann daoulinn, en eur lavaret : « O va Mestr ha va Doue ! » — « Thomas, eme Jezuz d'ezhan, kredet o peuz abalamour m'o peuz gueleit : eüruz ar re a gred heb beza gueleit ! »



Jezuz ha sant Thomas.

Goude m'oa resusitet, Jezuz a jomaz daou-ugent devez var ann douar. Aliez ec'h en em ziskueze d'he Ziskibien evit ho lakât da entent mad al le-zenn gristen hag evit merka dezho petra 'dlient da ober e kever ar zakramanchou.

Goulennou.


Piou a ioa eat mintin-mad da velet ar bez ? — Evit-petra ? — Da beleac'h eo diskennet ene Jezuz, goude he varo ? — Peur eo distroet evit en em unissa gant he gorf ? — Petra 'reaz ann douar, pa resusitaz Jezuz ? — Goude m'oa resusitet Jezuz, piou a lammaz ar mean divar ar bez ? — Petra 'reaz Mari-Madalen pa velaz oa digor ar bez ? — Petra 'zonje ann Ebistel epad ar Bassion ? — Da biou eo en em ziskuezet Jezuz da Zul-Vask ? — Penaoz Mari-Madalen a velaz hag a anavezaz hor Zalver ? — Petra en em gavaz gant daou Ziskih o vont da Emmaüz ? — Penaoz Jezuz a apparisaz d'ann Ebistel, d'ar zul da noz ? — Penaoz e tiskueaz dezho oa beo kerkoulz ha diagent ? — Penaoz sant Thomas en deuz kredet er-fin oa resusitet Jezuz ? — Petra lavaraz Jezuz dezhan goude ? — Peget e chomaz Jezuz var ann douar goude m'oa resusitet ? — Petra en deuz great gant he Ebistel epad ann amzer-ze ?

XIX

Ar laou-Bask pe ann Asansion.

D'ann daou-ugentvet dervez varlerc'h ar Resurkcion, da laou ann Asansion, mintin mad, ann Ebistel a ioa assambllet er gear a Jerusalem. Jezuz a lavar dezho chomm c'hoaz eno eur pennadik. « Ar Spered-Santel emezhan, a ziskenno enn ho kalonou, da rei dehoc'h nerz ha sklerijenn. It da brezek ann Aviel dre ar bed holl. Badezit ann dud enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel, ha deskit dezho miret ar pezh em euz gourc'hemennet. Bemdez emaeunn ganehoc'h keit ha ma pado ann amzer. Ann nep piou bennak a vezo badezet hag a gredo ennon, hennez a ielo d'ar Baradoz, ann nep ne gredo ket a ielo d'ann Ifern ! »

Goude beza roet he aliou diveza, Jezuz a bignaz gant he Ebestel ha pemp-kant den all var menez Olivet. Eno, epad m'edo ann holl stouet d'ann daoulinn, Jezuz a zistag he dreid diouz ann douar, hag a zao etrezek ann env.



Hor Zalver o pignat enn env.

Ann Ebestel a jomaz sebezet, ne dénnent ket ho daoulagad divar ho Mestr. Kuzet oa dija gant eur goabrenn, hag edont ato o sellet. Neuze daou eal, guisket e guenn, a deuz da lavaret dezho : « Perak e chomit, c'houi aze, da zellet ouz ann env. Jezuz a zo savet d'ann env, hag a ziskenno eunn deiz egiz m'o peuz he velet o sevel. » Hag e vezo evit barn ar re veo hag ar re varo.

Deiz ann Asansion, da lavaret eo d'ann deiz m'oa savet d'ann env, Jezuz a gassaz ganthan d'ar Baradoz eneo ann dud just a ioa ouz he

c'headal. Evelse, heuliet gant ar zent a bigne ganthan euz ann douar, ha gant ann elez a ziskenne euz ann env d'hen diarbenn, e savaz betek ann tu-deou da Zoue he Dad, eleac'h m'eo azezet ske-duz, evel eur Roue var he drôn !

Gloar da Jezuz, Roue ann env hag ann douar, en deuz hor c'hrouet hag hor saveteet !

Goulennou.

Pebez aliou en deuz roet Jezuz d'he Ebestel, araok pignat d'ann env ? — Euz a beleac'h eo savet d'ann env ? — Petra 'lavaraz ann elez d'ann Ebestel, a ioa o sellet ouz Jezuz o pignat d'ann env ? — Piu en deuz kaset Jezuz ganthan d'ar Baradoz, deiz ann Asansion ?

XX

Sul ar Pantekost.


Dek devez varlerc'h ann Asansion, hag hanterkant varlerc'h Pask, e ma sul ar Pantekost. Ar Pantekost a ioa eur goul braz evit ar luzevien ; rak d'ann deiz - ze, Moïzez a brezegaz ar vech kenta al lezenn en devoa roet ann Aotrou-Doue dezhan var menez Sinaï. Ar Pantekost a zo eur goul braz ive 'vit ar gristenien ; rak d'ann deiz-ze eo diskennet ar Spered-Santel var ann Ebestel, hag e prezegaz sant Per ann Aviel ar vech kenta.

Ar Spered-Santel.

Ann Ebestel a ioa chomet e Jerusalem, goude laou ann Asansion ; destumet oant enn-dro d'ar

Ver'hez, enn eur zal, hanvet ar Cenacl, ha ne ehanent da bedi.

Dervez ar Pantekost, var dro nav heur diouz ar mintin, hi a glevaz, enn eunn taol-kount, eunn trouz braz, hag a ioa henvel ouz trouz eur gorventenn. Ha kerkent, e veljont evel teodou-tân o strinka hag o tont da blava, unan var benn peb hini anezho.



Ar Spered-Santel o tiskenn var ann Ebestel.

Ar Spered-Santel oa a ziskenne evelse var ann Ebestel. Enn dervez-ze zoken ann Ebestel en em lakeaz da brezek ann Aviel. Hag eaz oa guelet oant leun euz ar Spered-Santel. Ar re-holl ho c'hleve, n'euz forz a be-seurt bro quent, a entente mad ho c'homzou. Var-dro tri-mil den a c'houlenmaz ouz sant Per beza badezet diouc'h-tu enn

deiz-ze. Red oa d'ann Ebestel en em zispartia, evit mont da brezek ann Aviel dre bevar-c'horn ar bed. Mez araok kimmiada, hi a renkaz, e berr gomzou, ar pezh a dlïe ann dud da zeski ha da gredi evit beza salvet.

Ann Iliz.

Ann Ebestel, goude ho disparti, a ieaz unan enn eunn tu, eunn all enn eunn tu-all, da gement bro a ioa. Allaz ! n'o deuz ket kavet, etouez ann dud, guelloc'h digemer eget Jezuz ho Mestr : holl int bet merzeriet. Mez goad ar verzerien, evel hini Jezuz-Krist, a zo eur c'hlizenn frouezuz ; abred pe zivezad e ra d'ar gristenien gounit.

Evelse eo bet savet ann Iliz katholik.

Araok mervel, ann Ebestel o deuz great eskibien ha beleien evit prezek enn ho leac'h hag ober kristenien evelldho.

Abaoue ann amzer-ze, ann Aviel a zo bet prezeget d'ann dud, ha prezeget e vezo betek fin ar bed : kement-ze en deuz lavaret Hor Zalver.

Pa oue rannet ar bed gant ann Ebestel entrezho, sant Per a deuaz da Rom, hag eno oue krusifiet. Eleiz a Babed, var he lerc'h, a zo bet ive lakeat d'ar maro ; mez kaer en devezo ann Ifern ober trouz, ne c'hello ket diskar Iliz Jezuz-Krist : setu aze. ouspenn trivac'h-kant vloaz e ma deuet ar c'henta Pab da Rom, ha goude trivac'h-kant vloaz Vikel Jezuz-Krist a zo eno atao : rak sant Per, ar c'henta euz ann Ebestel hag ar c'henta Pab, en deuz choazet ar gear-ze evit ober anezhi ar gear-benn euz ann Iliz. Enn hon amzer ive ann Iliz a zo goall-gasset gant ann dud, mez ne ielo ket da goll, biken ann Ifern ne vezo treac'h dezhi : setu komzou hor Zalver.

Goulennou.

Pet dervez a zo etre Pask hag ann Asansion ? — Etre ann Asansion hag ar Pantekost ? — Etre Pask hag ar Pantekost ? — Perak ar Pantekost a ioa eur gouel braz evit ar luzevien ? — Perak eo eur gouel braz evit ar gristenien ? — E peleac'h edo ann Ebestel, da zul ar Pantekost, diouz ar mintin ? — Piou a ioa gantho ? — Penaoz e tiskennaz ar Spered-Santel var ann Ebestel ? — Piou en deuz prezeget da zeiz ar Pantekost ? — Pegement a dud en deuz konvertisset ar vech kenta ? — Petra o deuz great ann Ebestel araok en em zispartia ? — Pebez digemer o deuz kavet ann Ebestel etouez ann dud ? — Peseurt maro o deuz bet ? — Pa vez lazet kristenien evit ar Feiz, ha kement-ze a ra gaou d'ann Iliz ? — Pegent e pado ann Iliz var ann douar ? — Pehini euz ann Ebestel a ioa deuet da Rom ? — Perak e chomm ato Hon Tad Santel ar Pab e Rom ?.....

Ama e echu ann Histor-Santel.

ADAM

en devoa, dre he bec'het, sarret ar Baradoz,

JEZUZ

en deuz, dre he c'hras, hen digoret a nevez.

MEULET RA VEZO JEZUZ-KRIST

BEPRET !!!

TAOLENN

Da lennerien al levrik-ma..... Pajenn
9

ANN TESTAMANT KOZ

11

ANN AOTROU-DOUE,

DA C'HOUE M'EN DEUZ KROUET ANN DEN
EVIT HE HENORI VAR ANN DOUAR.

I. Krouedigez ar bed	11
II. Adam hag Eva. — Ar pec'hed kenta.....	14
III. Caïn hag Abel	15
IV. Noe hag he vugale, — Ann deluj.....	17
V. Bugale Noe. — Tour Babel	19
VI. Ann den santel Job.....	20

ANN AOTROU-DOUE,

DA C'HOUE M'EN DEUZ CHOAZET EUR BOBL
EVIT MIRET HE LEZENN VAR ANN DOUAR.

VII. Abraham galvet gant Doue. — Sodom ha Gomor...	24
VIII. Sakrifiz Abraham	25
IX. Esaü ha Jacob	27
X. Joseph guerzet gant he vreudeur.....	28
XI. Joseph anavezet gant he vreudeur	31

ANN AOTROU-DOUE,

DA C'HOUE M'EN DEUZ ROET EUL LEZENN NEVEZ
HAG EUR VRO NEVEZ D'HE BOBL.

XII. Moizez	34
-------------------	----

XIII. Ann Hebreed o tec'het euz ann Ejipt.....	35
XIV. Ann Hebreed enn desert. — Menez Sinaï.....	37
XV. Ann Hebreed e bro Chanaan.....	40
XVI. Ar Varnerien.....	40
XVII. Ar Rouaned.....	43

ANN AOTROU-DOUE,
DA C'HOUE M'EN DEUZ ROET EUR ROUE
HAG EUNN TEMPL D'HE BOBL.

XVIII. Saül ha David.....	46
XIX. Ar Roue Salomon.....	50
XX. Ar prophet Eli hag ar prophet Elisée.....	53
XXI. Ar prophet Jonas.....	58
XXII. Judith.....	60
XXIII. Ar Iuzevien e kaptivite.....	63
XXIV. Ar prophet Daniel.....	65
XXV. Esther.....	68
XXVI. Tobï.....	72
XXVII. Eleazar hag ar seiz breur Makabée.....	76
XXVIII. Judaz Makabée.....	80
XXIX. Tostât a ra ar Messi.....	82

ANN TESTAMANT NEVEZ 87

JEZUZ,

ENN AMZER M'OA IAOUANK.

I. Kerent Jezuz.....	87
Sant Joachim ha santez Anna.....	87
Ar Verc'hez Vari ha sant Joseph.....	88
Santez Elizabeth ha sant Ian.....	89
II. Ginivelez Jezuz.....	91
III. Iauankiz Jezuz.....	93
Ann tri Roue.....	93
Jezuz e kreiz ann doktored.....	95

JEZUZ,

ENN AMZER MA PREZEGE ANN AVIEL.

IV. Sant Ian Vadezour.....	97
V. Koraiz Jezuz-Krist.....	99
VI. Kenta Diskibien hor Zalver Jezuz-Krist.....	100
VII. Mirakl ar guin ha mirakl ar bara.....	102
VIII. Jezuz etouez ann dud a vor.....	104
IX. Jezuz o prezek d'ann dud divar ar meaz.....	107
Ar banket-eured.....	107
Ann had.....	107
Ar pastor mad.....	108
Ar mab prodik.....	108
Ar falz-pinvidik hag ar paour-keaz Lazar.....	110
X. Miraklou Jezuz. — Parea 'ra ar re-glanv.....	111
Mevel ar c'hantener.....	111
Ann den seizet.....	112
Ann den ganet dall.....	112
Ann dek den lor.....	112
XI. Miraklou Jezuz. — Konvertissa 'ra ar bec'herien..	114
Mari-Madalen.....	114
Zachée.....	115
XII. Miraklou Jezuz. — Kass a ra kuit ann diaoulou..	116
XIII. Miraklou Jezuz. — Resusita 'ra ar re-varo.....	117
Merc'h Jair.....	117
Mab eunn intanvez.....	118
Lazar.....	118

JEZUZ,

ENN AMZER M'OUÉ ENN HE BASSION.

XIV. Transfiguration hor Zalver Jezuz-Krist.....	120
XV. Ar Zul Bleuniou.....	121
XVI. Ar Iaou-Gamblid.....	124
Jezuz a ro ho Vask d'ann Ebestel, hervez le-	
zenn Moizez.....	124
Jezuz a c'hoalc'h ho zreid d'ann Ebestel.....	124

